

Youenn OLIER

**ISTOR
AN
EMSAV**

III

**Roazhon
imbourc'h
1972**

IMBOURC'H, KE LAOUENN BOLITIKEL

Niverenn 33/1

30 Gwengolo 1972

Stagadenn d'an niverenn 33

T a o l e n n

Y O U E N N O L I E R : I s t o r a n E m s a v

(1 e v r e n n 3)

Koumanant-bloaz : ugent lur (20 lur). K.R.P. Y. Ollivier,
1 534 25 Roazhon. Deraouiñ a ra ar c'houmanant-bloaz e miz
Genver. Ar pennadoù hag al lizhiri a zo da gas da Y. Ollivier
7 bd. A.-Burloud, 35 - RENNES.

Priz ar stagadenn-mañ : 13 lur.

CPPP 50 015

Youenn OLIER

**ISTOR
AN
EMSAV**

III

**Roazhon
imbourc'h
1972**

Fennad 19

EMIL MASSON

hag al luskad kleizour

Daoust ma n'eo ket dianav krenn anv Emil Masson ne gav ket deomp e vije bet prizet ervat biskoazh e roll en Emsav. Heverk eo bet ar roll-se koulskoude, evitañ da vezañ bet arouezennel dreist-holl. Yann Sohier hag ar Falz, dec'h, an U.D.B. hiziv a-wechoù o deus graet dave d'e labour ha d'e oberenn hogen nag an eil nag eben n'int bet awenet war-eeun gant ar skrivagner-mañ. Dibaot hini, e gwirionez, en deus lennet ha studiet e oberennoù - bet diviet buan hag ankouaet ken buan all, dre ma oant savet e galleg, evit darn. Moarvat ez eo bet adembannet e skridig "ANTEE ou les Bretons et le socialisme" un nebeut bloavezhioù zo ebarzh ar gelaouenn AR VRO, - kentoc'h avat evel un dihell gurius eget evel ur skrid-emgann broadel da brederiañ ha da gemer harp warnañ. Bezet pe vezet, hag evitañ da vezañ chomet hep kaout kalz levezon war emdroadur an Emsav dre vras ez eo da, a gav deomp, klask termeniñ personelezh ha kemennadurezh ar skrivagner broadel-mañ.

Ganet eo Emil Masson e Pondivi e 1869. Koshoc'h e oa eta eget meur a stourmer all en amzer-se, Taldir pergen ; marvet eo e Paris. Evel kalz re all n'eo deuet d'an Emsav nemet e deroù ar c'hantved-mañ, diwar-lerc'h ar birvilh broadel a savas e Breizh da heul krouidigezh "Kevredigezh Broadel Breizh". E devoud ne savas Emil Masson levrioù awenet gant Breizh nemet adal 1908 : an dastumad danevelloù a zo e anv "Les Rebelles" a voe moulet e 1909 e levr di "Pages Libres" e Paris. A-ziaraok, gwir eo, (hogen adal 1903 e oa bet savet an oberenn) en devoa embannet ur romant all, e galleg, eveljust, e ti Ollendorff e Paris : "Yves Madec, professeur de collège" a zo un doare "Dichtung und Wahrheit", da lavarout eo, ur gronnad eñvorennoù romantekaet diwar an amzer ma krogas Emil Masson gant e vicher kelenner en deskadurezh c'hall.

Hogen ne gaver meneg ebet eus an Emsav er romant-mañ, eus luskadoù sokialour ha kleizad gall liesseurt, ne lavaran ket.

Neuze eta ez eo deuet Emil Masson d'an Emsav diwezhat a-walc'h, evel ar Fusteg pe Erwan Berthou, peogwir en devoa tost daou-ugent vloaz pa lakaas moulañ "Les Rebelles" hag "Antée..."

Penaos e oa deuet da deurel evezh ouzh Breizh ? Se zo diaes da lavarout hogen kredapl bras eo e voe kiriek da emdroadur e vennoziou ar studioù saoznek en devoa graet. E devoud e oa Emil Masson e-touez ar re zesketañ en Emsav kentañ. Kelemer war ar saozneg e oa hag e-touez e labourioù lennegel kentañ e c'heller menegiñ un droidigezh c'hallek eus Carlyle (1). Dre e studioù saoznek eta ez eo deuet Emil Masson da bleidiñ gant ar broioù keltiek (Bro-Gembre, Bro-Skoz h.a.) An dra-se a zo anat e danevelloù "Les Rebelles" a laka Kembreiz war al leurenn, da skouer. Hogen bez en devoa lennet ivez Istor Breizh La Borderie peogwir ez eo dediet Antée da eñvor an "Istorour bras, Tad ar Vretoned".

Dacust d'e oad e oa Emil Masson tostoc'h d'ar rummad a armodas sevel un Emsav gwir vroadel adal 1911 eget da rummad Taldir hag ar varzhed. E gwirionez e kemeras perzh dreist-holl e labour ar Strollad broadel hag unan eus kenskrivagnerion "Breiz Dishual" e voe : eno e sine eskridoù gant an anv-pluenn Erwan Gwesnou. Hogen e oberenn bennañ war dachenn an Emsav a voe embannadur ar gelaouenn "Brug" a zeuas er-maez bep miz etre miz Meurzh 1913 ha miz Mezheven 1914.

Pacour a-walc'h e oa neuz "Brug" : ne oa nemet eizh pajennad enni. Divyezhek e oa a-hend-all, gant pennadoù e galleg e brezhoneg KIL hag e gwenedeg. Emil Masson e unan hag eñ gwenedour a orin a skrive e galleg hag eñ a savas an darn-vuiañ eus ar pennadoù e galleg dres.

A benmaenn e oa BRUG ur gelaouenn eus an tu-kleiz. Ober a rae bruderezh, da skouer, evit kelaouennoù ar gostezenn gleiz e Breizh hag e Bro-C'hall : "Le temps nouveau", "L'Humanité", "La guerre sociale", "La bataille syndicaliste", "La vie ouvrière", "La voix du peuple", "Le cri du peuple", "Le rappel du Morbihan", "Le prolétaire breton", "L'effort libre". Evel m'hon eus merket,

(1) Kouomp e troas Roparz Hemon un nebeut pajennoù eus Carlyle e 1941. Un azon a hiniennelouriezh eo an doug-se da gCarlyle.

Iod eus ar c'helaouennoù-se a oa embannet gant strolladoù ha c'hweluniadoù gall eus an tu kleiz, darn all gant kleizidi a orin breizhat.

War un dro, war an hevelep pajenn a-wechoù, - hag amañ e kejer gant amsteriegezh obererezh Emil Masson - e rae Ebar skrivagner bruderezh evit ar c'helaouennoù a-du gant Breizh, a-gleiz pe a-zehoù e vent : "Kroaz-ar-Vretoned" koulz hag "Arvorig", "Ar Bobl" pe "Ar Vro", "Brittia" zoken (a glasse koulskoude en em harpañ war gostezenn ar rouealerion c'hall), "Dihunamb", "Le Pays Breton", "Breiz Dishual". A-hend-all, meur a skrivagner eus "Breiz Dishual" ha "Dihunamb" a skrive ivez ebarzh "Brug", da skouer Loeiz Herrieu e unan hogen ivez Louis Napoléon Le Roux ha dreist-holl Jos ar Bras a sine e bennadoù gant an anv-pluenn "Bruger".

Gwelet e vo pelloc'h petra a yae d'ober sokialouriezh, - pe, kentoc'h, gwerinelouriezh ha kleizadegezh ar gelaouenn-mañ. Displegomp, da gentañ, avat, penaos e oa stag luskad "Brug" ouzh an Emsav dre vras. En niverenn gentañ, da skouer, e tiskouezed Iwerzhon evel ur patrom da Vreizh (an dra-se a oa nevez rak abaoe 1898 betek neuze e oad kustumet da gemer Kembre da uhelskouer e Breizh). Broudañ a raed eta ar stourmerion da heuliañ hent ar stourmerion iwerzhonat, dreist-holl avat hini paotred ar "Uhevregouezlek" a oa stag da vezañ brudet d'ar mare-se ; ivez, hini ar c'hweluniadoù kouerion iwerzhonat, kevredigezhioù iwerzhonat a bep seurt, hini an Iwerzhonadezed Unanet, da skouer. Ar spered etrekeltiek - a zo merk-anaout an Emsav kentañ - a bar aliesik e pajennoù ar gelaouenn. Hag eveljust n'eo ket Iwerzhon hepken a oa kinniget da drevezañ hogen Kembre ivez ; klask a raed keñveriañ an div vroad an eil ouzh eben e pep degouezh ; da skouer e tostaed ar visionerion vetodour Pritchard ha Gruffydd Jones, saverion ar "skolioù sul" en triwec'hvet kantved, ouzh Mikael an Noblez hag an Tad Maner e Breizh er c'hantved a-raok. En ur bajenn all eus ar gelaouenn e hiraezho ur gwenedour enep-kloerat da saviad ar yezh e Kembre ha na oa ket stag, da vihanañ ouzh an Iliz Katolik(1).

(1) E gwirionez e oa ken stag all ouzh ar protestantiezh.

Atizañ a raed Breizhiz da ober evel Kembreiz ha da sevel evelto ur Skol-Veur gant o arc'hant (1) pe, da vihanañ, skolioù-red evel Iwerzhoniz ar "C'hevre gouezelek".

Dres, peseurt amkanioù en devoa al luskad nevez-mañ ?

Unan eus ar re-mañ a zo dezrevellet ebarzh an niverenn 15 (Meurzh 1914) eus ar gelaouenn, en ur pennad savet e brezhoneg :

"Ar re ruz, republikaned ha sosialisted ne o'hounezont ket buan a-walc'h hor bro, abalamour o deus en em gemeret fall. Da gentañ o deus disprizet, al lod muiañ anezho, yezh ha parland o bro ha nen dint ket bet komprenet gant ar bobl..."

Merzout a reer diouzhtu amañ doare ha bevennoù obererezh al luskad-mañ. Fellout a rae dezho skignañ mennozioù an tu-kleiz e-mesk gwerin Vreizh-Izel. Ha rak-se eo e oa skridaozet BRUG e brezhoneg hag e galleg. Anzav a rae Emil Masson e oa "Breizhizel" dizesk d'ar c'houlz-se ha ne ouient na brezhoneg ken, na galleg (2). Erbediñ a rae eta e vije lennet ar gelaouenn er gêr "dirak ar gamaladed" (3). Diaes eo gouzout ha sevenet e voe biskoazh an hetadenn-mañ ha dre se n'eur ket evit barn ervat peseurt levezon gwirion he devoa BRUG e-touez tud ar bobl e Kornog ar vro (4). Mennet e oa E.M. koulskoude da ziorren ar stumm-se eus e obererezh peogwir en doa lakaet en e spered amprestañ 300 lur aour (rannet e 12 kevramm a 25 lur) evit kreskiñ anezhañ da vat (5).

Hogen un amkan en doa roet Emil Masson dezhañ e unan : aozañ ur rouedad skolioù red gant pevar skolaer a vije aet a vourc'h da vourc'h, e-lec'h e vijent chomet e-pad miz pe zaou, da zeskiñ lemm d'an dud hogen dreist-holl d'ar vugale, lenn avat galleg koulz ha brezhoneg : ar vroadelourion o unan a blege d'an divyezhegezh d'ar mare-se ; didalvez eo merkañ avat ne oa netra dispac'hus en ur seurt raktres.

(1) Ar skouer-se a oa dibabet gwall fall. Moarvat e voe aozet Skol-Veur Kembre gant arc'hant Kembreiz hogen evit aotren da Gembreiz yaouank emaozañ ouzh ar bed saoz ha gounit o buhez ennañ. Ur bobl hep emskiant vroadel ne c'hell sevel aozadur broadel ebet.

(2) Ebrel 1913. "Vous qui ne savez parler humainement, correctement, en aucune langue humaine."

(3) Eivorad obererezh romantel an "narodniki" e Rusia.

(4) Forzh penaos ne badas nemet pemzek miz bermak.

(5) An it. Beno, Erwan Berthou, Anatol ar Bras, Craff, o doa kaset arc'hant.

En tu-hont da se, war ar marc'had, e lavare Emil Masson e felle dezhañ ober "Republikaned ha Gallaoued vat (sic) eus ar Vretoned" ! Goanagiñ a ranker ne felle, da Emil Masson nemet distreiñ diwar e oberenn foeltr ar pennadurezhioù gall hogen se n'eo ket sur a-grenn siwazh, ha gouest e oa marteze da grediñ er pezh a lavare evitañ da vezañ ezel eus ar Strollad broadel kentañ a-hend-all.

Bezet pe vezet, kemer a rae ar mennad-se a-zevri peogwir e rakwele ur c'hellidsteuñv a 8.000 lur aour (pezh a oa un tamm mat a arc'hant en amzer-se) evit kas e raktres da benn (1).

Sur eo avat ne c'hellas ket zoken kregiñ d'e seveniñ peogwir e tarzhas ar brezel bed kentañ er miz war-lerc'h.

N'eus mar ebet koulskoude - daoust d'ar c'homzoù dihetus en deus distaget evit dispartañ tud zo, spi hon eus - e felle da Emil Masson aozañ ur reizhiad koledm damheñvel ouzh hini ar C'hevre Gouezelek a venege ebarzh niverenn gentañ ar gelaouenn. Hogen n'edo ket e unan o kaout hevelep mennad d'ar poent-se e Breizh : "Breuriezhoù" liesseurt ar brezhoneg, e Gwened hag e Treger o devoa ar memes ratozh ha Taldir e unan a oa o paouez sevel e gevredigezh KENDIRVI BREIZH IZEL. Marteze e kave da Emil Masson avat n'o doa graet e rakkerzherion netra a vad hogen, padal, ez eo diaes gouzout penaos e venneañ tizhout e amkanioù. Ret e vije bet dezhañ evit se kavout paotred yaouank desket, emroù, - studierion pe zanev studierion - evit asantiñ da goll ur bloavezh studi hag en em ouestlañ d'ul labour skolaer red brezhon a vije bet rust ha skuizhus a-walc'h moarvat. Evit dedennañ brogarourion c'hredus a seurt se e vije bet dav da Emil Masson e unan kaout ur feiz sonnec'h e dazont ar yezh eget an hini e oa Emil Masson gouest da ginnig dezho.

E gwirionez e oa chomet sellboent Emil Masson diwar-benn ar yezh trivliadel ha rannvroel a-grenn, diforc'h diouz hini Meven Mordiern ha Frañsez Vallee d'an hevelep mare. Mark-andrivliadel-azh a verzer en troioù-lavar implijet gant ar skrivagner evit doareañ ar brezhoneg : "langue de prolétaires," "langue de gueux" (niverenn miz Du 1913). Hag ouzhpennañ a ra da heul :

(1) Spi en doa Emil Masson da gavout 4.000 den da reiñ 2 lur pe 2.000 da reiñ 4 lur (etre 50 ha 100 lur a vremañ).

"La révolution ne détruira pas que l'iniquité; elle déchaîne les langues enchaînées..."

Daskoriñ a ra d'ar vaezidi :

"le libre et noble usage de leur patois..."

Notit n'emañ ket ar ger "patois" etre askoù hag e c'heller damverzout er bomm-lavar-mañ un arster diblijus a vourrezh en displeddoni.

Ar pezh a laka unan da souezhiñ, dres, avat, ez eo an diforc'h a ra Emil Masson etre ar "c'hefredour" hag ar "gwerinad", a zo damheñvel ouzh an hini a zispartie hemañ diouzh ar bourc'hiz ergentaou. Ar veizourion, emezañ, (hag eñ en em laka e-touez ar re-se) ne c'houllemont ket digant ar gouerion dilezel o yezh. Moarvat. Hogen ne zeu ket da spered ar veizourion-se kennebeut e c'hellfent studiañ ar yezh-se hag ober anezhi benveg buhez o meiz end-eeun. Tamall a ra Emil Masson ivez d'ar"bourc'hiz bihan" dilezel e yezh ur wech ma kuita kendereoù ar werin evit kemer ur garg dindan ar Stad, hep kompren ne c'hell ket hemañ ober e-giz-all o vezañ, dres, ma ne oar nemet un "trefoedaj" ha maz eo klenket a-hend-all en ur stern stadel gall ha gallek a-grenn.

War ar marc'had ez intent Emil Masson an divyezhegezh e seurt doare ma ro an dreistpouez d'ar galleg a-hed ar wech peogwir e ra eus ar yezh-mañ an nor-zigor d'an hollved :

"La belle langue française qui le relie au monde entier..." Mezheven 1913. (1)

Hag er skolioù c'hweluniadel pe ar skolioù-meur poblek a oa empennet gant Emil Masson e veze keletet ar brezhoneg "e-kichen" ar galleg, hep kaout usrenk ebet en e geñver (BRUG. 14 c'hwevrer 1914).

Awenet e oa ar gelaouenn a-hend-all gant ur werinelouriezh romantel egiz hini an "narodniki" e Rusia d'an ampoent-se. Ret eo notañ a-hend-all ne oa ket gwall sklaer mennoziou Emil Masson diwar-benn an uhelvennad politikel a oa da ginnig d'an Emsav. Diouzh un tu e vrade Emil Masson tezennoù an anvelouriezh ; an holl strolloù strolloù pe aozadurioù a rank bezañ distrujet

(1) Digoreziñ a c'heller Emil Masson dre ma ne oa ket diorreet ar yezh d'ar mare-se ; eñ e unan a oa ur skrivagner gallek.

E miz Meurzh 1914 e skriv Emil Masson kement-mañ : "Hors des partis et dessectes, avec l'homme seul..." Arabat eo d'an den bezañ sklav e strollad, sklav e rangredenn :

"Alors ils détruiront les partis et les sectes et enfin le parti de la lutte des classes lequel n'a d'autre but que de s'abolir lui-même..." (1)

Da c'hortoz an deiz kaer-se e oa prest Emil Masson da grediñ e oa eus ar werin ur wir vroad klok. War-c'hoazh, emezañ, ar gouerion hag ar c'houeriadezed bihan a vezo sonourion, livourion ha skulterion ; war-c'hoazh e vo an holl gouerion mat ha reizh ; neuze e welint Doue (BRUG. Kerzu 1913.) (2)

Na soñjomp ket evit keloù se ez eztaol Emil Masson amañ ur gelnadurezh bennak estren ouzh an Emsav ; holl izili an Emsav kentañ a selle ouzh ar"sevenadur diwar ar maez" evel ouzh ur sevenadur uhel, da vezañ miret evel ma oa. Ned eo ket amañ nag ar pred nag al lec'h da vurutellañ seurt sellboent (3). Lavaromp hepken eta e veske Emil Masson ar meizad boutin-se eus an Emsav gant meizadoù all eus al luskadoù gwerinelour ha sokialour etrevroadel. Douget e oa dreist-holl da ober eus ar gwerinad un doare den skouerel, un doare Krist nevez, reizh ha gouzañvant war un dro. Diskleriañ a ra, da skouer, ebarzh an hevelep niverenn eus BRUG :

"Le plus simple des paysans de Basse-Bretagne vaut mieux que toutes les religions et les révélations ; car toutes passent et lui demeure... attestant par sa pauvreté et sa loyauté identiques depuis des siècles que justice n'est pas faite..."

Hag erfin, gant ar stumm lurack, a vez alies e hini hag hini meur a skrivagner eus e amzer :

"Sublime Vierge mendiante, Bretagne ! Je t'aime pour tes haillons et pour ta sauvagerie; tu t'es refusée à tous ; aucune loi ou machine ne t'a encore asservie..."

(1) Tezenn "dizeriadur ar Stad" - yac'h pesk er"o'homunva"koulskoude; Ivez, hiraez un den skuizh gant ar sektennoù e-lec'h e chem bac'het.
(2) Gwerinelouriezh romantel : kv. ar varzhed hag ar skrivagnerion bobl harpet gant George Sand e Bro-C'hall ha barzhed pobl Kembre en 19vet.
(3) Ne wel ket /ar skolaer/ ez eo fall reñ d'ar vugaligoù ur spered bourc'hiz, ur spered kêriad, a skriv Jos ar Bras ebarzh BRUG Gouere 1913, a-benn o lakaat da hetañ bezañ e servij ar gouarnamant, dont da vezañ kargiad bihan ha da zilezel ar yezh evel-se.

Ar werinelouriezh ha gouennelouriezh trivliadel-se a zisoc'he adarre d'un doare mesiazelezh (1) en em ziskouez dreist-holl a-dreuz menegoù tennet diouzh Renan hag a blije da Emil Masson dre ma lakaent keñver-ha-keñver Kelted ha ... Slaved :

"Ni Brezhoned eta, a zo ar muiañ hañval ouzh ar Slaved, nevez ha kozh er memes amzer. Ni a gred er ouenn rak santout a reomp anezhi ennomp..." (2)

Bez e oa avat muio'h a lec'h ebarzh BRUG da seurt trivliadelezh eget d'ar preder politikel pe zoken d'ar politikerezh pleustrek. Ar re a erbed un ober resis ebarzh ar gelaouenn n'eo ket Emil Masson hogen kenskrivagnerion all evel Jos ar Bras a vroude ar gouerion d'en em glevout, da sevel kevelourioù ha c'hweluniadoù (3), ha n'en doa a-hend-all fiziañs ebet er gannaded sokialour, pe an Nevez, a Wened, enepkloerelour a alie ar gouerion da chom hep mouezhiañ en dilemmadegoù na kemer perzh e nep doare e reizhiad waskañ ar Stad c'hall e Breizh (4).

E gwirionez e oa dedennet spered Emil Masson kalz muio'h gant ar c'hdennoù buhez, speredel ha relijiel eget gant ar c'hdennoù politikel. An dra-se a zo anat en e oberenn lennegel penn-da-benn (kv. e romantoù hag e veni barzhoneg e yezh-plaen "Utopie des Îles bienheureuses") hogen ivez er gelaouenn-mañ e-lec'h ez eus gouestlet un toullad pennadoù da zarempredoù ar sokialouriezh hag ar relijion (5). Mat eo resizañ ne oa ket e unan o verat an destenn-se : an Nevez, da skouer a glaske diluziañ ar gudenn-mañ. En niverenn 15 eus miz Meurzh 1914 e tisklerie perak e oa dleet distagañ ar relijion diouzh an Iliz :

(1) An hollgaeradur-se eus ar werin pe zoken eus ar gwerinad, a zo un dilerc'h eus al luskad romantel intret e kevala istorek ar varksouriezh en ur zislavarout anezhañ rak ur skiantelouriezh eo ar varksouriezh. La Mennais eo en deus staget da zouelaat ar werin avat. E gwirionez e oa dleout ar gwerinad brezhon eus e "haelded" d'e feiz kristen, da gentañ.

(2) Renan, na petra, a oa aotrouniezh speredel ar gostezenn gleiz e Breizh dreist-holl e dibenn an 19vet kantved. Ar skrid gallek eus an arroudenn-mañ a zo meneget en niverenn 18 eus Brug, Mezheven 1914.

(3) "Groupements coopératifs et syndicaux".

(4) BRUG. Niverenn 15, Meurzh 1914.

(5) En ur vroad ken relijiel ha Breizh en amzer-se e oa natur a-walc'h.

"Ar sosialisted n'o deus ket aseet distagañ ar relijion diouzh ar veleion hag ar Republik diouzh ar gouarnamant... Ar veleion nen dint ket mui kristenion... ne c'houllemont nemet argant hag enorioù... Grit ho relijion met na selaouit ket ar veleion hep feiz hag hep kredenn... Ya, gellout a reer bout Bretoned vat ha bout Republikaned ha sosialisted ag ar re wellañ..."

Moarvat ez eus un tamm mont-dreist en tamalloù-mañ - pa lavar an Nevez e-touez traoù all n'o deus mui ar veleion feiz ebet - ha gallus eo a-hend-all ne vije ket bet ar skrivagner eeun a-grem, o klask hepken distagañ ar gristenion diouzh an Iliz hep bezañ e chal gant ar feiz egiz ma klask reñf da gredif en arroudenn-mañ hogen evelato ne c'heller ket nac'hañ e oa un diazez d'an tamalloù-mañ diouzh ma tegemere ar veleion ha dreist-holl urzhaz an Iliz e Breizh beli ar Stad c'hall e Breizh (Stad dizoue a-hend-all) ha diouzh ma roe dezhi un taol-skoaz da gas da benn ur politikerezh divrezhonekaat ha divroadelañ a-benn tec'hout diouzh trubuilhoù zo, diouzh, ivez, ma choment gwallerest ouzh ur gevredigezh re stag ouzh he brientoù ha nec'het nebeut gant ar beorien (1).

Savboent Emil Masson a oa disheñvel diouzh hini an Nevez. Ar c'hontrol eus hemañ a rae e gwirionez. E-lec'h komz ouzh ar gristenion hag ober rebechoù dezho e kave gwel diskouez d'al laikourion e Breizh ne heulient ket an hent mat pa venent distrujañ ar relijion war un dro gant ar "gloerveliezh".

"An enepkloerelouriezh," a skriv Emil Masson en niverenn 13 eus BRUG, Genver 1914, "a zo kentañ artikl a feiz ar sokialouriezh c'hall. Padal," a gendalc'h ar skrivagner, "l'ant-cléricalisme ne fait pas moins de dupes que le cléricalisme..." (2)

E gwirionez e oa implijet ar beleg koulz hag ar skolaer gant galloudoù estren :

(1) E miz Kerzu 1913 e pismige an Nevez ar beleg difenner-al-lu ha doujus d'ar bourc'hiz dizoue. Ha peogwir edod tost da ouel Nedeleg ez embarme pezhioù barzhoniezh e galleg hag e brezhoneg amwenet gant an destenn-se : "Toujours l'enfant divin ignorera nos gloires..." pe c'hoazh gwerzennoù Jos ar Bras :

Da lod daoust hag e vo ret betek ar marv kontantif dienez gant komzoù ar Batez...

(2) Brezhoneg ganeomp.

"A bep tu ez eo ar bobl laeret ha touellet: en he buhez danvezel gant ar gloerelourion a c'hrata ar vuhez da zont ; en he buhez spereidel gant an enepkloerelourion a c'hoari an darlavaridi e ser ar Geoded dazont..."(1)

Hervez Emil Masson emañ Breizhiz muioc'h a-du gant ar relijion eget gant ar c'hloer o unan ; hag en diwezh ez asur ar skrivagner :

"Ar beleg breizhat a zo dispac'her... warc'hoazh e tegemero /Breizhiz/ en o strolloù kevelouriel ar skolaer koulz hag ar beleg evel breudeur, an eil koulz hag egile... koueriedadez ha kouerion Vreizh-Izel a zo, dre hengoun ha dre berzh o gouern, a-du gant ar relijion hag an dispac'h war un dro..." (1)

N'hon eus ket da vurutellañ ar memnoziñ displeget gant Emil Masson ebarzh ar gelaouenn BRUG. Div evezhiadenn a raimp evelato a-rack klozañ an dezrevelladenn-mañ. Diouz ar menegoù hon eus roet er pennad-mañ e c'heller damwelout personelezh Emil Masson a ziskouez bezañ un doare kristen hep feiz (hag ar goulakadur-mañ a vo kadarmaet gant kendalc'h ar pennad) ; diouz un tu all ez eo anat ivez n'o doa ket kenlabourerion all ar gelaouenn - L.N. Le Roux ha Jos ar Bras, an Nevez - an hevelep memnoziñ nag an hevelep meizadurioù politikel ha rener ar gelaouenn (a-hend-all ne cant ket ken desket hag eñ) daoust m'int bet levezonet gantañ.

\$\$\$\$\$\$\$\$\$\$\$\$

Esa a raimp bremañ reiñ ur c'hrennad eus ar memnoziñ eztaolet ebarzh e levrig ANTEE a vo embannet e 1911 da vare savidigezh ar Strollad broadel kentañ. E gwirionez ne c'heller ket kompren BRUG hep bezañ lennet "ANTEE ou le Bretons.." Er gelaouenn koulz hag er skrid e par an hevelep luganoù, an hevelep diskanoù an hevelep dodennoù.

Dav eo lavarout koulskoude ez eo muioc'h brogar stumm ANTEE eget hini ar gelaouenn BRUG, dre vras., hag an diforc'h stumm-se a c'heller diskleriañ dre ar rummadoù lennerion diforc'h a felle d'ar skrivagner tizhout er gelaouenn koulz hag er skrid-mañ.

(1) Brezhoneg ganeomp.

E devoud ez eo taeroc'h meur a wech an troioù-lavar implijet gant ar skrivagner. "NI HON UNAN" a zo lakaet, da skouer, e talbenn al levrig. Dediñt eo ANTEE ivez - an dra-se hon eus merket - da eñvor an istorour meur, Arthur de la Borderie .

Ar c'had-skrid-mañ n'eo ket displeget da lenn. Marteze ez eo stambouc'het un tammig ar stumm anezhañ, heñvel ouz hini ul levr dicuganoù, par da hini ar galleger Le Mennais ebarzh "Les paroles d'un croyant", da skouer ; barn a c'hellor a-hend-all diouz an aroudenn-mañ e deroù ANTEE :

"Un homme s'est levé au milieu du peuple et il a dénoncé les patries comme des marbres. Cet homme est un breton et la patrie qu'il a d'abord maudite est la France..."

Ensellomp bremañ danvez al levr.

Moarvat e felle da Emil Masson dreist-holl studiañ kudenn an darempredoù etre ar vroadelouriezh hag ar sokialouriezh hogen c'hoarvezout a ra gantañ merat kudennoù all, evel hini ar yezh, da skouer.

Anzavomp, a-hend-all, ez eo skort, strizh ha diglok - kilstourmel hervez tarzh-ster ar ger, peogwir e felle da Emil Masson dizarbenn an tamalloù a veze graet d'ar brezhoneg e-touez kelc'hiadurioù ar gostezenn gleiz - meizadur ar brezhoneg gant ar stourmer-mañ. A-walc'h eo dezhañ armodiñ lispenn ar rebech a "gilstourmelezh" a veze graet neuze d'ar yezh gant ar gleizourion c'hall. "Une langue qui soit réactionnaire!" a estlamm Emil Masson, a gav ar c'harez-se - ha gant reizh moarvat - diboell a-grenn rak n'eus forzh piv a c'hell ober eus ur yezh an implij a gar; ur yezh implijet gant "kilstourmerion" a vo moarvat ur yezh "kilstourmel" ; hogen ur yezh implijet gant dispac'herion a zeuy da vezañ ivez ur yezh dispac'hel : d'ar sokialourion eta arverañ ar yezh evit skignañ uhelgeal ar sokialouriezh hag houmañ, dre se endeeun, a zeuy da vezañ ur yezh dispac'hel e Breizh. Ar soñj-mañ a zo anat a-walc'h. Hogen en aner e klaskfe unan un displegadenn o tiskouez e c'hell hag e tle ar brezhoneg dont da vezañ yezh ar vroad a-bezh ha benveg-eztaoliñ ar sevenadur arnevez en hor bro ; ar wirionez eo e oa mirelour savboent Emil Masson : ne wele er brezhoneg a-benn ar

fin nemet un tu evit ar sokialourion da dizhout ar werin aesoc'h ha suroc'h e Kornog ar vro : gwall strizh e oa, evel ma verkemp, seurt sellboent.

Ar pep pennañ eus ar skrid a zo nemet eta da vrudañ keal ur "sokialouriezh"vrezhon. Emil Masson avat a gave diazez ar sokialouriezh-se, da gentañ, e doareoù-ene pennañ ar brezhon ha pergen en e "hiniennelouriezh" (Taldir ivez a lakae an "hiniennelouriezh" da berzh pennañ ar Brezhon):

"Nul peuple ne vécut moins en troupeau,"

eme ar skrivagner (1).

E devoud e oa ar sokialouriezh a felle da Emil Masson diazezañ e Breizh un doare relijion. Klevomp ar skrivagner kentoc'h :

"Si le socialisme est pour nous autre chose qu'une pure doctrine économique, s'il est ce qu'il doit être, une poussée du cœur..."

Ar vezourion meneget gant Emil Masson a-hend-all a ziskouez mañ ivez peseurt liv he devoa"sokialouriezh", tostoc'h moarvat d'ur meni anarkouriezh eget d'ar varksouriezh. Marks, a-hend-all, nemet faziet e vefen, n'eo meneget gwech ebet gant ar skrivagner. Anviou ar soñjourion-mañ a gaver peurliesañ eta dindan e bluenn : Reclus, Whitman, Descartes, Chateaubriand, La Mennais, Renan. Ar spered brezhon, eme ar skrivagner, evel hini ar Yuzevion, a lavar ouzhpenn, a gar ar vuhez dreist pep tra hag a zo enebet ouzh an holl stummoù a duranterezh ; harpañ a ra, en eneb, gwiriou "ar goustiañs hiniennel, ar garantez denel, ar bobl hag ar vuhez..." Daoust ha n'eo ket bet Breizhiz, a viskoazh, "marc'hegourion an holl stourmoù hael..." ?

Maz eo pobl Vreizh avat ur bobl uhelvennozet ez eo natur dezhi ivez gortoz "an dispac'h kevredigezhel evel ma c'hed ha ma het ar c'haredig e zarvez pried"

An dispac'h kevredigezhel-se ne vo ket graet eveljust gant ar Republik gall :

"Cette République III qui centralise, uniformise, nivelle, emprisonne, expatrie, fusille, parjure, ripaille..."

(1) Heverk ha di c'hortoz eo ar soñjenn-mañ pa ouzer ez eo troet ar sokialouriezh d'ur strolleouriezh enepiniennelour er stadoù meur impalaerel.

Feogwir eta n'en devoa an dispac'h sokialour-mañ netra da welout gant ar Republik brein-se n'o devo katoliked Vreizh ivez netra da zontañ eus e berzh kennebeut :

"Il n'abolira pas la loi et les prophètes : il les accomplira..."

M Moarvat e rank ar Gatoliked andur gwallveliezh Roma hogen eme Emil Masson :

"Rome leur est en la circonstance moins tyrannique et haïssable après tout que les 100.000 Jacobins que Paris soudoie contre eux..."

Pelloc'h ez embann ar skrivagner e feiz en ur ober eus Jezuz ur

"faune, amant de la nature..."

An Doue-se, a gendalc'h Emil Masson, ar sokialourion E gevarc'h evel un Tad hag emañ o tont an deiz ma anavezao an holl, Katoliked ha franveizourion, ar sokialouriezh evel E verc'h ha ma tegemerint houmañ evel o Salvezrez..." Doue eta a zo a-du gant ar sokialourion ; hogen ar re-mañ ivez a zle bezañ a-du gant ar "vammvro" ha sturien vrudet ar varksourion : al labourerion n'o deus mammvro ebet a zo gwiriadur un devoud kentoc'h eget diogeladur ur c'hemmenn : kristen, brogarour ha sokialour a c'heller bezañ eta.

Hag adarre e tibrad Emil Masson an "hiniennelouriezh" d'al laez. Moarvat e rank dic'hladeion Vreizh ober ouzh dic'hladeion ar broioù all evel ouzh breudeur hogen kement-se ne dalv ket e tle ar Vrezhonez dilezel an hiniennelouriezh-se a zo anezhi perzh diforc'hañ o gouenn petra bennak m'en deus an tech-se graet anezho "par iaed" er bed a vremañ ; hogen, a ziskleir Emil Masson, krediñ a ra pep Breizhad e toug Breizh ennañ e unan goude ma ne chomfe mui Breizhad all ebet war an douar ; ha war-lerc'h reiñ deomp skouer Meroceur, Pont kalleg, ar Roueri, Kadoudal - evel sokialour n'en doa Emil Masson kompleks ebet - ez ouzhpenn ar skrivagner :

"Pourtant ils ne sont qu'une race et ils vont se reconnaître uniques ; le socialisme n'exigent pas d'eux qu'ils se perdent en une amorphe multitude prolétarienne..."

An "emskiant a unegezh"-se e-touez pobl Vreizh a zle disoc'hañ d'ur vroadelouriezh kempoell a-walc'h evel m'henn taolenn

ar skrivagner, da vihanañ :

"Ar sokialouriezh a goui an dic'hladeion vrezhon da emouezañ outo o unan evel pobl hag evel broad, da seveniñ o unded e-kefiver go gouenn hag armerzh, da gas da wir ivez unded ar yezh a chom dirzel e liesseurtiezh o istor hag o rannyezhoù..." (1)

Evit lavarout ar wirionez ez eo an hiniennelouriezh-se estren a-walc'h ouzh ar varksouriezh rik a venn a-hend-all bezañ skiantel, da gentañ; estren ouzh ar varksouriezh ez eo ivez an doug d'ar speredelezh a intr penn-da-benn oberenn Emil Masson. Hag an dra-se n'eo ket souezhus pa ouzer peseurt levezonioù a zehoù o deus gweredet war Emil Masson a oa saoznegour, evel m'hon eus merket, hini Carlyle, pergen. E gwirionez, ur pennad eus ANTEE a zo talbennet "Harozerezh" (1) a laka da soñjal e tezennoù Carlyle(2) pe Nietsche kentoc'h eget e re vMarks, seul vui ma kinnig Emil Masson deomp da gehelañ harozed vrezhon a seurt gant Cadoudal, Leperdit (3), Erizeug. Moarvat ez erree ar skrivagner an harozerezh ouzh ar sokialouriezh :

"Que par le socialisme le jeune Breton soit un héros (4), un homme sincère, fidèle à sa race..."

hogen ivez ouzh ar "varzhegezh" a ginnige dres da uhelvennad un doare harozerezh d'an emsaverion yaouank (5) en amzer-se end-eeun, nemet adarre e stage ivez kefleuniadur uhelpal ar "varzhegezh" ouzh diazeadur ar sokialouriezh e Breizh :

"Le barde, le poète, l'homme que nous attendons tous en Bretagne, ... c'est le socialisme qui le donnera ... ou la Bretagne est perdue à jamais..."

(1) Brezhoneg hag isverkadur ganeomp. Un tammig droukvesk a zo er pennad-se a dro a-wechoù d'ur flemmskriz a-enep da visionerion gatolik Vreizh ar seitekvet kantved pe d'an trede Republik gall pe, c'hoazh, a zispleg e-lec'h-all ur raktres oberiañ politikel : sevel skolioù c'hweluniadel h.a. mennet da gelenn ar brezhoneg a-gevret gant ar saozneg hag an esperanteg (Roparz Hemon ivez a glasko diorren kelennadur an esperanteg en Emsav hag a voulo pennadoù er "yezh"-se).
(2) N'hon eus ket gallet gwiriañ avat ha lennet en doa Emil Masson skridoù Nietsche pe get, Carlyle en doa pleustret hep mar.
(3) Reazhonad deneliezhour a nac'has sentiñ ouzh unzhioù an dispac'h-erion c'hall a c'hourc'homez dezhañ lazhañ prizonidi bolitikel.
(4) Isverket ganeomp. (5) Kv. Ar pennad diwar-benn ar Gersedd.

Ar "barzh"-se a zo e gwirionez diouganer ha prederour, kristen ha digristen war un dro ; da batromoù dezhañ e ro Emil Masson, war un dro, Pelagius ha Gweltaz, Renan, an difezad hag Hello, an den a feiz; ar barzh-se n'eo na roman nag askeour (ar C'hrist a zo karedig an Natur, na disoñjomp ket) ; n'eo nag unpanour na Jezuis, na frañmason nag "unrezekaour". A-benn ar fin e wel Emil Masson er C'hrist uhelskouer "ar barzh doueel, dialour dic'hladeion an izel-impalaeriezh /roman/..." hogen an uhelskouer-se a zo empennet bepred diouzh reizadoù ar sokialouriezh, "religion ar vuhez hag an hinienn den..."

§§§§§§§§§§

Ez pleustrek avat ha daoust d'e feiz er religion sokialour ez erbede Emil Masson evit ar mare an "unaniezh vroadel ha kevreadur an nerzhoù breizhek..."

"D'an holl strolladoù ez eo gallus," a ouzhpenne, "kas da benn un ober boutin... Ret eo seulvezañ unaniezh an holl Vrezhoneg, katoliked ha frankveizourion, peorion ha pinvidion, kilstourmerion ha dispac'herion..."

Anzav a ra Emil Masson n'eo ket aes empennañ hevelpe talbenn e Breizh hervez an damkaniezh varksat a gemer da reolenn-emgann broudañ e pep stumm hag e pep degouezh ar stourm etre renkadell meizet e par an dispac'h hollvedel da seveniñ : arabat eo d'an dic'hladeion treuzvarc'hata e nep doare gant ar "voure'hizion".

"Néanmoins, a arguz Emil Masson, la vie n'est pas à la merci d'autome formule abstraite..."

rak hor rediañ a ra bemdez da genlabourat gant hor gwashañ eberion.

Evel ma lavar ar skrivagner meur a wech avat ned eo ar stourm etre renkadoù nemet un arven da-c'hortoz hag ambañ eus ar garantez evit an denelezh. Moarvat ez eo ret flastrañ gallouezhioù zo hogen ar pal gwirion a chom sevel ur gevredigezh nevez en tu hont da eñberezhioù a zo tonket dezhe steuzhañ mammvroioù nevez ha gwirion war zismantroù ar fals mammvroioù impalaerel kempred (seurt mennoz e gwirionez a voe difennet bepred gant an Emsav, gant Roparz Hemon ivez, da skouer.) E sell d'an uhelpal-se, setu ar galy a rae

Emil Masson :

"Sokialourion Unanet, c'hweluniadourion, frankizelourion, intrit ar bodadoù a gaver e Breizh endev, goude ma vijent bourc'hiz a orin ; diazevit kevelourioù, c'hweluniadoù, kenskoazelloù... deuet Breizh da vezañ penn-da-benn ur 'c'hengreiriad' eus an holl c'halloudoù armerzhel ha speredel a zo diorreet ganti..." (1)

Ha goude bezañ aliet kevredadur K.B.B., Unvaniezh Arvor hag ar Gorsedd gant an nerzhoù sokialour e Breizh e kloc evel henn : "Ar re greñv hepken a zellez ar vuhez, hiniennoù pe vroioù (2). Grit Breizh pinvidik ha galloudek..." ha reiñ a rae da skouer "Tchec'hiz, Hungariz hag hor breudeur a ouenn, Kelted Iwerzhon..."

§§§§§§§§§§§§§§§§

Evit meizañ ervat keindir speredel memnoziadeg Emil Masson ez eo mat lenn an oberennoù gallek en deus savet a-rak ha goude ma voe deuet d'an Emsav. Stagañ a raimp ouz ar pennad-mañ eta un tamm displegadenn diwar-benn e oberenn lennegezh c'hallek. Ar pep brasañ eus an oberenn-se a c'hoarvez eus tri levr : ur romant : "Yves Madec, professeur de Collège" moulet e 1905, e ti Ollendorff, e Paris ; "Les Rebelles", dastumad danevelloù, eil embannadur e 1909, dindan an anv-pluenn Brenn, er "Pages Libres" e Paris ; erfin "L'Utopie des Îles Bienheureuses dans le Pacifique" en l'an 2.000" embannet e Paris adarre e 1921, eil embannadur, daou vloaz kent e varv, ur varzhoneg-romant a skiant-faltazi.

An oberennoù-mañ n'int ket disi e-keñver lennegezh (an oberenn wellañ a vefe moarvat ar "Rebelles") ; holl e roont un alberz eus hentad meizel ha speredel ar skrivagner.

En ur stumm ez eo ar romant kentañ "Yves Madec,..." skrivet abarzh ma teufe Emil Masson d'an Emsav, e 1903, ar skrid dudiusañ e meur a geñver rak reiñ a ra da gompren peseurt stuz speredel ha politikel a oa da Emil Masson d'ar marc ma voe dedennet gant an ober breizhek, ha perak marteze e voe dedennet gantañ : dre ma oa bet kersset gant an ober sokialour evit darn.

(1) Brezhoneg ganeomp. (2) Eñvoradur diwar Niesche marteze ?

"Yves Madec..." a zo eta istor ur c'helenner yaouank Breizhad eus ar goueled, "sokialour", nevez tremenet e arnodennoù gantañ, a zegouezh en ul lise un tu bennak e Bro-C'hall. Eno e koll tamm ha tamm e emdrouelioù diwar-benn al lise hag an deskadurezh c'hall, da gentañ ; diwar-benn ar Republik c'hall (a-gleiz, sañset) dre vras, da c'houde. E genvreudeur el lise, goude ma vent a orin poblek, a zo e gwirionez bourc'hizion vihan ; e diabarzh al lise e unan e ra al lore'h kendere e reuz : dispartiet krenn eo ar "gelennerion" diouzh an "adkelennerion" ; un urzhaz strizh ha reut a zisrann ar rumm kentañ diouzh egile. Holl avat, evel ma lavaren, a zo "bourc'hizion vihan" ; ne vezont ket ez eo roll ar c'helenner bezañ un doare beleg, barzh hag haroz war un dro. War ar marc'had, e genseurted eus ar Strollad sokialour a zo strizh a spered ; muioc'h a gasoni o deus ouzh an Iliz eget a garantez evit ar frankiz pe ar geizh ; dizamant ez int, evel an ilizourion o unan :

"L'étiquette socialiste, c'est la soutane d'aujourd'hui..."

Dislavar a zo eta en ur gevredigezh a embann ez eo diazeget war un uhelvennad ha n'eo ket feal dezhañ, a lavar ez eo kevatalour hag a grou dalc'hmata urzhazoù nevez. Hogen anzav a ranker n'eo ket reizhpoell hepred evit keloù se savbentoù ar buruteller. Yves madec, da skouer, a zo sokialour, enep-kloerelour, hag onepilizelour hogen karout a rafe ober eus al "lise" un doare parrez laik ; enebet eo ouzh ar frañmasoned ha war un dro e tamall an aluzennerion el lise ha gelenek eo ouzh ar veleion dre vras ; disteurel a ra an noblañselezh ha war un dro e fell dezhañ ober eus stourmerion ar sokialouriezh ur vrientinelezh nevez ; harpañ a ra an "Université populaire" ha chom a ra war un dro ur c'hefredour hiniennelour, dic'houest da gener perzh da vat e buhez ar bobl ; diskleriañ a ra ez eo "communard, collectiviste, anarchiste" ha kemer a ra da vistri buhezourion vourc'hiz evel Tolstoi, Ruskin ha Schiller ; fellout a rafe dezhañ uhelaat ar bobl - o kelemn matezh an ostaleri ma chom enni - hag anzav a ranko e diwezh ar romant n'he deus ket c'hoant ar bobl

bezañ uhelaet hag en em gav mat egiz m'emañ ; erfin Yves Madec a ra eus ar c'helenner ur beleg hep kredenn na feiz. E gwirionez ez eo soubet an oberenn penn-da-benn en ur relijielezh dispis ha na gav hent digor ebet. Istor ur c'herseadur ez eo ar romant-mañ eta, hini ar skrivagner e unan hag a ziskleir perak en deus klasket seveniñ e Breizh hag en Emsav ar pezh na c'helle ket - war a hañvale-seveniñ er bed gall.

Ebarzh "Les Rebelles" en em ziskouez dislavaroù ha disklotusteriou all. "Les Rebelles" end-eeun a zo talbenn unan eus an danevelloù en dastumad-mañ. Enni e fell d'ar skrivagner - a zo o paouez dont d'an Emsav, war-dro 1908-1909 - unaniñ e garantezioù nevez hag e garantezioù kozh, Breizh an amzer wechall ha Breizh an amzer vremañ, keltiegezh ha slavegezh (diskibl da dTolstoi e oa Emil Masson, peoc'helour hag avieledour war un dro). En danevell gentañ-mañ eta e lakaer war al leurenn Kembreiz (o chom e Breizh hag o kanañ tonioù skosat, Kelted a zoare eta) ha Klask a ra ar skrivagner respont d'ar goulenñ a ra dezhañ e unan diwar-benn ster an Istor mennet (marteze) gant Doue. Hogen pennañ ratozh an danevell a zo dezrevell karantez ur Breizhad sokialour evit ur Gembreadez. Goude marv e wreg marvet diwar wilioudiñ e tideoh Pierre Harscoet da Paris d'en em goll e-touez ar vicherourion ma venn prezeg dezho aviel ar sokialouriezh.

Muioc'h a ster e-keñver politikerezh he deus marteze an eil danevell. Enni e tiverzer un armod a-berzh ar skrivagner da unvaniñ ha da lakaat da glotañ patromoù kevredigezhel kozh ha nevez, da stagañ ar renkadoù enebet kenetrezo en dere'hent dre liammoù ar garantez (ur sellboent romantel rik) : mab un noblañs o kouezhañ e karantez gant ur goueriadez yaouank deuet d'e servijout evel mitez er c'hastell. Un digarez eo an danevell-mañ evit disteur-el ger-stur ar C'hallaoued republikan "liberté et fraternité" evit e amañ gant unan nevez : "Urzhaz ha breudeuriezh" (urzhaz evel gwechall ; breudeuriezh a zo goulemmet groñs gant an amzer vremañ).

Hogen n'eo ket ar youl-se da unaniñ etrezo ar broioù keltiek, ar renkadoù brezhon, an tremened hag ar bremañ, a zo heverk

hogen kerkoulz all ar spered emsavel nevez a bar evit ar wech kentañ en un oberenn lennegel. Taolennañ a reer en danevell-mañ ur c'helic'h sevenadurel brezhon e-lec'h e studier kudennoù Breizh hag e-lec'h e tesker ivez ar yezh :

"Nous sommes maintenant six aux "Hermine".
Seul Le Berr connaît le Breton.. Nous nous sommes avoué que c'était ridicule de se prétendre la conscience d'un peuple dont ne connaît pas la langue..."

An dro-soñjal-se a oa nevez hag emsavel rik peogwir e rae eus anaoudegezh ar yezh perzh rekiz pep emsavelezh wirion.

An emskiant vroadel, a-hend-all, en em ziskouez anacot'h amañ eget er skridoù arall.

"Ar Brusianed, petra int?" a c'houlenn penn-tudenn an danevell, "Le chevalier aux Hermine"
Ni, Brezhoned, a anavez daou enebour : ar
Saozon, da vihanañ, ne waskont ket ac'hanomp..."

En danevell-se ivez, diwar neuze, e tager ar reizhiad kelemn gall e Breizh ; ober a reer eus liseoù ha skolaжоù an deskadurezh c'hall en hor bro

"tiez-bac'h ma treuzfurmer, pe, kentoc'h, ma treuzwisker enno ar Breizhad e Gall..."(1)

A-hend-all, a gendalc'h ar skrivagner, ne c'heller ket keñveriañ ar Kelted ouzh ar C'hallaoued : "Ar re-mañ a zo poell-egourion ; ar re all a zo eeunwelourion (2), tener ha feuls, diouarnadus..."

C'hoarvezout a ra gant Emil Masson en danevell-mañ end-eeun difenn ar chouanterezh. Paris an hini eo a zo bet kiriek da vrezel ar chouanterezh, emezañ (kounomp adarre ez eo penntudenn an danevell, "Le Chevalier aux Hermine" un noblañs a zimez gant ur vero'h eus ar bobl). Paris, a-hend-all, a zo da zistrujañ rak mirout a ra ouzh Breizh a dizhout uhelvennad keltiek ar Vreudeuriezh unanet gant an Urzhaz. "Petra ' vo Breizh?" a c'houlenn eta rar skrivagner. Ha setu ar respont : "Ne vo na rouantelezh, nag impalaeriezh na republik -egiz an hini c'hall gaouiat- hogen breudeuriezh, a zo Urzhaz en he c'hreizlon rak gwazed, gwraez, bugale, re wan ha re greñv, tud a ijin ha tud didro en em gav en ur skeuliad natur

(1) Brezhoneg ganoomp evel uheloc'h hag izeloc'h. (2) "Intuitifs".

e-lec'h ez eo an Haroz an hini ar muiañ didro hag a servij an hini diwezhañ eus ar servijerion... Daoust ha plegañ ar glin n'eo ket joa hag enor ?

Uhelvennad an aviel eta, moarvat diouzh giz Tolstoi.

Padal ned a ket Emil Masson betek dinac'hañ ar feulster hag implij an nerzh. "Ma lavarje Tolstoi ar wirionez," emezañ o tamvenegiñ an Aviel, "Krist en dije torret ar c'hleze war e c'hlin..."(1)

Adverat a ra ar skrivagner an hevelep dodennoù ebarzh

"La nuit sera noire" (2). Adarre e kejer en oberenn-mañ gant un tiegezh noblañsoù brezhon, hini ar c'hont Alan, aotrou Kereneur, ma oa e c'hourdadou a-du gant Yann Monforzh gwechall gozh, a zo ivez ur brogarour brezhon en deus huñvreet e 1870 distagañ Breizh diouzh Bro-C'hall (3). E ser se e klask Emil Masson a nevez gwenañ ar chouanterezh dre ma oa poblek :

"Les nobles d'Armorique qui, surtout de 1794 à 1799 encouragés et portés par le mouvement spontané des masses jurèrent d'émanciper leur pays du joug français..."

Ar youl-se da stagañ an noblañsoù ouzh al luskadoù rezidelaour en em ziskouez en ur stumm all er memes danevell. Unan eus tudennoù "La nuit sera noire" a zo dres ur "prins a Smolensk" a-du gant an araokaat, e anv Krouglov (hanter brezhoneg, hanter rusianeg, na petra, pep dispac'her dereat o vezañ danvez boued-ar-groug!) Hemañ avat a zo kentoc'h anvelour eget komnour rik, lennet ha studiet m'eo bet gantañ oberennoù Herzen, Tolstoi, Tchaikovski, Bakounin. En e vro ez eo tamallet dezhañ - e gaou - bezañ kaset da benn ur gwall-daol bennak (4). E karantez anezhañ e kouezh Annaig de Kereneur, eveljust, ha gant hemañ e tideo'h da Vro-Saoz, mammvro ar frankiz hag an holl harluidi (5).

Dudius eo ar skrid-mañ e meur a zoare ha pergen dre ma ro un alberzh eus mennoziou Emil Masson diwar-benn relijion.

- (1) Brezhoneg ganeomp. An anvadur - protestant - "Krist" a zo diouzh Emil Masson.
- (2) Dedit eo an danevell-mañ d'ur skrivagner gall.
- (3) Kv. Istor kamp Conlie ha Keratry, lakaet diouzh ar c'hiz gant gant Camille Le Mercier d'Erme, eus ar Strollad broadel kentañ.
- (4) Na disoñjomp ket e oa Lenin un noblañs.
- (5) Saoznegour e oa Emil Masson - se hon eus kounet meur a wech.

Rak ur relijion a ziskouez kaout ar skrivagner er skrid-mañ, he feiz na pleustrezezh na lidoù, avat :

"A quoi bon des gestes et des rites?"

diavaezet en oberennoù hag er vuhezgezh hepken, o tisteurel ar Skiant krin hag o touelaat an Natur rak ar relijion-se hag a ro al lec'h kentañ d'ar galon n'he deus tamm ezhomm eus ar Poell :

"Le soleil est la lumière même mais le soleil est-il clair?"

a c'houenn unan eus tudennoù an danevell.

Rak, evel pep Breizhad a-benn ar fin, ez eo trechalet ar skrivagner gant ar c'hudennoù a relijion hag a brederouriezh. Hag anat eo an dra-se dreist-holl en oberenn diwezhañ a embannas war-lerc'h ar brezel e 1921, e ti F. Rieder hag a zo talbennet : "Utopie des Iles bienheureuses dans le Pacifique en l'an 2,000"

Moarvat e ra an titl-mañ damveneg eus an "imramoù"

iwerzhonat etrezek lhez Tir-na-nôg ; padal ne bled ket ar romant a "skiant-faltazi"-mañ - e gwir ez eus anezhañ kentoc'h ur varzhoneg - war-eeun gant kudenn Vreizh. Ar ger "Utopie" hag ar bloaziad merket a ziskouez mat ne grede ken ar skrivagner nemeur e gallusted - war verr dermen - ur gevredigezh komnour, petra bennak ma ver Emil Masson en oberenn-mañ dodennoù kustum an araokaouriezh : disammet eo an dud diouzh pouez o zehoù fall; dieubet int diouzh o gwallzougou ; dibec'h int, evel e aradoz an Douar ; ha rak-se ivez e c'hellont chom noaz (dave d'ar Bibl er munud-mañ), keveskemm ezhec'h ha gwragez, meskañ katoliked ha reizhkredennoù h.a. En inizi-se e kej Pascal (1) ha Mozart gant Tolstoi (2) a reer anezhañ Sant patron ar gevredigezh skouerel-se (3) pe Nietzsche, Walter Raleigh, Whitman ; eno ivez ez eo ar merc'hed par pe zreist d'ar wazed (a-drugarez d'an emgefreakaat) ; an holl, ouzhpenn o yezh c'henidik - a zo brezhoneg, euskareg h.a. - a gomz ur genyezh a zo anvet ar "sperando" (4).

- (1) Emil Masson a oa ul lenner eus Pascal. (2) "An hini kentañ eus an dud denel da vat a voe ar Rusian Tolstoi..."
- (3) Ne ra Emil Masson meneg ebet eus dispac'h 1917 e Rusia.
- (4) Huñvre ar genyezh a voe maget ivez gant Roparz Hemon a embannas d'ur mare ur stagadenn "esperantek" da WALARN. Notomp a-hend-all e klask ar skrivagner govellañ ur galleg nevez gant gerioù evel "dormesues", anemotropes" gandellettes" ha n'eo ket anat o ster bepred.

Un doare hollspredouriezh pe hollzoueadegezh a zo relijion kefridiel Enezegiz. Krediñ a reont e peurbadelezh an ene :

"Hor bezoud douarel n'eo nemet ur pred eus hor buhez ha pep hini ac'hanomp a zo un elfenn eus ar **Peurvoud...**" (1)

E-lec'h-all e ra **Emil Masson** meneg eus :

"Mister an eginañ betek deiz an **Dassorc'h...**" hag eus "**treuzneuziadur an Amzer...**"

hogen an hollzoueadegezh-se a zo e gwirionez un holleneadegezh(2):

"D'ar materi a lavarar divevek ne ra diouer tamm ebet an emskiant..." (1)

E gwirionez, ar pezh a oa empennet gant **Emil Masson** a oa un doare kevredigezh kravezel nevez, gant servijerion ha servijerezed (3) enouestlet da wazañ o c'hendud, o klask tizhout ar "santitude" (4) a c'hoarvez eus bezañ denel, da gentañ (5) e-lec'h e c'hortozar ar **Marv** gant levezek :

"Avec joie, vers toi, ô Mort..."

e-lec'h ez eo ar **Stad** enkorfadur an **Îroug** ("Hamlet-Kezar, enebour an dud, alouber ha lazher...")

Ar gevredigezh skouerel ha kravezel-se a argarzh a-gremm ar sevenadur armez a zo renet gant ar vankerion hag ar gelaouen-nerion unanet :

"Les multitudes sont à la merci de la monnaie de papier... de l'Action de papier, de la Pensée de papier... L'industrie mère - le trucage des consciences ou bourrage de crânes (6) - y a reçu un développement inouï dans ces établissements luxueusement démocratiques qu'on y appelle Université, d'où enfants et jeunes gens sortent métamorphosés en Pantoques, parfaitement exsangues mais gonflés d'encre noire..."

(1) *Peurvoud gwanomp.*
(2) Levezek **Whitman** emichañs, a oa anavezet hag en doa levezonet ivez al luskad lennegel gall "**unanimiste**". "**Jean-Christophe**" a zo meneget gant **Emil Masson** a-hend-all. Bez e c'heller diverzout amañ un heklez eus dankaniezh ar "**mor-spered**" ijinnet gant ar **Rusteg** hag adkemeret gant **Erwan Berthou**.
(3) Leaned ha leanezed, dizemez.
(4) Unan eus ar gerioù gallek krouet gant **Emil Masson** en e oberenn.
(5) "Bez denel, da gentañ ; Doue e unan a rankas bezañ denel ; dre E skouer En deus komzet..." (6) Tro-lavar boaz er galleg a neuze.

Er peurbad ez eo savlec'hiet an oberenn-mañ paneogwir ne gavér enni, evel m'hon eus merket, meneg na damveneg ebet eus dispac'h 1917 a oa c'hoarvezet pevar bloaz a-raok. En em c'houlemañ a c'heller zoken ha krediñ a ra ar skrivagner e vefe gallus sevel ur **Baradoz** egiz an hini en deus livet en oberenn-mañ penn-da-benn d'an douar. Ar **baradoz** en deus-eñ faltaziet a zo serret en un enezeg disrannet a-gremm diouzh bed an "**denneuzidi ouez**" a zalc'h ar pep brasañ eus an tir (1) ; ar re-mañ, war a seblant, ne oa tu ebet d'o c'hemm e nep doare.

Marteze e oa ar skrivagner toc'hor d'ar mare-se dija, krog ennañ "**l'immense désir des choses éternelles**" (ar c'hoantad-se hag a oa, diouzh a skrive, ar brouenn vras eus doueelezh an ene) ; d'ar c'houlz-se moarvat ne grede ken e oa gallus sevel **baradoz** an douar ha na c'helle lec'hiañ nemet en un "**utopia**", en un "**netlec'h**" bennak.

§§§§§§§§§§

En diwezh e c'heller merzout pegen amsteriek ha leun a zislavaroù ez eo oberenn ar skrivagner broadel-mañ (rak skrivagner e oa kentoc'h eget stourmer politikel, daoust d'e vrud a vrogarour 'sokialour').

Komzet hon eus a zislavaroù oberenn **Emil Masson**. Ar re-mañ a zo anat, da skouer, en arnod ar skrivagner da dizhout ar bobl dre ar brezhoneg e **Kornog** ar vro. Moarvat e oa talvoudus an arnod-se hogen nammet e oa gant ur gwel faoz eus ar pal da dizhout koulz hag eus an hent a gase dezhañ. Evitañ da vezañ sokialour, da lavarout eo, hollvedelour, ne oa ket **Emil Masson** zoken evit empennañ ur sevenadur urvan evit **Breizhiz** gwidubanañ, evit **Breizhiz** ar Reter ha re ar C'hornog, evit kêriz koulz ha plouesidi (hogen ar mank-se, ret eo lavarout, a oa hini an **Rusar** kentañ penn-da-benn). Noarvat en doa reizet e oa er sevenadur henvrozañ e **Breizh** ur gened diouti hec'h unan hag a zelleze bezañ miret hogen n'en doa ket komprenet war un dro ne c'helle ar seurt kened bezañ miret ha krosket zoken nemet gant harp ur **Stad** mennet d'he saveteiñ e stumm pe stumm.

Ma n'en deus ket meizet mat dalc'h ar gudenn vroadel e Breizh bout maz eo bet ezel eus ar Strollad Broadel kentañ, n'eo ket deuet a-benn Emil Masson kennebeut da aozañ un damkaniezh kempoell diwar-benn ar gevredigezh. Daoust ha sokialour e oa da vat ? Ne gav ket deomp, da vihanañ, e oa ur marksour rik anezhañ rak mankout a rae dezhañ penn-da-benn ar spered skiantelour a zo merk-anaout ar varksouriezh. Anzour ha skrivagner, den a gravez kollet gantañ ar feiz kristen hag o klask anezhi en ur stumm nevez e oa Emil Masson da gantañ penn, den a galon kentoc'h eget den a boell, den a faltazi hag a gizidigezh kentoc'h eget den a skiant hag a ouezoniezh.

Evel-se eta, daoust ma tarbenne a ziavaez pennaemoù ar stourm etrekenkadel ne roas biskoazh a bouez dezho ur wech ma voe deuet d'an Emsav ; a-ziagent - se hon eus merket - e oa bet gwall gerseet gant ur sokialouriezh speredet strizh, a zegemere ur stumm nevez a renkadelezh ha n'he doa - e Breizh, da nebeutañ - darempred ebet gant ar werin.

Lavaret hon eus ne oa Emil Masson e nep doare ur marksour rik. E devoù, levezonioù liesseurt o devoa stummet e vennoziadeg. Hag eñ saoznegour e vane stag ouzh bed ar c'hornog kement hag ouzh hini ar reter ; engervel a rae Carlyle ha Whitman koulz ha Tolstoi. A-benn ar fin e oa anezhañ dreist-holl un hiniennelour hag e dechoù soñjal o dije heñchet anezhañ kement war-du an anvelouriezh rik koulz ha war-du ur stumm bennak a faskouriezh (kentoc'h eget etrezek ar varksouriezh reizhkredennek).

Bezef pe vezef, deuet eo Emil Masson re ziwezhat d'an Emsav en un doare, gant ul lennadurezh re hollek marteze evit merzout kudem ha degouezh Breizh dres evel m'edont. Evel izili all eus an Emsav kentañ en deus kredet e c'helle ar sevenadur hag ar speredegzh henvoazél - ken kaer d'e soñj - bezañ miret evel ma oant. Ar sevenadur-se avat - anat eo koulskoude - n'oa ket da virout hogen da adkrouiñ en ur c'hendegouezh politikel ha kevredigezhel nevez, - ha ne c'helle bezañ adkrouet nemet diwar-bouez ul labour frammañ stadel a zegouezhe da Vreizhiz ar Reter koulz ha da re ar C'hornog. Iskis eo, da skouer, n'en deus ket merzet muioc'h eget

izili all an Emsav kentañ ne oa diforc'h gwirion ebet etre stuzegezh kouerion ar C'hornog ha hini gouerion ar Reter (1). Evel ar stourmerion all ez eo bet touellet Emil Masson gant un doare "hudekadur" eus ar brezhoneg.

Ouzhpennomp ne gaver meneg ebet eus al luskadoù sokialour gall en e oberenn, nag eus an hini etrevroadel. E gwirionez e oa Emil Masson, evel an darn-vuiañ eus emsaverion e amzer, ur gwerinelour kentoc'h eget ur sokialour pe zoken ur broadelour.

Dister eo bet e zelanvad war an Emsav. Kustumet eo an an Emsaverion - dreist-holl ar re a zo eus an tu kleiz, na petra! - da venegiñ e anv bezañ lennet na studiet e skridoù. N'on ket sur zoken en dije Yann Schier e unan lennet a-zevri an oberenn en deus savet. Hiziv an deiz ne oar ket mat izili ul luskad evel an U.D.B. - a gendalc'h a-hervez gant an ervenn boulc'het gantañ - piv eo Emil Masson. Padal e kav deomp ez eo dlead pep brogarour, dreist-holl pep brogarour sokialour, dizoleiñ ha studiañ e skridoù : kement-se a viro outo a vezañ levezonet gant meizourion ha kefredourion c'hall estren a-grenn ouzh an Emsav. En ur ger, krediñ a reomp en deus Emil Masson bepred ur gemennadurezh bennak da ober d'an Emsav.

(1) Kv. An danevell savet gant Duchauchix "Seurez Kerwenan" lakaet e brezhoneg gant Klerg a ziskouez mat stuzegezh kouerion lokronan-ar-Menez.

S T A G A D E N N

Dezrannet hon eus darn eus oberemnoù Emil Masson.

Er stagadenn-mañ e klaskimp reiñ un nebeut diskleradennoù diwar-benn e vuhez, e stummadur hag e vennoziou koulz hag e bersonselezh(1).

I.-

Ganet eo Emil Masson e 1869. E dad a oa ul Leonad a voe ganet e Kastellin e 1844; skoliad en "Ecole des Arts et Métiers" eus Angers e teuas da vezañ eilmestr er verdeadurezh ha, war-lerc'h, implijad en "Hentoù-houarn ar C'hornog" en Angers; echuiñ a reas e vuhez e Brest evel tresour; ar vicher-se en doa ranket kemer goude ur gwallzarvoud; eno e oa marvet, gwall abred, da 41 bloaz pa n'en doa e vab nemet 15 vloaz. Spered ar skrivagner a-hend-all a voe skoet gant an darvoud reuzius-mañ. Tad Emil Masson, - notomp se - a oa republikan ha likour hag er c'heñver-se en devoe levezon war e vab.

Al levezon-se a voe krefvaet gant stummadur Emil Masson a voe yalc'hader e Lise Brest e-lec'h ez echuas e studioù eil derez e 1889. Diorroet eo bet Emil Masson eta hervez spered an trede Republik gall hag an diorroadur-se moarvat a ro da gompren perak e voe doareoù-señjal ha bedveizadur Emil Masson diouzh re an Emsaverion all kempred dezhañ a voe desavet en un endro disheñvel krenn.

Goude bezañ graet studioù prederouriezh e Skol-Veur Roazhon ha tizhet eno an aotregezh e 1895 e oa aet da gremen ur bloavezh e Paris, da studiañ er "Sorbonne"; eno en doa graet anaoud-gezh gant ar c'helemer war ar brederouriezh Séailles, ur bourc'hiz frankizour, - ha staget e oa da bleustrif ar metou kleizelour ha frankizelour er gêrbenn c'hall. Kroget en doa da brientiñ un aotregezh war ar saozneg hag evit se e ray ur bloavezh studi e Redec'henn, e Bro-Saoz; d'ar c'houlz-se eo e oa bet dedennet Emil Masson gant ar gatelligiezh hag en dije soñjet zoken mont da vanac'h. Ne voe disoc'h ebet avat d'an enkadenn speredel-se ha pa zistroas war an douar-bras e voe anvet da adkelemer e Lise Loudun e Bro-C'hall. E vuhezadur el Lise-se a bourchaso dezhañ danvez e romant kentañ: "Yves Madec, professeur de Collège". Menel a raio e Loudun betek 1904. P'edo o vevañ er gêr-se e pledo gant al luskad "Universités Populaires" diazezet gant Charles Guieysse, hanter breur Marcel Guieysse, ar broadelour breizhat a gemeras perzh e labour an eil Emsav. D'ar mare-se ivez ez euredo gant ur Saoc'z, Elsie. Un dimeziñ evurus e voe: Elsie a voe gwellañ kenlabourez ar skrivagner (rak ur skrivagner gallek-brezhon e voe dreist-holl) en e labourioù saoznek dreist-holl. Daou vab en devoe digant e wreg: an hini kentañ Yves, ganet e 1908, hag an eil, Michel, ganet e 1914 hag hiziv maer Pondi.

(1) Tennet eo danvez an notemnoù-mañ diouzh levr Jean-Yves Guioimar "Emile Masson: Les Bretons et le socialisme" embannet hevlenneti Maspero e Paris e fram "Centre d'histoire du syndicalisme".

E 1904 e oa deuet Emil Masson da vezañ kelemer saozneg e Lise Pondivi hag er gêr-se eo e voe dedennet gant Breizh hag an Emsav. Pegoulz eo deuet da vezañ broadelour brezhon? Moarvat etre 1904 ha 1908. E 1904 avat ne oa ket c'hoazh moarvat rak neuze, en e genskriverezh gant André Spire, ur bourc'hiz eus Nancy, kleizelour ha Yuzev sionour, e rae Emil Masson ur "fumisterie" eus ar vroadelouriezh dre vras, pe da vihanañ eus ar "Stad vrezhon".

Tamm ha tamm eta, etre 1904 ha 1908, eo e teuas Emil Masson da vezañ brogarour brezhon hag etre 1912 ha 1914 eo e gemeras perzh ar muiañ en obererezh ar strolladoù brezhon.

Pe dre hent e teuas Emil Masson d'ar vroadelouriezh? Moarvat o plediñ gant yalc'haderion Lise Pondivi, mibion gouerion baour ha na gomzent nemet brezhoneg. Emil Masson a oa bet yalc'hader evelto a zeuas da donnañ outo hag a glaskas deskiñ o yezh a oa ivez yezh ar geizh. A-c'houdevezh eo e teuas da skoulmañ darempred gant izili hag aozadurioù an Emsav.

Egiz ma verkemp'ne labouras Emil Masson da vat en Emsav nemet etre 1912 ha 1914, ha bepred e reas gant an dezo da dreiñ an Emsav war-du ar gleizelouriezh hag ar frankizelouriezh. BRUG, da skouer, a oa awenet gant anarkouriezh Gustave Herve, rener ar "Guerre sociale", kenskoliad Emil Masson e Lise Brest (Herve en doa saveteet e vuhez dezhañ, a-hervez) ha klask a rae ar skrivagner breizhat ren e rannvro Wereg ar stourm en devoa renet Gustave Herve en "Yonne" er bloavezhioù-se.

E sell d'ar stourm-se en devoa dedennet stourmerion zo eus ar Strollad Broadel evel L.N. Ar Rouz pe Jos ar Bras; staget en doa hemañ outañ dre bourchas dezhañ - a oa skolaer kristen - betek neuze - ur plas skolaer end-eeun didand ar gouarnamant e Leon.

E gleizelouriezh - hiniennelour hag amreizhkred a-walc'h - e zegasas a-wechoù da ober kammedoù goullc, evel kenlabourer e-pad ur pennad gant ar "Pensée bretonne", ur gelaouenn savet gant ur sokialour likour diboulet, Yves Lefebvre, eus Montroulez, hag a oa mement dres da stourm ouzh an Emsav. Moarvat e paouzas Emil Masson buan a-walc'h a genskrivañ er gelaouenn-mañ hogen seurt degouezhem a ziskouez ivez n'en doa ket Emil Masson ur velidigezh sklaer eus pezh e oa an Emsav.

E-pad ar brezel e oa bet diskaret an Emsav, L.N. Ar Rouz a oa repuget e Bro-Saoz d'ar c'houlz-se ha n'en devoe mui Emil Masson darempred nemet gant al luskad kleizelour-anvelielour e Bro-C'hall ha n'en devoa ehanet nepred a bleustrif. E Bro-C'hall edo gwiziennoù kefredel Emil Masson ha n'eo ket kement-se e Breizh nag en Emsav daoust pegen pell bennak ez eas war hent ar vroadelouriezh (hogen anzavomp ivez e oa Breizh neuze ur gouelec'h kefredel).

Daoust m'en devoe un tammig levezon war stourmerion zo eus an Emsav kentañ e voe Emil Masson disoñjet etre an daou vrezel dre m'edo e-kichen an Emsav kentoc'h eget ebarzh (1). Ret eo lavarout ivez ne voe ket gouest Emil Masson nepred da ren un obererezh politikel padus en abeg d'e yec'hed. D'ar mare ma oa deuet da vat d'an Emsav

(1) N'en devoe ket muioù-h war al luskad kleizelour e Bro-C'hall hag evit an hevelep abeg. E oberenn a zo bet ur c'hevandir kollet, un "Atlantis" bennak, evel an Emsav kentañ e unan e gwirionez.

e oa klañvet gant un neuroz a vire outañ a gousket hag a esmoliñ. D'ar c'houlz-se, ur mezeg eus Paris, Chaslin e anv, a oa deuet a-benn d'e bareañ. Pa glañvas endro avat e 1921 (adal 1918 e gwirionez) ne gavas mezeg all ebet gouest d'e brederiañ ; dizeriañ a reas tamm ha tamm ha mervel diwar an disvoued koulz lavaret e 1923.

II.- STUMMADUR HAG ENDRO KEFREDEL

Meneget hon eus endev darn eus elfennoù stummadur Emil Masson. Kounomp eta ar skrivagnerion hag ar gefredourion a genveredas da reiñ e vennoziadeg d'ar skrivagner brezhon-mañ. Notomp, eveljust, luskad gwerinelour-tadelour an "Universités Populaires" o devoa da aotrouniezhou speredel skrivagnerion he prederourion evel Tolstói, Carlyle, Nietsche, Walt Whitman, Ibsen.

Ret eo notañ ne voe ket Emil Masson perzhiek el luskad kengladelour daoust ma pleustras e Paris ur metou dispac'helour. E vestr a zo bet Tolstói, dreist-holl e deroù hag e dibenn e vuhez kefredel, e-pad ar brezel bed kentañ a reas anezhañ ur peoc'helour tout. Ncarvat en devoa lennet Marks ha kemeret notennoù diwar e lennadur hogen nac'hañ a ras ober eus ar "stourm etre renkadoù" pennañ devouder an Istor ; da vihanañ, ne roe ket d'ar stourm-se hag ar ster hag ar pouez a ro dezhañ ar varksourion reizkredennek. Evel n'hon eus merket e pleustre dreist-holl, - dre vicher koulz ha dre zoug personel - oberennoù ar skrivagnerion saoz hag amerikan. A-gevret gant e wreg Elsie e troio skridoù Saozon zo e galleg, re Ruskin - ma estlamm outañ - , Carlyle, Morris, pe Amerikaned evel Whitman ha Thoreau.

Padal e c'heller gwiriañ ivez n'en deus darempredet Emil Masson a-hed e vuhez nemet stourmerion eus ar gostezenn gleizelour gall ; da vihanañ, betek hiziv, ez eo anavezet kalz gwell(a-drugarez d'al levr hon eus meneget) an darempredet en deus bet gant ar gostezenn-se eget ar re en deus bet gant an Emsaverion (un arouez ouzhpenn eus gwanded an Emsav). Reiñ a raimp bremañ ur roll eus e gonskrivourion er metou kleizelour gall ; ar roll-se a ziskouezo a-walc'h e pelec'h edo gwir vuhez kefredel ar skrivagner. Menegomp da gentañ eta an anvelour Gustave Herve, kenskoliad Emil Masson e Brest hag e vignon, kent na droas da vroadelour-sokialour gall kristen goude ar brezel kentañ. D'ar mare m'e zarempredas E.M. e oa anezhañ un anarkour eta, rener ar "Guerre Sociale", paotr ar "banniel plantet er bern teil" - lukan a zegasas anezhañ meur a wech dirak al lezioù-barn gall e-lec'h e voe barnet da vezañ toullbac'het. Gouzout a reer ez eo Gustave Herve an hini a heñchas Emil Masson war-du ar stourm renkadel e-touez ar gouerion hag e oa bet savet ANTEE e sell dezhañ.(1)

(1) Ma lakaer Cachin a gostez ne hañval ket ar Vrezhonez o deus c'hoariet ur roll bennak en Emsav kleizour-komunour e Bro-C'hall bezañ bet gouest da zegemer reizhkredenmegezh an Emsav-se pe ar genarzh anezhañ. Na gounor anvioù NIZAN e-pad ar brezel, Pierre Herve ha Tillon war-lerc'h ar brezel.

E-touez e vignoned kentañ edo ivez Joseph Lotte, ur Breizhad all, a voe e genvreur e Loudun, hag a blede a-gevret gentañ gant an "Universités Populaires" (hemañ ivez avat a droas endro d'ar gatoligiezh hag a savas ar "Fédération Universitaire" a-c'houdevezh). Dre Joseph Lotte an hini eo e teuas Emil Masson e darempred gant Péguy a embannas oberenn Emil Masson "Yves Madec..." ebarzh "Les cahiers de la quinzaine..." hogen ne voe ar skrivagner brezhon nepred ur mignon a galon da rener ar gelaouenn-se.

Konskrivourion c'hall all Emil Masson a voe dreist-holl c'hweluniadourion frankizelour ha dispac'helour. Eus ar seurt-se e oa Jean Grave (1854-1939) a zisperm roudoù Proudhon ha Bakounin (Emil Masson e unan a heulie kentoc'h roudoù Stirner) (1). Eskemm a reas ar skrivagner ivez lizhiri gant André Spire (1868-1966) a oa ur yuzev a orin bourc'hiz eus Nancy, Sionour d'ur mare ma ne oa ket Emil Masson c'hoazh deuet d'ar vroadelouriezh vrezhon ; ober a reas André Spire zoken ur c'homdemenn bennak e ti Emil Masson e 1906 hag e 1908.

Bez e reas Emil Masson anadudegezh gant Pierre Monatte a voe ezel eus kengor kengevreadel ar C.G.T. e 1912-1913. Monatte a harpas labour Emil Masson : dastum a ras komanantou evit BRUG e burev ar "Vie Ouvrière". Kreñvet e voe o c'henalliezh dre an hevelep emalc'h a gemeras an eil hag egile dirak ar brezel bed kentañ ; nac'hañ a reas Monatte sevel a-du gant ar vroadelouriezh c'hall e 1914 hag evit se e roas e zilez eus kengor kengevreadel ar C.G.T. e dibenn 1914.

Skolaerion e oa Louis ha Gabrielle Bouet ha mignonezh a galon en devoa Emil Masson evito. Eñ a oa sekretour kevreadel ar "Fédération de l'enseignement" (tuat d'an anvelouriezh) ha rener ar gelaouenn "L'Ecole émancipée". Da houmañ en devoa Emil Masson kaset ur berrlevrign savet gentañ e-pad ar brezel : "Irlande et Bretagne. Réflexions très générales sur deux exemples de la perfidie de l'histoire" hogen al labour-mañ a oa bet miturniet ha disneuziet gant an embanner (ha na oa ket mui Bouet d'an ampoent).

Dre bPierre Monatte e oa deuet Emil Masson da skoulmañ darempred gant Romain Rolland, skrivagner gall araogelour a c'hounezas gwallvrud en e vro o nac'hañ harpañ politikerezh e c'houarnamant ; dre lizher hepken a-hend-all e tarempredas Emil Masson ar skrivagner gall rak hemañ a oa repuet e Suiz goude bezañ embannet e ziskleriadenn wallsonus da ziskouarn c'hall vrogar "Au dessus de la mêlée". Estlamm en doa Emil Masson ouzh kalonegezh Romain-Rolland a oa bet e unan e-touez ar gefredourion c'hall a neuze o tisteurel alfo brogar e genvroiz ; ret eo anzav a-hend-all ne oa ket gouest an Emsaverion kennebeut - ha tennoe'h oa o digareziñ - da vurutellañ zennoù ar bruderezh brezelgar gall a neuze evel m'en diskouez emzoug Kalloc'h, Taldir, Ely-Montet, Lemordant, al livour mignon da Emil Masson h.a. Evezhiañ a c'heller evit echuiñ e oa enoustlet muioc'h

(1) Emil Masson a felle dezhañ sevel buhezskridoù an anvelourion bennañ. Treiñ a reas e brezhoneg meur a verrekrid savet gant Elisée Reclus hag a denne da gudennoù ar gouerion : A mon frère paysan h.a. Elysée Reclus, an douaroniour bruet, en doa kemeret perzh er "c'hoCommune" ha ranket en doa divroañ da Suiz. E 1912 e teuas er-maez troidigezh E.M.

Emil Masson el luskad kleizelour gall e-pad ar brezel eget en Emsav hag an dra-se a zo bet anat da geñver e varv. Harpet e voe e intañvez gant 'kleizelourion' c'hall a seurt gant Romain-Rolland, Louis ha Gabrielle Bouet, Marcel Martinet h.a. ha n'eo ket gant an Emsav.

Dre vras evelkent e oa pell Emil Masson diouzh lodañ penn-dabenn savlec'hiadurioù ar gleizelourion c'hall evel m'en diskouez arroudoù zo eus e lizhiri a venegomp epelloc'h ; klaska rae er c'hontrol skignañ er metou-se memmoziñ an Emsav. A-hend-all, bez e ouzer e oa ur peoc'helour eus E.M. - bout m'en doa lennet gant dudi levr Sorel diwar-benn ar feulster : "Réflexions sur la violence", tra ma oa an darn-vuiañ eus ar c'hweluniadourion a zaremprede dispac'helourion. Dre ma tegemere dre vras uhelplac'hoù al luskad e veze damantet da Emil Masson met ne zalc'hed ket kont eus e ali.

E Breizh end-ocun en doa mennet Emil Masson ken-labourat gant ar c'helo'hiadurioù kleizelour hag o zreif war-du al labour breizhek. Merkañ a reomp e-lec'h-all en devoa embannet ANTEE da gentañ ebarzh ar "Rappel du Morbihan"(1) hogen pennadoù all en devoa embannet ebarzh ar "Prolétaire breton, organe de l'Union des syndicats de l'orient". François Le Levé - an Neùs eus BRUG - (1892-1945), c'hweluniadour dispac'helour en Arsanailhen Oriant a blede gant ar gelaouenn-se.

Evel m'hon eus menket dija, disoñjet. kremp ez eo bet anv Emil Masson er metou kleizelour gall koulz ha Brezhon ; an Emsav hepken en deus miret un tammig efivor anezhañ (2). Moarvat en deus klasket aozer al levr gallek diwar e benn Jean-Yves Guiomar brudañ anezhañ evel kleizelour dreist-holl hogen anat eo ne c'hell kaout levezon e Breizh nemet evel brogarour ; n'en deus lec'h ebet el luskadoù kleizelour diniver a hiziv.

III.

=====
ENDROADUR MEMMOZIOU EMIL MASSON DRES A-RAOK HAG E-PAD AR BREZEL KENTAN

Bez e c'heller merzout endroaddir ar memmoziou-se a-dreuz e genskriverezh. Ar gwellañ eta e vefe menegiñ un toullad bonnoù tennet diouzh e lizhiri. Tenn a c'hellfed ivez al levr diwezhañ bet savet gantañ : "Le Livre des hommes et leurs paroles inouïes" embannet ebarzh ar "c'ha Cahiers idéalistes" a-enep d'ar gofredourion c'hall o devoa harpet ar brezel.

E gwirionez, un hiniennelouriezh arloupet a oa e diazezh memmoziadeg Emil Masson :

"Bepred pep tra evit an hinienn ; n'eus nemeti a zo ha n'eus netra hepti..."

Hini ebet ac'hanomp ne c'hell dieubiñ e nesañ ; te, en em zieubiñ a rez-te..."

(1) Eus an embannadur klok e stumm ul levr eus ANTEE e voe tennet 500 skouerem a goustas 107 lur da Emil Masson ; er penn-kentañ ne gavas ket Emil Masson kalz gwerzh d'e levr rak anzav a rae un nebeut mizvezhoù war-lerc'h n'en doa gallet tapout en-dro nemet 30 diwar ar 107 lur-se.

(2) Meneget e voe e varv war Breiz Atao ; Yann Sohier a gemeras anezhañ da baeron ar Falz koulz ha kevreadelourion vrezhon 1936.

"An dispac'h ne vo graet nemet dre an hinienn ha n'eo ket dre an engroez..."

Alese ivez ar preder kentañ roet gant Emil Masson d'ar "gwelladur speredel" hiniennel (hemañ a oa ivez, a-hervez preder kentañ ar varzhed ha Yann ar Fusteg, pergen) ; mab-den ne c'hell kaout uhelpal all ebet er vuhez. Degemeret en doa Emil Masson an uhelvennad-se digant Tolstoi hag anzav a rae e oa hemañ a orin kristen :

"Car, en vérité, qu'y a-t-il à faire en ce monde qu'à devenir meilleur ? Hein ? Je te le demande... Et au prix de cela, qu'est-ce qu'une révolution, qu'est-ce qu'une lutte de classes ? " (Respont da vBazot ebarzh ar gelaouenn frankizelour "L'émancipation")

Distac'ladur an holl frammoù stadel pe led-stadel a oa unan eus e brederioù all :

"Une suite d'opérations qui s'est achevée sous les yeux de mes parents a promu la cléricature laïque à la situation de cléricature ecclésiastique ; l'une et l'autre ont pour fonctions d'assumer dans l'Etat toutes sortes de persuasions, toutes les propagandes spirituelles..."

Daoust ma tarbenne keal ar "stourm etre renkadoù ne felle ket da Emil Masson reiñ d'ar stourm-se nag un doare feuls nag ur vent etrevroadel ; lec'hiañ a rae ar stourm-se bepred e par Breiz hepken ha diazezañ a rae anezhañ war ar gouerion. Skouerel e oa eta degouezh kevredigezhel Breizh :

"Parmi ces héros égarés, parmi les prolétaires du monde, il en est qui, moins que les autres encore, ont une patrie à défendre et qui, plus que les autres, en ont une à conquérir. Ce sont ceux du pays où nous sommes : les prolétaires bretons..." (C'hwevrer 1913)

Padal, daoust ma rae Emil Masson van a-wechoù da zegemer tezennoù an anvelouriezh ne oa meizour ebet e Breizh chalet mioc'h gant natur ar veliezh virion. Da Jean Grave, da skouer, e skrive :

"Ma conviction s'affirme que jamais nous ne sortirons d'une autorité..."

Hag en ul lizher all eus ar 16 a viz C'hwevrer 1908 :

"Krediñ a ran en deus graet ar galloud politikel (1) kement a zroug, hogozik netra nemet droug abaoe maz eus anezhañ, maz eo trellet ar wellañ en e sigur. Hogen ne dizhan ket meizañ e c'hellfe ar gevredigezh denel e zioueriñ..." (troidigezh)

"Chademañ a ra an aotroù (2), maz eus ul loen mut eus an aotroù met an aotroù an hini eo a zieub maz eus un den eus an aotroù e gwirionez..." (troidigezh)

(1) "Autorité", (2) "Maître".

"Hogen an Natur a vir na ve ar Geoded graet nepred gant tud dieub nemetken. Beli ar re a zo dieub a chomo eta diazez ar c'hevredigezhioù da zont..."
 "Ar pezh a zo direizh a-grenn er gevredigezh kempred n'eo ket an digevatalded armerzhel (didec'hus eo houmañ, a gredan) hogen korvoidigezh an digevatalded-se gant an hiniennelourion washañ diwar goust ar re lent, ar re zicuziek, ar re ziemskiantek..."
 "(Ret eo ober) e seurt doare ma anavezint an digevatalderioù gwerc'hak, ar re wirion, ar re reizh ha m'o digemint diouzh an digevatalderioù diwirion, gacuiat ha direizh..."

Lizher eus an 22 a viz c'hwevrer 1908 d'an hevelep kenskriver :

"O vezañ maz int digevatal dre natur ez eo barnet an dud da vevañ hervez un urzhaz naturel ; ret eo d'ar sodion sujañ d'ar re speredek ; ret eo d'ar re wan sentiñ ouzh ar re greñv..."
 "Kudenn ar gevredigezh a c'hoarvez eus ober eus ar Mestr (anadem ha na c'heller ket dizarbenn) un den reizh, da lavarout eo un dieuber..."

Lizher eus an 22 a viz Meurzh d'an hevelep kenskriver :

Hogen kavout a ra din penaos burutellerezh an anarkourion hag en ken galloudus pa vez anv a nac'hañ, a chom gwan da sabatuiñ pa vez kont a sevel un dra bennak ; hogen gwir eo, hervez Bakounin, a-walc'h eo nac'hañ..."
 "Renet omp gant sklaved e naogent-nav degouezh war gant..."
 Ar sklaved-vistri-se a zo mac'homenion, turanted, skraperion-c'halloud...
 Dispac'h an anvelourion a rank daskoriñ d'an aotrouion o renk a aotrouion..."
 "An aotrou en deus ranket deskiñ sentiñ da gentañ, stourm outañ e unan hag ouzh ar re all, evit en em zigabestrañ..."
 "Ur seurt kevredigezh a empleg ar c'hontrol bev eus ar gevatalded hag ar reizid a chom enni a zo graet gant ur genurzh geveilel... (1)"

Lizher eus ar 5 a viz Ebrel 1908 d'an hevelep kenskriver :

"N'eus arvar ebet ez eus un droukvesk hep e bar e keal an anarkouriezh... Diwanañ a ra an droukvesk-se eus abafed an anarkourion dirak kudenn ar vuhezgezh...
 An hiniennelourion : garvoc'h hag hardishoc'h int ; ne embannont nemet ul lezem : hini an hini kreñvañ...
 N'em eus ket dibabet. Anzav a ran penaos reel ar gommourion a hañval din bezañ diamzeriet ha nevez en diavaez hepken.

(1) "Mutuel".

"A-benn ar fin, d'am soñj, n'eus anezhi nemet un doare yaouankaet eus ar gristeniezh-demokratelouriezh kozh. Hogen reel an hiniennelourion, a-hend-all, a zo ganti un ton kriz ha ferv..."

Lizher eus ar 17 a viz Mae 1908 d'an hevelep kenskriver :

"Frankizelourion hag anvelourion (en em zislavar ; bez e fell dezho bezañ) mistri diharz ar vuhez, an douar, anezho o unan... Hogen bevañ a reomp e-mask sklaved ha bez ez omp-ni hon unan, e devoud, sklaved..."
 "Daoust ha gallus eo e ve sevenet ur seurt dispac'h skouerel ? N'eo ket..."
 "Korvoiñ a ra ar vrientinelezh kozh (bourc'hiz) ; labourat ha digabestrañ eo a ra hor brientinelezh-ni..."
 "Infâme saltimbanquerie électorale..."
 "Hogen derec'hel a ran da grediñ ez eus un niver bras a dud, un niver bras a wirionezioù ha na c'hellont bezañ gounezet nemet dre ar feulster..."

Lizher eus an 20 a viz Mezheven 1908 d'an hevelep skrivagner :

"An dispac'hoù gwirion nemeto eo ar re hiniennel..."

Lizher eus an 29 a viz Eost 1908 d'an hevelep kenskriver :

"Ezhomm o defe eus ur yoc'h a gelemnerion war ar frankiz..."

Lizhiri da André Spire :

"Kelted ha Yuzevion a zo bet ar re gentañ o tifaostañ douar uropa... Tud trec'het, dibezhiet, mac'het ez omp...
 Ar C'helt hep mammvro, ar Yuzev hep mammvro, a wered donoc'h, o vont pelloc'h betek ar pep pennañ, war donkadur an denelezh eget a rajent ma vije kanolioù war o zro..."

E ser ANTEE :

"Gwelout a ri ennañ penaos e c'heller bout onepbrogarour ha brogarour war un dro..."

Lizher eus ar 7 a viz Meurzh 1915 d'an hevelep kenskriver :

"Kudenn ebet n'eo diskoulmet gant ar brezel, gant ar feulster. Dont a ran da vezañ maic'h tostoat eget on bet pemp bloaz warn-ugent a zo..."

Lizhiri da bPierre Nonatte, 30 a viz Kerzu 1914 (e ser brezel 1914):

"(Bez e fell din bezañ) un Den erfin er wrac'hollad bras dreistgoñvor a vaulkeed, a ziskianted, a zivergonted, a bilpouzion, a louaded, a c'honilhad, a ein o vegeliat, a verc'hed usterek... Ha me fell din feulsoc'h eget biskoazh

"chom hep bezañ unan eus an Niver..."
 "Ar bedenn - diouzh gwir ster ar ger - : engalvadur an nerzhoù da zont e-kreiz ar c'hevren, a vo ar garg nemeti a vo e dalc'h ar re a zreistvevo..."
 "Nac'h ar servij-soudard er bed a-bezh a vo an arouez nemetañ m'en em anavezint drezañ : kristenion ha sokialourion a vo unanet ennañ ha drezañ..."

Lizhiri da Louis ha Gabrielle Bouet, 30 a viz Kerzu 1914 :

"Manac'h e oan (1) hag en em gavout a ran bezañ manac'h e devoud... Nac'hañ (a ran) emezelañ e n'eus forzh peseurt stroll bennak e ve..."
 "Komz a rit adarre a genurzhiezh. N'eus kenurzhiezh all ebet estreget hini ar youloù n'en em ereont ket kenetrezo... Tout chom hep en em gannañ, chom hep lazhañ, chom hep milligañ... Lezhadeg divent : â gristenion, â sokialourion, ho kevier a zo tadoù ar verc'h-se..."

Lizher eus an 9 a viz Gouere 1915 d'an hevelep re :

"Doue, m'henn tou, ar Bugel an hini eo...(2)"

Lizher eus an 22 a viz Mezheven 1916 d'an hevelep re :

"Douetañs am eus diwar-benn furnez - ma n'eo ket diwar-benn e wirionded - un den hag a vez o wastañ glaour ha liv hag o skuzhañ e empenn kemendall evit diskouez n'eus Doue ebet... (3)"

Lizher eus ar 4 a viz Eost 1917 d'an hevelep re :

"A c'hell bezañ ne c'heller seveniñ un dispac'h nemet e-kreiz ar feulster met sur eo ivez e rank mont da get - hag e rank mont da get dre ar feulster end-ecun - kement eus ar feulster a vo e dalc'h ar feulster..."
 "Kontrol bev ar wirionez eo ar feulster..."
 "Ne roan ket da grediñ emañ dreist d'ar feulster (Doue a oar em eus poan a-walc'h d'en em zizober dioutañ en disterañ oberoù eus va buhez)..."
 "En ho sell, emañ pell diouzh ar stourm etre renkadou? C'hoazh ur wech, n'emaon e chal gant ar stourm etre renkadou nemet diouzh m'eo lodek ennañ keal ar reizhdad hag ar skiant..."

Lizhiri da Romain-Rolland :

"Koded Doue maz eo an dud ar saverion anezhi..."

(1) Damveneg eus e zezo da vont da vanac'h an Trap p'edo o vevañ e Redec'hen ("Oxford") e 1897 ha pa oa bet hanter mennet da zistreiñ d'ar feiz kristen... (2) Emil Masson en doa bet ur mab er bloaz a-raok. (3) E... a soñje eta n'oa ket tu da gendrec'hiñ den ebet war ar poent-se.

"Daoust pegen distar kristen ez on..."
 "Pe neuze, daoust ha bez ez eo an arvesterezh (1) uhelañ doare an ober ? Gant piv emañ ar wirionez, Marta pe Vari ?
 "Evidon-me em eus hiraezhet d'an ober ha n'em eus ket distaolet ar stummoù izelañ ha fraostañ anezhañ... hogen kredet a-walc'h e vefe ez eo va zonkadur bezañ didalvez..."
 "Gouzout ha karout, oberiañ ha pediñ, azeuliñ, daoust ha n'eo ket an hevelep tra dres...?"
 "Ma ne garez ket ha ma ne renez ket da vuhez diouzh ar garantez, neuze, da breder penn-da-benn n'eo nemet ur bern gevier hudur..."

"Lettre à un instituteur syndiqué" eus ar 25 a viz C'hwevrer 1917 (2) :

"Meizañ a ran mat tre penaos ur "Gall likour" en defe diegi a-walc'h da gemer da bennaenn e ober ar "c'heal tolstoïat" en em ziskouez d'e spered gant e holl wriziennoù kevrennel, relijiel hag avieyel...
 "Evit pezh a sell ouzhin ha diouzh ar savboent a zo va hini, bez ez eo an emzalc'h "stourm etre renkadou" an hevelep hini (daoust ma wisk ur stum dishañvel) hag an emzalc'h "stourm etre broadoù"...
 "Maz empleg ar stourm etre renkadou ar feulster, ne oufen bezañ "stourm etre renkadou". "Pardon is the word for all" ..."(3)

(4)

Edgeriadenn Edmond Bazot da Emil Masson a oa leun a skiant-vat politikel hogen ne ziskoueze tamm ebet e oa gouest dispac'herion Rusia d'an ampoent-se da gemer e gwirionez speredoù ha kalonoù an dud :

"O dispac'hoù a zo barradoù epilepsiezh..."

"Lettre d'un répétiteur en congé"

"Ha me c'hevzhet gant va lorc'h a actreeg nevez gouezet e barch gantañ - war ar brederouriezh - ha mai pe vui sokialour kristen..."

=====

Kavout a ra deomp n'eus ket ezhomm ober addisplegoù d'ar menegoù emañ o paouez reiñ. Koulskoude e vefe mat reiñ diwar o fenn un nebeut diskleriadennoù hag ober ivez un nebeut evezhiadennoù en o sigur.

En em c'houlenn a c'heller, da skouer, perak ez asante renerion gelaouennoù frankizelour ha kleizelour zo da embann pennadoù zo savet gant Emil Masson hag a zislavare a-benn ar fin pennañ tezennoù

(1) "Contemplation". (2) Embannet ebarzh "L'Ecole de la Fédération" ez- "Ecole émancipée". Ar skritur a zo unan ijinnet gant skolaerion ar gelaouenn-se a embannas ivez "Journal d'Yves Madec pendant la guerre". (3) E saozneg er skrid. (4) Rener ar gelaouenn meneget en notenn 2.

a renas "La Pensée bretonne" a-raok ar brezel kentañ. Hogen dre ma oant bourc'hizion o devoa ar stourmerion-mañ perzh ivez en hengoun enep-kloerelour o renkad e Bro-C'hall ha dre se ne c'hellent nemet bezañ enebet ouzh un Emsav a oa reolet, d'o soñj, gant an Iliz hag ar "Chilstourm".

Kemeromp eta degouezh Charles Brunellière. Hemañ a zo ganet en Naoned e 1847 ha mab e oa d'ur marc'hadour levrioù kozh. Bevañ a reas e-pad ur pennad diwar ar paramanterezh. E 1877, da skouer, e oa kevraneg en un ti paramanterezh hag e 1910 en doa savet un embregerezh all, ar "Fédération maritime de Bretagne" a fardas daou lestr-samm, ar "Breiz-Izel" hag ar "Breiz-Uhel". Bez e oa anezhañ eta un doare kevalour.

Da gentañ e klote mennoziou Charles Brunellière gant re ar gostezenn "radikal" e Bro-C'hall ; ezel eo bet zoken dre ziv wech eus ar frañmasonerezh, ar wech kentañ etre 1879 ha 1893, hag un eil gwech etre 1903 ha 1911 hep gellout chom da vat er gevredigezh kuzh-se. E 1883 a-hend-all en em gave e penn ar c'h"Comité républicain radical" e Naoned. Adal 1888 e teuas dindan levezon Karl Marks ; kemer a reas ar gall Guesde da vestr soñjal ha treiñ a reas da sokialour. Ur "Chantier Karl Marx" a savas e kêrbenn kreisteiz Breizh, a-gevret gant Colombe a oa e penn "Yalc'h al Labour", evit difenn al labourerion ha distrujañ ar gevredigezh kevalour. Diwar neuze ivez e pledas Charles Brunellière gant ar c'hweluniaderezh, dreist-holl e-touez gwiniégourion rannvro an Naoned (tiriad ar "muscadet"). A-c'houdevezh e kemero perzh en obererezh ar "Chevalerie du Travail Français" (un doare frañmasonerezh adarre) hag en acozidigezh ar c'h"Comité central socialiste révolutionnaire" en Naoned e 1891. a zeuas da vezañ da c'houde, ur wech dilezet gant ar Republikaned frankizour ha diskarzhet dioutañ an anvelourion, ar "Fédération socialiste de Nantes" e 1894.

Pal Charles Brunellière o sevel ar "F.S.N." e oa ledañ tezennoù ar sokialouriezh e Breizh koulz hag e Vande. Fellout a rae

dezhañ ivez tec'hout diouzh disrannoù ar sokialouriezh parizian ; en abeg da se ivez ne felle ket dezhañ kennebeut all isurzhiañ Naoned d'ar P.O.F. ("Parti Ouvrier Français"). Damheñvel e oa eta emzalc'h Charles Brunellière hag e F.S.N. (diwezhatoc'h F.S.B.) ouzh hini "Rennes Révolutionnaire" hag ar vaourion e Roazhon er bloavezhioù seikont: ar re-mañ ivez a anzav a-wechoù ez eus ur gudenn vroadel e Breizh hogen seurt anzavadenn ne emleg evito heuliad pleustrek ebet e rez ar stourm broadel e Breizh.

Adal 1896 eo e voe dedennet Charles Brunellière gant Breizh. Strivañ a reas diwar neuze da sevel un aozadur sokialour unvan evit Breizh a-bezh ; hemañ a chome distag diouzh ar P.O.F. hag a gemeras an anv a "Fédération socialiste de Bretagne" a viras hec'h emrenerezh betek 1905-1907 ken na voe kemurzhiet an S.F.I.O. Enframmet e voe neuze ebarzh ar Strollad gall-se. Esa a reas Charles Brunellière moarvat mirout un tamm emrenerezh evit ar c'hevredad breizhat hogen abarzh pell e rankas plegañ hag asantiñ da ziempredur ar "F.S.B." etre kevredadoù ar pemp departamant breizhat ha na zalc'hjont a-hend-all kevrenn ebet kenetrezo.

Ur brogarour e oa moarvat eus Charles Brunellière. Dre ma oa un tamm bourc'hiz anezhañ en devoa deskadurezh ivez - na disoñjomp ket a-hend-all e oa e dad marc'hadour levrioù kozh, en o mesk moarvat levrioù o tennañ da iser Breizh, da skouer ; e devoud ez anaveze madik a-walc'h istor Breizh. Dave a ra en e skridoù da dremenad Breizh, d'ar chouanted h.a. Ur skiant lemm en devoa eus dibarelezh Vreizh ha kavout a rae dezhañ (hag an dra-se a glaske diskouez ivez) e c'helle an dibarelezh-se talvezout da ziazezañ e Breizh ur stumm arbennik a sokialouriezh. Ne oa ket broadelour avat : seurt savlec'h en dije degaset dezhañ gwall vrud ur "c'hilstourmer". Lezh a hete e oa un doare emvelestrezezh a seurt gant an hini o doa - war e veno - Kembre ha Skoz.

Perak n'eo ket deuet a-benn da saveteiñ ar "Fédération Socialiste de Bretagne" daoust d'ar roll pennañ en doa kemeret er savidigezh anezhi ? Kement-se a zo aes a-walc'h da gompren. Daoust

d'e vrogarouriezh e oatouellek spered Charles Brunellière gant keal ar stourm etrerenkadel hag an etrevroadelouriezh. Ent pleustrek avat n'eus ket a'etrevroad"nag a "estrestad" ; ha ne vern penaos, un"etrestad" ne c'hellfe bezañ nemet un dreist-stad heñvel ouzh ar stadoù arall, ha pergen ouzh ar stadoù impalaerel. E gwirionez n'eus nemet broadoù ha ma tle ar stourm etrerenkadel bezañ efedus e rank ivez bezañ renet e rez ar broadoù oc'h hanvezout da vat ; se zo lavarout, da gentañ, e vo adkavet e rez ar stourm etrerenkadel ar c'heñverioù a nerzh a c'hoarvez etre ar broadoù. Ne c'heller ket empennañ e c'hellfe strollad komnour ur vroad vihan - hini Albania hiziv, lakaomp - c'hoari ur roll bleniañ en emsav komnour etrevroadel. Adal ma vo bet diorreet ur strollad pouezus en ur vroad vrasoc'h e vo kemeret penn an Emsav"etrevroadel" gant ar strollad-se. Ma vefe trec'h ar vaouriezh e Bro-C'hall pe en ur vroad all a Europa peseurt pouez he defe ur stad vaot e Breizh ? Sklaer a-walc'h eo kement-se. Ret eo gouzout he deus an "etrevroadelouriezh" ur mennad a c'halloud kevandirel, da vihanañ, hag hollvedel a-benn ar fin.

En tu-hont da se ne gave brogarouriezh Charles Brunellière sol fetis ebet ; n'en em skore war gevala istorek ebet ; an anaoudegezh en doa eus istor Breizh a chome un anaoudegezh varv adal ma ne lec'hie ket e obererezh e linsenn an istor-se ; ar c'hontrol an hini a rae avat peogwir en em savlec'hie e-keñver istor Bro-C'hall bewech m'en em dremene da republikan ha bewech ma emezele en un aozadur gall rik (evel ar frañmasonerezh, stag ouzh istor ar gevredigezh c'hall) ; dre se, an dave a rae da istor ha da stuzegezh dibar Breizh a-benn goulen an emvelestrevezh eviti a oa amsteriek a-grenn.

Kemendall a c'heller lavarout diwar-benn obererezh darnel Emil Masson ha Frañsez an Nevez ("Le Levé") ebarzh ar "Rappel du Morbihan" - e-lec'h e voe embannet ANTEE a bennadoù hag ar "Prolétaire breton". Ar stourmerion-se ne zeujont ket a-benn da gavout un ere kempoell o c'hoantadoù broadel hag o mennadoù renkadel ha n'o doa ur ster politikel nemet e framm Bro-C'hall hag hec'h istor. En abeg d'an dislavar-se etre broadelouriezh ha renkadelouriezh chomet diode e kavas gwell ur stourmer evel an Nevez dilezel pep obererezh brezhon

goude ar brezel bed kentañ.

Un azon arall eus an diempradur etrevroadelouriezh renkadel ha broadel en ur Vreizh arallekaet ha renet gant Breizhiz oc'h asantif d'o arallekadur - e-keñver yezh, sevenadur ha stuziadur - ez eo degouezh ar gelaouenn "La Pensée bretonne" a voe savet gant Yves Lefebvre, eus Montroulez, e miz Mezheven 1913.

Ar pezh a ranker pouezañ warnañ en degouezh-mañ eo e oa bet an Yves Lefebvre-mañ(1) ur stourmer sokialour eus ar "Fédération Socialiste de Bretagne", keveler da Charles Brunellière, hag e oa perzhiek en hevelep hengoun gall a republikanelezh bourc'hiz- enep-kloerelour. Pal ar "Pensée bretonne" a oa stourm ouzh ar "Ohilstourm kloerelour" enkorfet, gouez da Lefebvre, en Emsav e unan abaoe deroù ar c'hantved.

"Nous arracherons la pensée bretonne à la réaction cléricale..."

Deurus eo e meur a geñver skrid an "Appel" a voe moulet e niverenn gentañ ar gelaouenn e miz Mezheven 1913 ha klask a raimp amañ pelloc'h reiñ ur c'hrennad eus mennozioù penañ ar "C'halvadenn"-se.

Diskleriadur kentañ saver ar pennad-se eo e oa Breizh a sevenadur gall ha gallek. Ha menegiñ a raed ar Vrezhonek veur-se a oa oa bet "Gallaoued eus Breizh" : Abelar - en dije bet mezh o komz brezhoneg - , Le Sage, La Mettrie (ur mezeg eus Sant-Milo, prederour danvezelour, bet e servij Bro-C'hall ha Prusia - Caradec de la Chalottais ("filozof", drailhaer Jezuisted a zoare) Cnâtesubriand, La Mennais, Renan, Brizeux, Clément Roger (2). Hag ouzhpennañ a rae Lefebvre :

"Aujourd'hui encore les Bretons dont on trouvera les noms sous ce manifeste sont des hommes de culture française dont l'originalité personnelle s'est tout d'abord alimentée au vaste fond d'art de science et de haute intellectualité qui est la gloire du génie français..."

E gwirionez ne oa ket bet Lefebvre e unan oc'h eztaolif

(1) Lefebvre a gendalc'has da enebif ouzh an Emsav goude ar brezel kentañ hogen e albac'henn wirion a oa ar stourm enep-kloerelour. Kouezhañ a reas neuze er romant pornografek a-enep d'ar veleion. (2) Dianav deomp.

hevelep mennoz. De Lantivy hag an Diberder a anzave ivez e oa Breizhiz a sevenadur hag a stuziadur gall. D'ar c'houlz-se ne c'hell un Emsaver nemet koll e pep keñver o tont d'ar stourm brezhon ; hemañ, evit ar poent, ne c'hell ket pourchas dezhañ ur framm oberiañ gouest da ziorren e holl varregezhioù kevredigezhel ; hep kontañ eveljust an holl ziaesterioù ha trubuilhoù a sammo anezhañ en e vuhez prevez ; ha moarvat en devoa Yves Lefebvre ur skiant lemm tre eus kement-se holl.

Bremañ avat, ur seurt savlec'h, - ma talc'h kont eus talvoudegezh kevredigezhel an den, - ne zalc'h ket kont evit keloù se eus e dalvoudegezh personel ha speredel. En ur stumm e c'heller lavarout ez eo talvoudegezh personel an Emsaver pe an dispac'her digenvezet dre e stourm hogen krouer ur gevredigezh nevez, dreist da hini ar "bourc'hiz" diazezet en ur gevredigezh stadel e-lec'h ne ra nemet mirout ur c'hevala bet dastumet gant re all hep e greskiñ peurvuiañ.

Ret eo ouzhpennañ ez emplege emzalc'h Yves Lefebvre meur a zislavar. Diboell eo, da skouer, en em lakaat e framm Breizh istorel (goude ma n'en dije meneget nemet Abelar ha ar Chalotez) evit diogeliñ ez eo Breizh unan gant Bro-C'hall. Hogen an arroudennoù da heul a lakay anat digempoellderioù preder ar "filozof" bourc'hiz-mañ :

"Nous aiderons la Bretagne à reprendre conscience d'elle-même, à retrouver l'originalité de son génie... Elle travaillera à l'émancipation de la race bretonne (anv a zo amañ eus ar "Pensée bretonne"). Elle sera régionaliste dans le meilleur sens du terme mais hostile aux fanfaronnades d'un séparatisme que rien ne justifie. Elle sera pénétrée du vieil esprit de liberté (klevit : e-keñver an Iliz) auxquels les Celtes furent attachés de tout temps. C'est à la Bretagne libre et vivante que nous faisons appel... Pour l'honneur de la Bretagne, pour l'honneur de la France, notre patrie commune à tous, Bretons de France..."

Komz a raemp eus dislavaroù. Anat eo, da skouer, ne c'hell unan emouezañ outañ e unan anez kemer skiant eus e zibarelezh hag en em enebiañ war un dro ouzh unan all diforc'h ha disheñvel dioutañ. A-hend-all, penaos e c'hellfe Breizh emouiziekaat adarre hep c'hoantaat ar vuhez rez a ya a-unan gant pep emouiziegezh ?

Notomp, war ar marc'had, ez implij Yves Lefebvre geriennoù ha troiennoù an Emsav kentañ, hini ar "race bretonne", da skouer. Dre se e voutc'he gant an Emsav e unan un daelerezh ha na c'helle nemet degas anezhañ da zegemer savlec'h an Emsav pe da zilezel pep ober evit Breizh.

E gwirionez, er pennad-mañ ne ra Lefebvre nemet sentiñ ouzh e albac'henn bourc'hiz gall enep-kloerelour a zouj evel ar vosenn ur Vreizh e dalc'h ar veleion ha na gav tu ebet herzel ouzh an hurlink-se nemet dre stagañ Breizh da viken ouzh ar STad c'hall republikan ha likour karget karget da ziwall Breizh diouzh gwalemm ar relijion.

A-hend-all, arguzenn ar perzh kemeret gant skrivagnerion ha kefredourion zo a orin breizhat er sevenadur gall ne spir tamm ebet kennebeut. N'eo ket a-walc'h da unan bezañ bet ganet e Breizh a ouenn vrezhon evit ober anezhañ ur Brezhon ha reiñ dezhañ ar gwir da gomz en anv pobl Vreizh. An holl skrivagnerion-se o deus renet o buhez skrivagner e framm Bro-C'hall (pe ... Brusia e degouezh La Mettrie) ; oberiet o deus eta e par ar gevredigezh c'hall ; ar gevredigezh nemeti a c'hellont enouestlañ eta a zo ar gevredigezh c'hall ha n'eo ket ar gevredigezh vrezhon na c'hellfe ket harvezout hep o disteurel end-eeun.

E gwirionez ne ra Lefebvre nemet eztacliñ savboent ar renkad bourc'hiz brezhon bet gallekaet ha gounezet d'ar framm gall a-hed an istor. E sokialouriezh ne gemm netra en afer. Ar preder sokialour-marksour a zo bet e Breizh ur preder bourc'hiz. Hogen si ar bourc'hiz brezhon-se a zisprize ar werin a oa bet merzet mat

Pennad 21

A r f a e z h a d e l o u r i e z h v a o r a s a t
e d i b e n n a n E m s a v k e n t a ñ

Unan eus an abegoù a ziskleir perak ne zeuas ket tre er Strollad broadel stourmerion a asure a-hend-all e oa anezho broadelourion a voe ar bri a zougent d'ur gelennadurezh politikel evel hini Maurras. Gwelet hon eus avat penaos en em gadarnaas an Emsaverion gentañ ken war dachenn ar "sevenadur" ken war dachenn ar politikerezh dre en em zisrannañ diouzh ar gostezenn dehoù gall, pergen hini ar roueelourion awenet gant Maurras e deroù ar c'hantved. Unan eus al levrioù bihan gentañ a voe embannet gant ar Strollad Broadel kentañ dindan sinadur Le Mercier d'Erme a oa mennet dres da zisplegañ perak e felle d'ar vroadelourion disteurel ar galloud diwall minor a zalc'he ar virelourion c'hall war an Emsav.

Bezot pe vezet, ne oa ket bet degemeret hentadur nevez an Emsav gant an holl stourmerion ha darn anezho, eus rannvro Wereg dreist-holl - Y.B. Kalloc'h, de Lantivy-Trédion, Iwan an Diberder(1) - o devoa klasket dero'hel d'ur politikerezh kempennelour enebet ouzh hini ar Strollad broadel. War a seblant koulskoude ne grede ket ar stourmerion-se nemeur e vije bet saviad Breizh dindan ur renad unpennt e Bro-C'hall disheñvel tre diouzh he saviad dindan ar renad republikan. An dra-se a zo anat diouzh ar pennad embannet gant Kalloc'h e 1914 ebarzh ar "Pays Breton" e-lec'h e komz ouzh izili ar gostezenn vaorasat e Breizh :

"Nous sommes quelques nationalistes en Bretagne qui suivons vos efforts avec sympathie, mais sans foi. La monarchie, selon l'Action Française, nous apparaît comme la seule chance de salut pour la France mais nous ne faisons pas partie de vos organisations parce que de notre histoire, l'histoire de la Bretagne et de tous les gouvernements français depuis le contrat de 1532, se dégage une leçon

(1) Kv. ar pennadoù all e-lec'h e komzomp eus ar stourmerion-mañ.

de défiance insurmontable. Qui nous dit que le duc d'Orléans ne suivra pas l'exemple de son triste aïeul, le Régent, qui noya dans le sang de nos gentilshommes une tentative de restauration de nos libertés. Qui nous dit qu'il nous accordera avec l'autonomie administrative et économique cette indépendance morale que nous voulons(1)..."

Dre vras eta e c'heller lavarout en devoa kavet Kalloc'h ebarzh keleennadurezh Maurras ur meizad spis a-walc'h eus pezh e oa ur Stad ; gwelout a rae endro dezhañ avat ne oa ket ar c'heal-se eus ar Stad gwall sklaer e spered an darn-vuiañ eus an Emsaverion, ha pergen e spered ar re a felle dezho adsevel ur Stad e Breizh. Dre se, penaos o dije gallet sevel ar Stad-se ? Setu pezh a zeuer da gompren adarre diwar heuliañ ar vreuradeg a lakaas ar skrivagner-mañ e krog ouz eus un emsaver "demokratelour" war vannañ ar "Pays Breton" e 1914 bepred. War an niverenn 379 e oa bet moulet ur pennad gant Patrice Loth (2) a oa anezhañ un dagadenn a-enep da vMaurras :

"C'est la base même de la pensée et du sentiment religieux que voudrait saper Mr. Maurras... Mr. Maurras a puisé dans le droit romain sa notion de l'Etat ; à elle il subordonne tout, religion et morale... Mr. Maurras opte donc pour la notion romaine de l'Etat ; nous optons nous pour la notion celtique..."

Aes e oa da Y.B. Kalloc'h ober goap ouzh seurt diskleriadenn, o c'houlenn ouzh skriver ar pennad, da skouer, petra oa, d'e soñj urmeizadur keltiek eus ar Stad. Moarvat e verzer a-dreuz ar respont kaset gant Y.B. Kalloc'h e choma hemañ stag ouzh al luskad maorasat en un doare trivliadel koulz lavaret ha dedennet dalc'hmata gant luganoù Maurras (3) hogen deurus eo dibenn ar pennad evelato peogwir e tiskouez en dije gortozet Kalloc'h a-walc'h d'un damkanour brezhon termenñ petra e c'hellje bezañ bet ur Stad vrezhon. E brezhoneg e rae ar menñ pedenn-mañ goude bezañ kumujennet ur wech ouzhpenn an disrannourion "les désaxés du séparatisme" : "Evit echuiñ, O Doue, degasit dimp ur Maurras (keltiek) da ziskarzhañ hor c'hogus-spered..."(4)

(1) Ret eo anavez ne lavar ket kalz tra an dro-lavar diwezhañ-mañ.
(2) H'ouzon ket ha kar e oa al Loth-mañ da Jozep Loth, e vab pergen.
(3) Hemañ, da skouer : "Le Roi, protecteur des républiques françaises..."
(4) A-wechoù e hañvale Kalloc'h hetañ e vije deuet ar c'hont Mariadec de Lantivy-Trédion da vezañ ar Maurras keltiek-se. E devoud en devoa savet hemañ daou skrid : "Enquête sur les libertés régionales et la formation d'Etats régionaux en Bretagne" ha "Vers une Bretagne organisée" Paris, Nouvelle Librairie Nationale, 1911.

Kudenn an ensavadurioù politikel en ur Vreizh dieub eo a dregase an Diberder, ha dreist-holl Y.B. Kalloc'h hag a vire outo, dreist-holl, a emezelañ er Strollad broadel a oa bet savet e 1911. Kredapl eo a-hend-all o devoa ar Wenedourion dehouat ar brasañ disfiz ouzh izili zo eus ar Strollad-se evel Emil Masson e unan. Ar vroadelourion-se, dre ma tistaolent ar reizhveliezh c'hall, ne c'hellent bezañ nemet Republikaned amocet. Setu a-hend-all pezh a skrive Kalloc'h war ar "Pays Breton" d'ar c'houlz ma oa bet savet ar Strollad broadel :

"Vouloir faire du séparatisme sans se préoccuper des institutions nécessaires à tout pays indépendant, c'est agir un peu comme de paysan qui s'obstinait à réclamer un billet de chemin de fer, sans consentir toutefois à répondre autre chose à l'employé qui l'interrogeait sur sa destination : "V's êtes ben curieux à c't heure..."

Ne soñje ket da Kalloc'h eta e oa gouest an Emsav da grouiñ emberr an ensavadurioù a vije bet ezhomm anezho adal ma venned diazezañ ur vroad dishual e Breizh. Abaoe 1911 ez argue a-enep d'an disrannourion n'oa ket tu da sevel Breizh dieub ebet peogwir n'oa e Breizh penn politikel ebet - "na Nevenoc nag Alan-Veur" - gouest da ren ar vro (1). War ar marc'had, a ouzhpenn Kalloc'h, e rankfe Breizh brezeliañ bepred evit derc'hel he dishualded etre Bro-C'hall ha ... Bro-Alamagn (2). Breizh a-hend-all ne c'helle ket chom neptu. Hag amañ e veneged Maurras : "On ne neutralise pas une position comme Brest..." E berr gomzoù, ur Vreizh dieub a oa barnet d'ar brezel diavaez ha diabarzh da viken. A-hend-all, en eneb d'ar Varzhed, n'en doa graet striv ebet da zeskiñ yezh keltiek all ebet ha ne grede ket nemeur en uhelatozh an "Etats-Unis Celtaes" :

"J'en suis partisan," a skrive moarvat, "avec Jaffrennou et tous les Bardes..."

Hogen anv a rae goude-se eus an "désunion tragique de ces peuples" ha ne grede ket nemeur e vijent bet gouest da sevel Stad dishual ebet biken.

(1) Seurt personelezhioù ne c'hellont diwanañ nemet er broioù politikel (pezh n'oa ket Breizh d'ar c'houlz-se) hag en un amzer dispac'h.
(2) Poellata a rae Kalloc'h evel ar Vrezhoned o deus sinet feuremglev 1532. Faezhadelouriezh e oa kement-se adarre. Notit e laka Radiguet da redek en Emsav ar brud e oa prest an Alamann da stagañ ar broioù keltiek ouzh o impalaeriezh. Gant Kalloc'h e klevaer anv alies eus ar vojenn-se.

Evel nouspet re all e randone Kalloc'h eta diwar-benn ur Vro-C'hall kevreadel hag ur Vreizh emren, ur "Bretagne bretonne, uniquement à tous les point de vue mais dépendant politiquement de la France (1) pe, c'hoazh, o respont d'an "Action Française" : "Nous voulons rester une nation sans sortir de l'Etat français..." (hogen peseurt ster a c'helle kaout ar ger "nation" amañ, hep buhez vroadel wirion, hep ensavadurioù broadel dres). Goude-se e komze eus sevel hepken ur "foyer intellectuel breton"(2) hep en em c'houlenn pergen penaos e c'hellfe padeut hevelep "oaled".

E gwirionez, daoust dezhañ hetin e teufe ur Maurras keltiek da sklerijennañ spereoù brumennet ar Vrezhoneg ne oa ket gouest Kalloc'h e unan da zegas kalz gouloù en Emsav (gwir eo e oa yaouank hogen daoust ha kement-se oa un digarez?). E neb lec'h n'en deus displeget - nag Iwan an Diberder e unan - diwar-benn peseurt kevreadelezh, dres, e huñvree na peseurt emvelestrerezh, dres, a faltazie evit Breizh (rak en ur Vreizh oc'h en em vataat eus an emvelestrerezh zoken ez eus ezhomm ensavadurioù). A-benn ar fin ne rakwele Kalloc'h evel politikerezh pleustrek nemet ar c'henlabour gant an "disrannourion" war an dachenn vroadel (hogen ne ziskulie ket ken-nebeut war beseurt diazez). Ar steuñv-mañ a ginnige, da skouer : dihunif ar speread broadel ha konurzhañ ar vro (penaos ? Moarvat dre harpañ, da skouer, "breuniezhoù" ar yezh), difenn ar stuzegezh keltiek, kristen hag henvoazel (hogen o tizeriañ e oant a-benn neuze ha ne oa ket ar Stad c'hall kiriek d'an dizeriadur-se e unan; da adkrouiñ e vijent bet eta hag an dra-se, kennebeut, ne oa ket merzet gant Kalloc'h.)

Ar gwashañ zo eo n'oa ket deuet Kalloc'h a-benn d'en em zizober diouzh brizhkredemoù drochañ ar Geltomaned a oa lodet gant un darn vat eus an Emsaverion gentañ. Evel meur a hini all e krede mui pe vu e mojem ar "Frañs" keltiek : "La France est au moins mi celtique de race et de civilisation..." ha prest a-walc'h e oa da

(1) Kv. e lizher da F. Davigo, d'ar 14 a viz Mezheven 1911.
 (2) A-wechoù, etre 1908 ha 1911, p'edo en harlu, a-raok dezhañ dont dindan levezon de Lantivy-Tredion (kentoc'h eget hini an Diberder a-benn ar fin) en doa diskouezet Kalloc'h bezañ douget d'an disrannouriezh evit enabiñ avat ouzh "breinadurezh" direlijiel Bro-C'hall. Skrivañ a rae : "L'unité française, nous en voulons bien mais que l'on ne nous force pas à choisir entre elle et le salut de l'âme bretonne..."

grediñ e teue ar brezhoneg eus ar c'heltiek kevandirel (1). An dra-se a ziskleir perak ne c'hinas ket pa voe anv a zifenn ar Vro-C'hall "hanter geltiek"-se a-enep d'ar "C'hermaned" (eñvorad Julius Kézar Pa delanvad Neven Mordiern, e genskriver, en em ziskouez amañ).

Unan a soñjfe a-walc'h e c'hellfed gwallegañ degouezh Kalloc'h e-keñver istor an Emsav. Ne gav ket deomp avat ez eus tu d' e ankounac'haat a-grenn, pa ne ve nemet en abeg d'e ampartz a varzh. Hogen en tu-hont da se o deus kavet memzioù Kalloc'h un heklez e kelc'hiadurioù zo eus an eil hag an trede Emsav (war skrivagnerion zo evel Maodez Glanndour hogen ivez war strolloù zo evel hini BLEIMOR, skauted BLEIMOR, e deroù an trede Emsav). A-hend-all ez eo emzalc'h Kalloc'h arouezius a-walc'h eus hini nouspet emsaver all en e amzer end-eeun (2).

=====

(1) An tabut-se diwar-benn orin ar brezhoneg a zo kozh ha "bizantinad" a-walc'h, ret eo lavarout ; orin ar brezhoneg ne zegas deomp gouloù ebet war ar politikerezh o deus an Emsaverion da ren e dibenn an XXvet kantved.

(2) E gwirionez, emzalc'h politikel Kalloc'h a oa divizet gant e youl da virout Breizh kristen (prest e voe da derriñ an darempredoù gant An Diberder pa felle da homañ tagañ tud a iliz zo. Hervez Kalloc'h a-hend-all, ne c'helle aotrouniez speread ar vro bezañ nemet relijiel : "L'autorité sociale, c'est le chef religieux qui la possède ; de fut le druide, ce fut le moine, ce fut le prêtre..." a lavare o vurutellañ komzoù zo as L.N. Le Roux.

Lenn ivez ar pennad savet diwar-benn Kalloc'h ebarzh Istor hol lennegezh.

Pennad 22

Emdroadur ar mennoziou e Gwened
goude 1910 - Degouezh Y.-B. Kalloc'h

Er pennad warlerc'h e komzomp eus ar gelaouenn Brittia a voe embannet adal ar bloavezh 1912. Evit kompren avat talvoudegezh ha ster ar gelaouenn-mañ e ve da d'hor soñj ensellout mennoziou an diazezerion anezhi : Meriadec de Lantivy-Trédion, Iwan an Diberder, Y.B. Kalloc'h ha pergen darempredoù an dacu zen-mañ gant an hini kentañ e rannvro Wened. Ar mennoziou hag an darempredoù-se a c'heller anavezout a-dreuz lizhiri Y.B. Kalloc'h hag an Diberder embannet ebarzh "EN HAD" e 1954.

O studiañ pizh degouezh an tri den-mañ avat e veizer buan a-walc'h e oa diforc'h mat o savlec'hioù hag o enzalcoù politikel. Eusan tri-mañ eta e oa Y.B. Kalloc'h moarvat ar gwellañ brogarour, an hini en doa ar mennoziou yac'hañ diwar-benn ar stourm a oa da ren evel ma vo gwelet er pennad-mañ. E 1911 e oa Y.B. Kalloc'h tost tre d'an "disrannourion" tra ma chome e zaou gavandad pell a-walc'h diouzh dibaboù politikel ar re-mañ.

De Lantivy-Trédion, da skouer, a oa un hengounelour hag ur "gwirelour" evel brogarourion ar c'hantved tremenet ; pal an Emsav, evitañ, a oa daskoriñ da Vreizh an dezvad he doa jindan ar renad gall kozh hag ar pal-se a c'helle bezañ tizhet, war e veno, gant distro ar Roue gall war e dro prientet gant an "Action Française". Pleustriñ a rae de Lantivy a-hend-all ar metou maorasat e Breizh hag e miz Meurzh 1911, da skouer, en devoa graet ur brezegem dirak izili ar strollad gall-se en Oriant evit displegañ savboent ar vrogarourion vrezhon.

A-c'houdevezh ez emdroas de Lantivy ; kemer a reas perzh e labour "Unvaniezh Arvor" ; harpañ a reas ivez an aozadur-kelenn a oa bet savet e tolead ar Wizh ha Gwened diwar batrom

e 1912-1914 hogen ne zeskas ket ar yezh e unan hag er penn-kentañ da vihanañ e oa manet stag tre a galon ouzh ar sevenadur gall.

Dibar meurbet ez eo degouezh an Diberder. Bez e oa anezhañ - hervez a lavare - un diskennad eus un tiegezh chouant ha gourmiz ar barzh gwenedek ar Joubiuz (kv. ar pennad war-lerc'h). Evel maz eo kaer gortoz ivez e oa bet stummet diouzh mennoziou ar gostezenn hengounelour gall evel de Lantivy e unan hag evel hemañ ivez a-hend-all e chome stag a galon ouzh ar sevenadur gall ; meur a wech en deus eztaolet ebarzh BRITTIA pebezh bri a zouge d'ar sevenadur-se, daoust ma felle dezhañ krouiñ ur sevenadur brezhon (hep meizañ en dije ar sevenadur-se dre ret kevezet ouzh an hini gall e Breizh) ; ne zeue ket a-benn da zisteurel ar bed gall m'en doa bevet ennañ keit all. Skrivañ a rae da Y.B. Kalloc'h, da skouer, e 1911 :

"Raison de n'être pas séparatiste : la Bretagne est de civilisation entièrement française (1)... Le séparatisme est le dernier moyen à employer, le moins noble parce que la France, à part sang et langue, nous lui devons tout..." (2)

C'hoarvezout a rae ivez gant Iwan an Diberder en em sellout evel ur Gall. Skrivañ a rae da Y.B. Kalloc'h, da skouer, d'an 20 a viz Meurzh 1911 :

"En tant que Français, je me demande si le roi n'est pas nécessaire à la France..."

Deurus eo al lavarenn diwezhañ-mañ rak diskouez a ra ne oa ket an Diberder rouzelour gall a orin; a-c'houdevezh eo e vije deuet an Diberder d'ar vaorasouriezh, diwar levezon de Lantivy, marteze, daoust ma ne voe ket digoumoul a-grenn darempredoù an daou zen-mañ (3). War a seblant, er c'hontrol, e oa bet dedennet marteze gant al luskad demokratelour-kristen. Anv Sangnier a zo meneget meur a wech en e genskriverezh gant Kalloc'h.(4)

(1) Setu dres pezh a lavar ar P.C.F. hiziv. (2) Lavarout a c'hellfed: dre m'he doa lamet pep tra a oa deomp diganeomp e ranke Bro-C'hall reiñ deomp ar pezh a oa dezhi ; hogen ne rae se, n'eus forzh penaos, nemet evit distrujañ hon distrujaded sevenadurel koulz ha politikel. (3) Tamall a rae dezha bezañ "sod ha lorc'hus" ha Kalloc'h eo a glaske e zifenn oc'h ober anezhañ "unan a speredoù digorañ hor bro en amzer-mañ". Broc'h a oa savet etre an daou zen da heul un danevellskrid mutumiet eus ar brezegenn graet gant Lantivy dirak A.F. an Oriant bet embannet gant Taldir ebarzh AR BOEL. (4) Kas en doa Y.B. Kalloc'h ouzh Sangnier.

Prest e oa bet zoken da skrivañ er gazetenn republikan gall "Démocratie nouvelle" (demokratel-kristen a-du gant Sangnier.) Moarvat e klaske an Diberder digareziou evit ober hevelep kammed. "Ret eo," a skrive en e lizher eus an 8 a viz Mezheven 1911 da Galloc'h, "d'ur Breizhad veldon soñjal skriv en ur gazetenn a Baris evit gellout larout pezh am eus c'hoant da larout. Un d'ruet eo..."

War ar marc'had e pleustre an Diberder "radikalourion" a seurt gant Paul Guicysse. E 1909 e oa ast da gavout hemañ en Oriant a-benn e vroudañ da c'houlenñ digant maodiern gall an Deskadurezh a neuze, Doumergues, reiñ dor-zigor d'ar brezhoneg e skolioù an eil derez (1). Notomp ivez a-hend-all en devoa darempredoù mat gant L.N. Le Roux hag Emil Masson. Gwir eo ne c'hellas ket An Diberder brudañ mennoziou ha skridoù Emil Masson en e gelaouenn en abeg d'al linenn bolitikel en devoa dibabet eviti ha gwir eo ivez e tagas bepred an "disrannourion" hogen kement-se a reas war dachenn an disrannouriezh end-eeun rak istim en devoa evit L.N. Le Roux ha tost a-walc'h e chome moarvat da Emil Masson en abeg d'e "radikalouriezh" ha d'ur stumm bennak a "enep-klorielouriezh".

Eus an tri oberour-mañ en doa Y.B. Kalloc'h ar bersonelezh heverkañ a-benn ar fin; en an hini eo ivez a oa ar muiañ enouestlet en Emsav. E 1911 - marteze dre ma oa trenket gant an harlu hogen ivez dre ma verze pegen arvarus e oa ar sevenadur greantel-bourc'hizel lik evit ar sevenadur mazel-kravezel hengounel a oa chomet hini Breizh betek neuze e tiskoueze e 1911 bezañ enep-gall a-grenn. O respont da lizher an Diberder hon eus meneget, hini an 20 a viz Meurzh 1911, e skrive kement-mañ : "Me nen don ket gall evit ur blank..." ha tamall a rae d'e geneil bezañ chomet hep implijout an droienn "estren katolik" e-lec'h "gall" ; ouzhpennañ a rae pelloc'h : "Emañ Frañs e-tal mervel..." ha pelloc'h : "Labouromp da vougañ ar pezh hon eus resevet hiziv a sevended c'hall..." (2)

(1) Gouzout a reer war beseurt digarez e voe dizarbennet ar goulenne-se : hini harpañ an disrannouriezh. (2) K.v. ar pennad embannet gant Roparz Hemon ebarzh "Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh" diwar-benn "Ar geleannadurezh divyezhek" e-lec'h e lavar pergen "Dizekomp ar galleg".

Er c'heñver-se, da vihanañ, en em zispartie Y.B. Kalloc'h a-grenn diouzh e zaou gavandad rak ne grede ket e oa tonket da unaniezh Breizh ha Bro-C'hall peurbadout da viken ha "sousezhus" e kave mennoz an Diberder "diwar eured didorrapl Frañs ha Breizh".

Diwar-benn kudem ar "sevenadur" e oa diforc'h mat ivez sellboent Kalloc'h diouzh hini e genseurted. Ne grede ket e oa enkorfet ar sevenadur en ensavadurioù politikel : anez e ranke anzav ivez ne oa bet biskoaz e Breizh "sevenadur" ebet. Hag e gwirionez, sellboent ar barzh gwenedek a zo aes da gompren. Bez e oa anezhañ un den eus ar bobl - tra ma oa "bourc'hizion" eus de Lantivy hag an Diberder, lodek er "sevenadur" gall abaoe rummadol, marteze. Evel den eus ar bobl avat e ranke Kalloc'h anzav n'en doa-efi bet perzh ebet biskoazh er sevenadur gall "dinazel" o devoa e gendivizerion en o sell. Bez e wirie en eneb ne oa dleour eus ar "sevendad" a oa dezhañ koulz ha d'e dud - rak ar re-se ne oant ket "gouezidi" evelato - nemet d'an Iliz hec'h unan. Ober a rae ur c'hemm'eta etre ar "sevendad speradel" a oa kristen ha katolik - komz a rae dres eus ar "vammenn gatolik" - hag ar "sevendad bedel" a orin stadel (gall h.a.) "a c'hell kreskiñ hag a gresk hep relijion". Ar "sevendad bedel-se" avat - an hini a oa deuet da Vreizh dre Vro-C'hall - a oa estren a-grenn ouzh are relijion hag a oa dinac'het gant Y.B. Kalloc'h a skrive en e lizhiri a neuze :

"Frañs n'he deus graet biskoazh nemet droug da gorf ha da ene Breizh..." (1)

Gwelout a reer eta ne gomze ket Kalloc'h hag e zaou gavandad an hevelep yezh paraent anv eus "sevendad". War ur poent koulskoude e oa akord de Lantivy gant Kalloc'h : ezhomm he doa Breizh a ensavadurioù politikel evit gellout diorren ur "sevenadur" bennak, daoust ma ne oa ket ali de Lantivy ha Kalloc'h diwar-benn ment ha doare an emrenerezh a zlec degouezhout da Vreizh. De Lantivy moarvat ned ae ket en tu-hont d'an emvelestrerezh ha klenkañ a rae an emvelestrerezh-se e framm ur tad c'hall kevreadel diouzh giz Maurras(1)

(1) Kalloc'h, da nebeutañ, ne oa ket touellet gant an A.F. d'ar mare-se. Skrivañ a rae kement-mañ e ser e zarempredoù gant Lantivy-Trédion. "Nen don ket akord gantañ war bep tra, na hed pell. An hent a fell deoc'h ("An Diberder") stankañ da aotrouigoù an A.F.... Re an A.F. a zo a volentez vat da labourat ganimp war un dra : adsevel korf Breizh. Kement-se ne viro ket ouzhip kenderc'hel da boaniañ a-hend-arall da adsevel an enefiv, ar spered breizhik. Mar savont a-enep dimp war ar poent-se, ar pezh an gudan ket, koulz a-walc'h e vo neuze skeiñ warnezhe."

tra ma hañvale Kalloc'h bezañ tuet d'an disrannouriezh. Ha war ar poent-se ivez e oa enebet Kalloc'h hag an Diberder abarzh am vije diazezet BRITTA. Difenn a rae an Diberder ar soñj e oa ret krouiñ ur sevenadur hag ur vuhez vroadel kent soñjal en ensavadurioù. Y.B. Kalloc'h avat a anzave e oa pouezus bras krouiñ ur sevenadur hogen goulenñ a rae ha tu a oa da grouiñ ur sevenadur gwirion er-maez eus ur framm stadel bennak. E savboent avat a oa diforc'h diouzh hini damkanourion an Emsav e dibenn ar bloavezhioù c'hwegont rak gwelout a rae an daou argerzh politikel ha "sevenadurel" evel daou argerzh kenstur ; da vihanañ, ne verze ket mat an ere a c'helle bezañ etrezo. Hogen lennomp kentoc'h un nebeut arroudoù diwar lizhiri Kalloc'h a roy tu da intent frañsok'h e sellboent :

"Hag vehe Mark Sangnier a-du ganeoc'h da larout emañ gwel em blegañ da ase sevel ur vuhez vroadel pe rannvroadel a-raok urzhiañ ar vro, d'an hevelep soñj e talc'han-me atav. Na pell ezh omp-ni diouzh ur vuhez seurt-se, a larit-c'hwi. Na pell, ya! Breizh he dehe kant kwezh amzer da vervel mik pa ne ruhemp, da gentañ, ur c'horf dezhi. Adneveziñ spered ar vro a zo ul labour talvoudusoc'h a-dra-sur met hinc'h mat ivez e'it adneveziñ ha reizhañ he melestradur. Ha neuze, c'hoazh ur wezh, an daou labour-se a c'heller o c'honduiñ kevret. Nen dint ket unan enep d'an arall, en eskemm : breudeur int. Perak neuze lezel groñs al labour urzhiañ ? Koutant e velen a c'houzout perak ne vennit ag al labour urzhiañ-se..."

Diogeliñ a rae an Diberder eta e oa tu da ziorren ur stujiadur hag ur sevenadur broadel hep en em vataat a Stad vroadel ebet tra ma asure Y.B. Kalloc'h e oa eoret strizh politikerezh ha sevenadur en ur ober dave da "gantved Perikles" pe da "gantved Augustus". "Ar gwaskerezh," a zisplege, "nen deo ket ur stad urzhel..."(1) Lakaat a rae eta, evel Maurras a-hend-all, al labour politikel er penn-kentañ, a-rack al labour lennegel :

"Breizh dihaod da gentañ! Torromp chadennoù hor mamm ; goude, ni a gano sonennoù kaer dezhi..."

Dre se ivez e tistaole damkaniezh an arz evit an arz ; al lennegezh a ranke bezañ enouestlet :

"Al lizheradur, hervez ma soñj, a zle bout dreist pep tra ul lizheradur a zihun ; na gomzit ket hin a labourat e sell ar vraventez hepken..."

(1) "Reizh, reel".

Krennoc'h ha taeroc'h e oa savboentoù Kalloc'h eget re Lantivy pe an Diberder. Degemer a rae penn-da-benn ger-stur Iwerzhoniz "Ni hon Unan" :

"Na laoskomp ket d'ar Call ar goust da zaskor dimp ur Vreizh politik ; savomp hi hon unan..."

Evit tizhout ar pal-se avat e soñje Y.B. Kalloc'h e savidigezh ul "Ligue Nationaliste" (komz a ra anezhi en e lizher eus ar 27 a viz Meurzh 1911) hag, o c'hortoz, e savidigezh ur gelaouenn a zlee dont da vezañ BRITTIA.

O lenn ar pennad da heul avat e verzo al lenner penaos an hini nemetañ a renas hag a awenas ar gelaouenn a voe an Diberder. Sevenadurelouriezh ha kenedelouriezh ar gwenedour-mañ en em ziskouez penn-da-benn d'ar pajennoù anezhi ; gwelet e vo zoken en dije karet an Diberdere unan reiñ bod enno da skridoù gallek-brezhon. Evel-se e voe touellet Y.B. Kalloc'h o reiñ e warant d'ur gelaouenn ha na zerc'houeze e nep doare e gendrec'hadurioù donañ ; a-hend-all enep-kloerelouriezh an Diberder a oa estren ouzh e spered. Hogen meur a dra a c'hell diskleriañ perak e kendalc'has da reiñ e skoazell d'ar gelaouenn. Perak ? Peogwir, da gentañ, e oa an Diberder e vignon a galon ha na c'helle ket dilezel anezhañ.(1). Ivez, hag eñ harluet n'oa ket Kalloc'h evit kemer perzh e buhez politikel an Emsav. Nevez deuet d'an Emsav e oa a-hend-all ha lezet e oa bet a-gostez - moarvat evit arbennoù a bep seurt - (2) gant ar re o doa diazezet ar Strollad broadel e 1911; moarvat n'o doa ket kalz fiziañs emañ en abeg d'e zehouelouriezh. Met ret eo lavarout e oa bet kerseet Y.B. Kalloc'h ivez gant ar re o doa kemeret penn ar Strollad hag ar c'herse-se a ziskleir perak moarvat en doa kroget da vurutellañ o folitikerezh hag o mennadoù. Setu : hep gouzout dezhañ e oa deuet Kalloc'h da zegemer kenedelouriezh an Diberder hag e devoud en devoa roet d'ar gelaouenn un toullad mat a varzhonegoù hogen tamm pennad politikel koulz lavaret. BRITTIA eta a zlee chom ur gelaouenn lennegeñ hag ur gelaouenn a studi. An dra-mañ, a-hend-all, a zo anat en arroudenn-mañ eus ur pennad embannet gantañ ebarzh niverenn 3, a viz Du 1914, BRITTIA ; er pennad-se end-seun e ra dave d'ur gelaouenn lennegeñ

(1) Kv. ar varzhoneg "Sonenn d'e zaoulagad". (2) Kalloc'h emichañs en dije karet diazezañ e unan e "Ligue nationaliste".

e oa bet anv a sevel e brezhoneg penn-da-benn e-pad kendalc'h Gwizurieg 1911 eus K.B.B. : ha n'oa ket bet tu da ziazezañ a-benn ar fin rak dic'hallus e oa neuze embann ur gelaouenn lennegeñ e brezhoneg penn-da-benn :

"Ni, nen deo ket evit c'hoazi an abostol velse hon eus gwintet BRITTIA dre ar vro. E-lec'h koll hon amzer da hirvoudiñ war ar pezh a rankhe bout, Klasket hon eus gwelout AR PEZH A ZO. Da gavout ar Vuhez ez omp ast, da c'houlenn kentelioù ganti. Hag ar vestrez-skol-se he deus desket dimp un dra : AR VRO(1) a zo penn-da-benn e brezhoneg ha n'he deus mui nemet un askell. SPERED BREIZ ne zleent lakaat ebarzh met brezhoneg, ha SPERED BREIZ n'en deus ket gallet dont er bed. Kentel : e Breizh, er bloaz naontek daouzek, lec'h ebet nen deus evit un dastumadenn e brezhoneg lennegeñ. Ar gentel a zo kalet met he c'hemer evel m'emañ a zo ret dimp. Ha BRITTIA brezhonek-gallek nen deo bet savet met evit krouiñ, e-touez rann desket hor broiz, lec'h an dastumadenn vrezhonek da zont..."

(1) Kelaouenn lennegeñ savet ha renet gant Taldir. Kv ar pennad diwar he fenn.

"Brittia" hag ar goulzelcuriezh
a-zehoù en Emsav kentañ

Diskouezet hon eus e oa bet kiriek d'an disrann a oa c'hoarvezet e 1911 e diabarzh K.B.B. an diskred a lakae darn eus izili ar gevredigezh war an Estourbeillon - pe, da vihanañ, war hiniennoù eus e harperion, - da iriennañ a-du gant distro an danvez roue gall e Paris. Evel ma welimp pelloc'h, n'eo ket sur tamm ebet e oa an Estourbeillon a-du krenn gant ar politikerezh-se hogen ret eo lavarout e oa ur gevrenn eus an Emsav, an hini a oa lec'hiet ar muiañ a-zehoù, na petra, techet a-walc'h da lakaat he spi en adsavidigezh ar rouezezh e Bro-C'hall. An tuad-se eus an Emsav a eztaolas e savboentoù a-raok ar brezel kentañ ebarzh ur gelaouenn renet gant an Diberder, a oa BRITTIA hec'h anv, - ha studiañ a raimp degouezh ar gelaouenn-se un tammig pelloc'h er pennad-mañ.

Padal, daoust ma harpe "Brittia" tezennoù ar vaorasouriezh dre vras ne oa ket evelato enframmet el luskad maorasat e unan ha chom a rae dieub ha perzhiek war-eeun en Emsav. Hogen, dres, al luskad maorasat e unan a glaske korvoañ an Emsav - evel ma klask ar P.S.U. hiziv korvoañ anezhañ, war zigarez kevreadelañ Bro-C'hall bepred.

Unan eus dileuridi al luskad maorasat e Breizh, lodek a-hend-all e "Breuriezh Breizh" dre e diegezh da vihanañ e oa Marcel de la Bigne de Villeneuve. Hemañ en doa klasket dedennañ an Emsaverion d'ar vaorasouriezh e sigur kas da benn e Breizh - diwar skouer Maurras e unan - ar pezh en doa anvet "L'enquête bretonne sur la monarchie". Kaset en doa eta ur roll-goulennoù o tennañ d'an darempredoù a c'halle bezañ etre Breizh hag un unbenniezh c'hall

diazezet war bennaemoù Maurras da stourmerion zo eus an Emsav kentañ. Un toullad respontoù en doa bet, dreist-holl a-berzh Taldir, Tiercelin, du Cleuziou (1), de l'Estourbeillon, Guieysse. Ma lakaer a-gostez avat Tiercelin, eus Dinarzh, rener ar gelaouenn 'L'hermine', ha du Cleuziou, a zisklerie e oa anezho roueolourion n'en doa bet respont a-du ebet. Jaffrennou a embanne e oa anezhañ ur"republikan" (pezh a reas a-hed ar wech p'en devoe kuitaet K.B.B.) ; Paul Guieysse, ijinour ha kelemer, kannad "radical" an Orient, a asure n'en doa ar gouleñ graet gant La Bigne de Villeneuve ster ebet war dachenn "Frañs" nag hini Breizh (seurt respont a oa da c'hortoz eus e berzh) ; hogen ar respont deurusañ a oa marvat hini an Estourbeillon e unan a oa neuze kadoriad ar "c'h Comité de défense des intérêts bretons" e Kamb ar Gannaded e Paris. Hemañ eta a ziskoueze kaout ar brasañ disfiz ouzh an danvez renad roueolour e Paris ; moarvat, a lavare, n'he dije Breizh netra da c'headal ouzhpenn digant hevelep renad. Ha menegiñ a rae, pergen, degouezh Loiz XIV en devoa gwasket Breizh ken gwazha gwashoc'h eget nap reizhiad republikan. Dre se, a gloze, ez eo dibocell gortoz ur wellaenn bennak da saviad Breizh dindan ur gouarnerezh roueel gall e Paris. Ma talc'her kont a-hend-all eus diskleradennoù ar brogarour-mañ war-lerc'h drouzivezh 1911 - gouez da Daldir - penaos e oa anezhañ ur "republikan" diwar neuze (mennet e oa an diskleradennoù-se marteze da zizarbenn an tamall a goulzelouriezh roueolour gall a veze graet dezhañ) e c'hellor dastum e oa an Estourbeillon deuet da vezañ d'ar c'houlz-se - ma n'oa ket a-gent - un Emsaver gwirion (2).

§§§§§§§§§§

Klask a raimp bremañ displegañ petra eo bet BRITTIA ha peseurt ster ha roll he deus bet ar gelaouenn-mañ. Bez e oa anezhi eta ur gelaouenn"vroadelour", da lavarout eo, e rae anv eus Breizh evel eus ur "vroad", (evel "Breiz Dishual" d'ar mare-se).

(1) Du Cleuziou, - war a harval - n'en deus ket bet ur roll oberiant en Emsav kentañ. Hogen kaset en doa da benn imboure'hadennoù o temañ da Istor Breizh. Embannet en doa ivez dornlevrioù istor Breizh endeevit ar vugale a gavor er c'henverzh betek an eil brezel.

(2) E gwirionez e oa chomet an Estourbeillon estrenvanet war-lerc'h darvoud darvoud 1911. Empennañ a rae neuze raktresoù ken utopek an eil hag egile evel hini an "Institut National de Bretagne", emañ 6 Akademiezh!

Hogen, evel ma welimp, ne endalc'he ar vroadelouriezh-se steuñv politikel resis ebet.

Embannet e voe BRITTIA, de gentañ, etre miz Gwengolo 1912 ha miz Mae 1913 ; nav niverenn a voe moulet e-pad ar c'houlzad-se. Neuze e paouezas ar gelaouenn a zont er-maez e-pad ur bloavezh. E miz Mae 1914 avat e lakaas Iwan an Diberder, ar rener anezhi, un niverenn nevez eus ur rummad nevez da zont er-maez. E-keit-se e oa bet kemmet istalbenn ar gelaouenn. Anvet e oa bet en deroù : BRITTIA, bulletin mensuel d'études et d'action nationale bretonne" E 1914 avat e kaver : "BRITTIA, bulletin d'études bretonnes et fédéralistes françaises et d'action bretonne". Notomp, ouzhpenn-se, e oa moulet an enskriz-mañ war bajenn dalbenn niverenn gentañ ar gelaouenn : "Dav deoc'h monet d'ar gad ; en ho kouradoù hag en ho rugale da zont prederiit..." a zo un droidigezh eus un arroudenn a ziwar AGRICOLA gant Tacitus, tennet eus prezegenn c'hGalgakos d'ar Vrezhonek kent engann ar menez Grampios.

An talbenn-mañ a zellez un addispleg. BRITTIA, da gentañ, a zo anv keltiek kozh Enez Vreizh. En em savlec'hiañ a-rae "Brittia" eta en hengoun brezhon ha n'eo ket arvorigat Breizh (evel ma vije bet techet Taldir d'ober a-wechoù) ; kadarnaet eo ar savlec'hiañ-mañ gant ar meneg eus Galgakos a zo lakaet war golo niverenn gentañ ar gelaouenn. An dave-mañ da hen istor Breizh a deurus da verkañ rak dibaot tre e oa bet betek neuze en Emsav. D'hor soñj e tleer kavout amañ levezon Meven Mordiern a awene mañ pe vui ar gelaouenn.

§§§§§§§§

Savet e oa bet BRITTIA gant Iwan an Diberder ha renet e voe gentañ betek ar penn. Ganet e oa bet Iwan an Diberder e rannvro Wereg, en Orient er bloaz 1887 ; eus Pont-Skorf e tenne e orin a-berzh e dad ; eus Gwened hag enez Arz a-berzh e vamm. Yaouank tre e oa eta, eñ koulz ha Kalloc'h pa ziazenas BRITTIA. A-boan m'en doa kemeret perzh en obererezh K.B.B. hag U.A. (ne zlee ket chom pell er gevredigezh-se).

Diwar-benn tiegezh an Diberder ne ouzomp ket kalz tra nemet ar munudoù a ro decomp en niverenn 9 eus ar c'hentañ rumm.

Kavell e diegezh a-berzh e dad eta a oa Kistinid, etre an Oriant ha Pondivi, korn-bro ar veleion didou e-pad an dispac'h gall (kement-se evit diskleriañ e daerded) ; fougasiñ a rae ivez da vezañ diouzh ligned ar barzh gwenedat eus kreiz an 19vet kantved, ar Joubiuz, eus enez Arz. An dra-se ivez a c'hell diskleriañ e c'halvedigezh vrezhon hag e vennoziadeg dehouat. Egiz Kalloc'h e unan e oa bet intret gant keleennadurezh vMaurras evel m'en diskouez a-hend-all an talbenn en doa dibabet evit e gelaouenn : "Bulletin d'action nationale bretonne..." ha da c'houde "Bulletin ... d'action bretonne" (1).

Kent ar brezel bed kentañ en devoa da vignon Yann-Ber Kalloc'h ha brudet eo bet ar vignoniez-se gant barzhonegoù embannet ebarzh "War an daoulin" : "Sonenn d'e zaoulagad" hag "Ar vernikenn". Hogen Kalloc'h ne embannas ket kalz tra er gelaouenn-se ma lakaer a-ziforc'h un nebeut barzhonegoù a voe ad-voulet a-c'houdevezh en e zastumad hag un nebeut pennadoù tabut-erezh e brezhoneg hag e galleg.

§§§§§§§§§§

Peuzdianav eo kenskrivagnerion all ar gelaouenn, ar re, da vihanañ, a savas pennadoù eviti, estreget ar re a lakaas o anv er stroll-paeroniañ rak na Vallee, na Loeiz Herriou - a vroc'has emberr ouzh an Diberder, - ne embannjont pennad ebet ebarzh BRITTIA, - na F. Even kennebeut ; F. Gourvil avat a roas dezhi ur studiademn ouiziek diwar-benn ar moulerezh e Breizh er XVvet kantved. Ar re a sinas pennadoù avat a zo divrud a-grenn ; anvioù-pluenn a arverent war ar marc'had ha n'ouzer ket kaer eus piv ez eus kont a-benn ar fin. Piv oa dres Tujan ar C'halvez, Baz-valan (ur beleg eus Treger, war a seblant), ar Gou renner (Leon Palaux, kendiskibl Kalloc'h), Penetiour, Talhouarn, O' Neil, Louis Le Guennec (skeud-

(1) Ne bledas ket an Diberder gant ar politikerezh war-lerc'h ar brezel bed kentañ. A-walc'h e voe dezhañ sevel studiennoù gouiziek evit ar "Société polynathique du Morbihan", ha tabutal, ken na vroc'has gant e holl vignoned. A-hend-all e voe kelaoenner en "Nouveliste du Morbihan". Evelato, hervez doare, e skrivas pennadoù evit an "Heure Bretonne" e-pad an eil brezel diwar-benn ar "gwall-skouerioù" dreist-holl, marc'had kuzh h.a. Ur mab en devoa - a anavezis e 1948 e Pondivi - hogen na gemeras perzh ebet en Emsav.

dennaouer "Buhez ar Sent", o chom e Montroulez), F. Quer, Ch. Le Comte, Pierre Mellet. Diouzh a ouzon ne bar anvioù ar re-se e neb lec'h e bloazlevrioù an Emsav a-c'houdevezh. Emichañs e voe lazhet darn eus ar re-se gant ar brezel hag ar re all a voe skignet er gorventenn, da skouer, Ely-Montet, ur c'halvez arzour o chom e Kaorel hag a sinas meur a bennad er gelaouenn. Ken dianav all eo anv Izan en em ziskouez ivez e bannoù BRITTIA hep ma oufemp eus piv ez eus kont. Dav e vefe kas enklaskoù eta evit terminif ar personelezhioù a zo kuzhet dindan an anvioù-se hogen evit testenn al levr-mañ n'en deus ket an dra-se kement-se a bouez peogwir e voe skrivet an darn-vuiañ eus pennadoù ar gelaouenn gant an Diberder e unan.

Spisaat mennozioù ar gelaouenn eta a zo koulz ha spisaat mennozioù an Diberder e unan a hañval bezañ graet ur c'hemmesk eus tezennoù Meven Mordiern ha re ar foranour gall Maurras ; pa skrivan "kemmesk" avat ne implijan ket ar ger reizh e gwirionez rak war bazennoù kenstur, er c'ontrol, e chome ar c'healioù en doa amprestet An Diberder digant Meven Mordiern hag ar re an doa kemeret digant Maurras ; e par "Frañs" e oa lec'hiet "maorasouriezh" an Diberder, lakaomp.

Moarvat e oa an Diberder, evel m'hon eus merket, ur "broadelour" ; ober a ra bepred ur c'hemm etre "broad Vreizh" ha "broad Vro-C'hall". Se, avat, ne oa ket nevez tamm ebet, egiz ma ouzer.

Ar pezh a zo nevez, dres, er vroadelouriezh-se ez eo an uhelvennad yezhelour keltiek a oa staget outi. Pal an Emsav e tlee bezañ, hervez BRITTIA, "peurober labour an dierned o deus diazezet Breizh war ar yezh vroadel, sichenn unded ar vro. Ar brezhoneg eta a zo "an ere broadel" etre ar Vretoned, benveg ur "sevenadur broadel". Rak-se e tlee an Emsav bapred bezañ prest da zisteurel istor Breizh e-pad ar c'hladale'helezh, adal ma oa kroget duged Vreizh da gomz galleg. Kement a gas o doa poadred "Vrittia" ouzh ar prantad-se eus istor Breizh ma ne felle ket dezho klevout anv eus "erminigoù" ha na oant ket broadel a-walc'h, d'o soñj (1)

(1) Kinnig a rae an Diberder en o lec'h ar "Groz Du" a zo bet kinniget a-wechoù evel banniel broadel en trede Emsav. Notomp avat ne oa ket aotreet neuze istribilhañ ur banniel breizhat ouzh e di hag Ely-Montet en doa tapet ur prosez evit se.

Mearvat e felle da'n Diberder ober eus ar brezhoneg yezh vroadel a sevenadur ar Vrezhonez - ha tamall a rae d'an Emsav kozh ober eus ar brezhoneg hepken ur benveg a-enep d'ar "memmoziou nevez", - evel ma implijed an izelvroeg e Flandrez a-enep d'an hevelep memmoziou. Hogen An Diberder e unan a oa divarrek a-grem da lakaat an tezennoù brav-se da dalvezout peogwir en deus savet ar pep brasañ eus e skridoù e galleg ; gwashoc'h zo, evel meur a emsaver all, e vourre o skrivañ e galleg (1) ; fougasiñ a rae gant e dro-bluem c'hallek a oa dispar, war e veno. Ar ratozh en deveze zoken a-wechoù da zeraouiñ e Breizh ul lennegezh "breizhat-gallek" pard'an hini "anglo-irish" en Iwerzhon (un arnod en deus c'hwitet a-benn ar fin ha n'en doa e gwirionez ster ebet). Tammoù skrid en deus savet en e drefoedaj gallek-brezhonek "français de Bretagne", egiz ma lavare. E vroadelouriezh eta a oa lennegezh da gentañ ha berrboell a-walc'h, evit komz fraezh. A-hend-all, ar mennad sklaer nemetañ zen dije embannet a oa sevel ur "vuhez kefredel dishual" e Breizh.

Diouzh a c'heller barn ne zremme na Y.B. Kalloc'h nag an Diberder ouzh ur vroadelouriezh politikel gwirion (petra bennak ma vije aet Kalloc'h pelloc'h eget an Diberder war an hent-se). Da lavarout eo, nac'hañ a rae an eil koulz hag egile talañ ouzh kudenn ar Stad dishual da sevel i die'hallus e oa d'o soñj sevel hevelep Stad e Breizh. Er c'heñver-se e oa nac'hus a-grem emzalc'h BRITTIA hag an Diberder. Gant rogentez e tistaele uhelvemad an disrannourion ma rae anezhañ "la fleur bleue du séparatisme" ; hag en neuze d'ober ur c'hemm etre an "nationalistes unionistes" (1) hag ar re "séparatistes" (pezh a ziskouez e oa an Diberder e unan un unanour ha n'he doa ket pennaenn an dislavar kalz a ster evitañ kennebeut peogwir e ra gant troiennoù a seurt gant "nationaliste u unioniste".) Hag e-lec'h-all e tiskleir :

"On en a soupé de la bretonnerie sous toutes ses formes, y compris la séparatiste..."

en ur lakaat disrannourion ha "rannvroelourion" war an hevelep pazenn.

Anzav a ranker e oa diseurt saviad an Diberder en Emsav hag e par e gelaouenn zoken en em gave digenvezet a-walc'h. Meur a

(1) En eil Emsav ivez e vourre Olier Mordrel o skrivañ e galleg.

hini eus e genlabouerion ha kenskrivagnerion a oa enep-gall zoken a-wechoù. Da skouer, Alan Kere, er pennad en doa skrivet a-zivout kudenn ar banniel, a ginnige kemer hini Iwerzhon ; disteur-el a rae an hini a oa kinniget gant Leon ar Berr : unan kembreat kinklet gant ... ur seizenn c'hlas-gwenn-muz ! Hag Alan Kere d'ober an addispleg-mañ : "evit ar re ac'hanomp o deus karantez eviti (Bro-C'hall), eveljust..."

Daoust ma embanne memmoziou un tammig a bep seurt e felle d'an Diberder ren ur politikerezh resis, ur politikerezh "gwirvoudelour", a zalc'he kont eus an traoù evel m'edont. Nac'hañ a rae ar ger-stur nevez erbedet e kelc'hiadurioù an Emsav, ha pergen gant ar Strollad Broadel kentañ : na ruz, na gwenn. Dibaboù politikel an Diberder, da vihanañ, a oa sklaer. Fellout a rae dezhañ stagañ tonkadur an Emsav ouzh hini ar gostezenn rouzelour maorasat e Bro-C'hall rak mirelour e oa evel stourmerion zo a rannvro Wereg bet chomet stag a galon ouzh hengoun ar chouanterezh. Prest e oa an Diberder zoken da gemmeskañ ar virolouriezh-se gant ar vroadelouriezh vrezhon. En niverenn 5, miz Genver 1911, lakaomp, e ra ar stourmer-mañ ur "broadelour brezhon" eus J. Kadoudal, - pezh a ziskouezfe a-walc'h n'en doa ar ger "broadelour" evitañ ster resis ebet, nemet ar ster maorasat marteze :

"Georges Cadoudal, héros du nationalisme breton, comme l'a appelé Mr. de l'antivy..."

Lavaret hon eus a-gent e rae rener ar gelaouenn dave d'an "Action Française" en istalbenn BRITTIA hag a oa "action nationalè bretonne..." Mearvat e tigele taer an Diberder a-hend-all en devoa ar muiañ bec'h gant paotred vMaurras. Hogen, hep mar, dre ma oa tost d'ar re-mañ ha dre m'en devoa spi ivez d'o lakaat da zegemer e savocent diwar-benn Breizh an hini e oa. Ret eo merkañ ivez, ur wech ouzhpenn, ne veize na Kalloc'h nag an Diberder ar gelennadurezh vaorasat evel ur gelennadurezh politikel hollek hogen evel ur gelennadurezh politikel gall dibar o klotañ hepken gant degouezh "Frañs". Daoust ma ouie ar re-mañ e oa pell preder ar vaorasourion a-du gant ar "proviñsoù" diouzh o hini diwar-benn "broad Vreizh" e c'hoanagent degas ar re-mañ, - dre

ginnig dezho skoazell an Emsav - da deurel evezh ouzh o goulennoù. An dazeilad politikel evitañ n'edo ket etre Breizh ha Bro-C'hall hogen etre ar Republik gall hag ar roue gall. Darev e vez bepred eta d'ober aon d'ar Republikaned c'hall en doare-mañ : pe e vlot a-du gant an Emsav pe ez ay hemañ a-du gant poadred ar Roue. Dibobell e oa avat hevelep marc'hataerezh : ma vije bet an Emsav kreñv a-walc'h evit spontañ ar Stad republikan gall en dije gallet ker-koulz all implijout e nerzh evit gounit he frankiz da Vreizh war-seun.

Kempennour e oa an Diberder eta. En em lakaat a rae penn-da-benn er Framm gall oc'h ober eus e gelaouenn ur gelaouenn a studioù "fédéralistes françaises" pe o tagañ ar "République canaille" gant troioù-lavar ha diouzh savlec'h ar vaorasourion c'hall. Ur merk-bann all eus e gempennouriezh ez eo e ali diwar-benn emsavadeg Pont-Kalleg. Gouestlet e oa niverenn 7 a gelaouenn, hini viz Meurzh 1913, da eñvor Pont-alleg hag e genseurterd. Kinnig a rae an Diberder zoken ober ur goul broadel eus deizh-ha-bloaz o aberzh. Broadel rik e oa e gwirionez stumm-skrivañ an niverenn-mañ eus BRITTIA. Alan Kere, da vihanañ, a geñverie emgann Sant-Albin-an-Hiliberenn ouzh hini Kossovo e Serbia. Hogen en niverenn war-lerc'h, hini viz Ebrel 1913, e tistro an Diberder war an divoud-mañ hag eñ kounnaret ruz ouzh ar gelaouenn "Breiz Dismal" he devoa-hi ivez gouestlet he niverenn a viz Meurzh da eñvor merzherion 1716. Hag an Diberder neuze da eztaoliñ ar soñjenn sebezus-mañ : an hini kablus en irienn-mañ e voe Lambilly "qui fit rater le projet d'insurrection loyaliste que voulait Talhouet..." War ur renk gant Lambilly e oa lakaet Montaran a fellas dezhañ e ve sevenet ar "varn-edigezh wadek". An dro-lavar iskis implijet gant an Diberder a ziskouez mat e venne hemañ chom"leal" ouzh Bro-C'hall, - oc'h en em sevel a-enep dezhi zoken. 'M eus aon ne oa ket gwall sklaer ar mennoziou politikel en empenn ar stourmer-mañ.

Padal e klaske an Diberder bezañ spiswel war dachennoù zo, da vihanañ. E ser Pontkalleg en devoa douestañ diwar-benn istor-elezh ar werz a oa gouestlet dezhañ ebarzh BARZHAZ BREIZH (petra bennak ma n'eo ket a-walc'h mennout bezañ spiswel evit kejout

evelkent gant ar wirionez. Dieub a-walc'h e oa ivez e emzalc'h e-keñver an Iliz, en eneb da hini Kalloc'h. Gwelet hon eus e nac'he unaniñ "Feiz ha Breizh" : roll ar yezh ne oa ket diwall ar Vrezhonez diouzh ar mennoziou nevez. Ivez, ne zouje ket an Diberder tagañ an dud a iliz-apa ne felle ket dezho ober ar pezh a oa dleet dezho ober evit harpañ ar yezh. Tamall a rae dezho o youl-fall (kv. an Diskleriadenn p. 19). Droukrañs en doa an Diberder e gwirionez ouzh an Iliz c'hall e Breizh, dre ma korvoe ar vro hep degas netra dezhi en eskemm, hep he sikour tamm ebet a-benn ar fin. Diskouez a rae an Diberder e pae Breizhiz d'ar misionou kement ha Bro-C'hall pe Amerika (1) ha kalz mui egeto e-keñver poblañs. Hogen ouzh ar Fab e unan e rebeche an Diberder gwallegiñ Breizh peogwir ne roe ket ur C'hardinal dezhi... Ober a rae - gant reiz a-walc'h - "simagrées pseudo-insurrectionnelles" (2) eus diskeladegoù ar Katoliked e Breizh un nebeut bloavezhioù a-raok. Gwashoc'h a reas an Diberder avat : dispenn eskob Sant Brieg, an Ac. Morelle, en devoa diskleriet a-hervez n'en dije ket kuitaet Sant-Brieg abarzh ma vije bet distaget komzoù diwezhañ ar yezh vrezhonek (3). E ser an diaasterioù en devoa Vallee gant hemañ e ser "Kroaz-ar-Vretoned" ez asure an Diberder e oa o vont da embann ar wirionez penn-da-benn goude ma rankje "crever de rage secrète le saint cafard de Saint-Brieuc..." Egiz ma ouzer, feuket e voe Y.B. Kalloc'h gant hevelep tabuterezh ha pellaat a reas diouzh e vignon d'ar c'houlz-se. Neuze eo e paezas an Diberder a embann e gelaouenn e-pad bloaz. E miz Mae 1914 avat ez adkrogas gwashoc'h eget biskoazh da atahinat "nos ennemis de certaines préfectures et de certain évêché..." Hag er memes niverenn, war un dro gant ur pennad gouestlet d'ar gwall-labour kaset da benn a-ebep d'ar vroadelouriezh iwerzhonat e Kloerdi Maynooth en Iwerzhon, e kaver adarre

(1) Un hekle eus an devoadoù-mañ a gaver ebarzh barzhonegoù diwezhañ Y.B. Kalloc'h.

(2) Notomp en dije karet an Diberder ober eus emsavadeg Pont-Kalleg ivez ur "simagrée pseudo-insurrectionnelle" evel ma lavare ken mat.

(3) Kv. an niverenn 9, a viz Mae 1913 : "Rien ne nous empêchera, L.N. Le Roux et moi-même (merkit en doa an Diberder un tamm doujañs evit diazezer ar Strollad Broadel kentañ) de lui régler son compte. Quand cet homme nous croira bien loin nous lui tomberons sur le coin de la figure. Tu mens. N'as-tu pas dit que tu ne quitterais la Bretagne que qu'après le dernier mot de la langue bretonne..." Tabuterezh diouzh giz an "Action Française" e oa kement-se.

DIELELOU

Pennad tennet eus niverenn gentañ BRITITIA, gwengolo 1912
sinet gant an Diberder.

Notre but est de refaire de la Bretagne une nation, et une nation celtique. Nous voulons reprendre avec méthode la vieille lutte - non terminée encore, pour notre honneur! - qui se poursuit chez nous depuis dix siècles entre l'esprit roman et l'esprit celtique. Nous entendons que ce soit l'esprit celtique qui domine, sans conteste. Car si présentement la Bretagne est divisée en deux parties à peu près égales, il n'en reste pas moins que ce n'est pas une nation artificiellement construite où les deux moitiés doivent obligatoirement se faire équilibre mais bien le dernier domaine qu'aient pu se tailler les Bretons qui vinrent sur cette terre chercher le salut et l'indépendance ; mais une nation bâtie par nos Princes et nos Rois, Celtes authentiques, à la politique desquels, jusqu'à 910 nous devons les sentiments qui sont à la base de notre vie nationale, si appauvrie soit-elle.

Nous nous croirions indignes des héros les plus glorieux de notre histoire si nous renoncions à parachever leur oeuvre. Nous professons que ce qui doit donner la plus grande cohésion à celle-ci, c'est notre langue nationale. Nous voulons d'abord sauver celle-ci pour elle-même, mais aussi pour le plus grand bien de la nation. Nous voudrions en faire l'instrument d'une culture nationale correspondant à nos besoins propres et les exprimant. Notre ambition de d'aider à susciter dans les classes cultivées de Bretagne un mouvement intellectuel de premier ordre, authentiquement indigène et à lui faire prendre corps dans la langue bretonne. Il nous semble que, sans cela, l'existence du breton, ce à quoi nous tenons par dessus tout, restera précaire et que, aussi, toute la vie nationale languira."

Pennad tennet eus stagadenn vBRITITIA, kala mae 1913.

Goude bezañ diskleriet en devoa savet ur "c'hOmité d'Action Nationale bretonne", teget an disrannourion, diogelet e lealded ouzh ar stad c'hall en ur ober anv eus ar brezel a zlee c'hoarvezout abarzh pell, graet eus ar yezh pennañ danvez ar stourm broadel, barnet obererezh distrujañ ar skolioù stadel ha kristen e tiskleir aozer an embann-mañ kement-mañ, e-touez traoù all :
"Nous sommes, plus que d'autres, les champions d'une Bretagne intégrale... Loin donc de penser à exclure de notre mouvement les Gallos, nous adressons le plus pressant appel à leur patriotisme breton bien connu. Nous les prions instamment de nous suivre dans la lutte en leur précisant, pour qu'il n'y ait pas de méprise que la Bretagne est avant tout et par définition une nation celtique... Il importe que l'élite intellectuelle de toute la Bretagne se mette résolument à étudier, cultiver et défendre la langue bretonne."

Sinet e oa an Diskleriadenn-mañ gant an anvioù-mañ da heul, en anv ar "c'hOmité d'Action Nationale Bretonne" : Y. Le Diberder, J.-P. Kalloc'h (Bleimor), Bihanic, A. Duhamel-Romeur, G. Moysan, Y. Le Lausque, R.M. Le Devehat, P. Goñlo, A.V. Le Calvé, G. Le Redour, F. Tréhin... Nemet diwar-benn an daou skrivagner kentañ n'hon eus titour ebet a-zivout an dud meneget er roll-ma.

Pennad 24

"BREIZ DISHUAL" hag ar Strollad
broadel kentañ

Savet eo bet BREIZ DISHUAL e miz Gouere 1912. Etre an deiziad-se ha miz Mae 1913 e teuas er-maez 11 niverenn eus ar gelaouenn. Un daczekvet niverenn a voe embannet evit Mezheven-Gwengolo eus ar memes bloavezh. Neuze e paezas ar gelaouenn a zont er-maez etre Gwengolo 1913 ha C'hwevrer 1914. Ur rumm nevez a groge eta er miz-se : padout a ray betek deroù ar brezel bed kentañ ; pemp niverenn a voe moulet neuze ; an hini diwezhañ a zeuas er-maez e Mezheven 1914.

War a hañval n'he doa ket BREIZ DISHUAL en tu-hont da 500 koumananter e-pad ar bloavezh kentañ a badas adal miz Gouere 1912 betek Gwengolo 1913. Padal e veze moulet 1.000 skouerenn bep taol (1). Hogen kement-se a oa re vizuz evit renevezh ar gelaouenn a rankas dougementif priz ar c'houmanant pa addeuas BREIZ DISHUAL er-maez e miz C'hwevrer 1914. Adal neuze avat betek ar mare ma tarzhas ar brezel n'he devoa ket BREIZ DISHUAL amzer d'en em ledañ.

Gwelomp bremañ piv en em gave er bodad-skridaozañ.

En dro-mañ adarre avat ez eo diaes gouzout piv oa skrivagnerion ar gelaouenn. Ur roll anezho a gaver war bevare niverenn an eil rumm. Setu eñ : E. Douar-Gwe, Lucie Geslin, Ronan de Kermene, Montjoa de Kermouster, Fañch L'Hermitte, Matilin Treger, Camille Le Mercier d'Ern, Pol Suliac, Job Loyant.

Un nebeut addisplegoù a c'heller ober e ser ar roll-mañ. Da gentañ, arabat e vefe bezañ touellet gant an anvioù ; moranvioù brezel int : n'eus nemet lenn BRITITIA evit merzout e krene meur a stourmer breizhat dirak gwaskerezh ar pennadurezhioù bepred gallus da vare un enkadenn eus istor Europa a zlee disoc'hañ d'ar brezel bed

kentañ. A-hend-all, dre maz int moranvioù, ne lavar tamm ebet o stumm e oa noblañsoù eus darn anezho ; Ronan de Kermene, da skouer, ne oa nemet anv-pluenn Duchauchix, genidik eus Lokronan-ar Menez, etre Roazhon hag ar Goelo. Camille Le Mercier d'Erm a oa un tamm noblañs marteze hogen ne fogase ket gant ar brient-se ; Breizhad e oa, da gentañ, hervez a lavare e unan. Evit Montjoa de Kermouster hag Herve de Kerguily - a zo meneget e-lec'h-all er gelaouenn - ez eo diaes gouzout hag-eñ int moranvioù pe anvioù gwizion. N'em eus ket bet amzer da wiriañ kement-se. Menegiñ a reer avat anv Henry de la Guichardière, mignon Taldir, hogen ne gav ket din e c'hoarie ur roll oberiant er Strollad broadel kentañ. Gwirheñvel eo koulskoude e oa dehouiz a orin, an darn-vuiañ eus ar skrivagnerion-ma. Job Loyant a zalc'he ur greanti en Naoned a oa bet, da gentañ, "Camelot du roi". Hogen an dra-se ne oa ket gwir evit an holl genlabourerion eus ar gelaouenn : Yann Brezal, da skouer, - anv-pluenn Jos ar Bras, skolaer kristen a zlee bezañ lazhet er brezel bed kentañ - ne oa ket ur mirelour tamm ebet ; skrivañ a rae ebarzh ar gelaouenn gleizour BRUG, dindan an anv-pluenn BRUGER end-eeun. Ne vern penaos, reteradur ar gelaouenn hag ar Strollad nevez war an tu dehoù ne vije ket bet souezhus en un amzer ma oa 95% eus ar boblañs e Breizh a-du gant ar gostezenn-se.

Ouzhpennomp e kenlaboure ivez gant ar Strollad un nebeut skrivagnerion vrezhonek (pe c'hallek : Emil Masson, da skouer, dindan an anv-pluenn Ewan Gwesnou) : ar Yeodet (Boscher)(1) a voe lazhet gant kilstourmerion c'hall e 1944 - ha Jord ar Rumeur, (Mathaliz), ur micherour horolajer, desket ar yezh gantañ penn-da-benn (ar c'hentañ skrivagner a addekas ar yezh a voe anezhañ) ; O vezañ ma oa "ezel eus ar Strollad" moarvat e fellas d'ar renerion ober eus ar barzh-mañ un doare "actrouniezh speredel", ur skrivagner broadel bras : sonedemoù brogar diouzh ar c'hiz c'hall a aoze hogen dister e oa an dalvoudegezh lennegel anezho ; ur politred eus ar skrivagner a voe moulet war bajenn gentañ unan eus an niverennoù (2).

(1) Sevel a reas evit ar gelaouenn ur pennad hir e brezhoneg diwar-benn an divyezhegezh. A-hend-all en doa embannet "Eleunioù yacouankiz" p'edo rener an "Echo du Finistère" e 1909.

(2) Jord ar Rumeur a varvas e 1942.

Personelezh heverkañ ar bodad skridaozañ a oa moarvat Joa ar Bras a skrive e brezhoneg ebarzh ar gelaouenn-mañ dindan an anv-pluenn Yann Brezal. E vrezhoneg, a-hend-all, hag eñ poblek evel maz eo natur en amzer-se, da lavarout eo, diresis a-wechoù, a vire ivez perzhioù ar yezh poblek end-eeun : bevder, livusted ha saourusted. Tizhet en doa Jos ar Bras, drezañ e unan, un tamm deskadurezh liesseurt ha mennoziou gwiriziennel - e-keñver re e gen-seurted, da vihanañ, - en devoa ; sammet en doa warnañ pourchas an diazez meizel d'an Emsav. Diaes eo diverzout peseurt andon a oa d'an diazez en dije bet c'hoant kinnig d'an Emsav ; a-wechoù e kredfe a-walc'h unan adkavout e mennoziou ar stourmer-mañ un heklev eus tezennoù Nietsche a groge da vezañ brudet d'ar c'houlz-se hogen an dra-se n'eo ket anat tamm ebet.

En eil niverenn eus rumm kentañ ar gelaouenn (Eost 1912), da skouer, e veneg Jos ar Bras en un talbenn sterleun : "An nerzh e servij ar gwir... lezenn ar stoum evit ar vuhez..."

"Ur mennoz a zo bremañ hag en deus kred e-touez meur a hini ; ar c'hreñvañ a zle flestrañ an hini disterañ. An dezenn-se - daoust dezhi bezañ digristen (kentoc'h abalamour da se) - a zo gwelet mat. En ur gendaoniñ ar soñjezon-se, Klaskomp, koulskoude, hep ehanañ, kreskiñ hon nerzh..."

En niverenn seizh e kaver ivez un damveneg eus dankaniezh Nietsche diwar-benn an "distro peurbadel" a c'hellfe soliañ an Emsav ha reñf poell dezhañ.

E-lec'h-all e tiskouez Jos ar Bras kacut anaoudegezh eus kelennadurezhioù all estreget hini Nietsche. Da e ve, er c'heñver-se, dezramañ ar pennad a embannas war niverenn gentañ an eil rumm, e miz C'hwevrer 1914. Setu un aroudenn anezhañ amañ :

"Ar pezh a ra an dud en ur c'hevredad (1) ar gouemoù n'hallont ket henn ober da zaouennañ o bourrevion p'en em gav ar re-mañ en ur pleg diaes ? Pa lavaran deoc'h tud drol a zo hag a zesko deoc'h e tle ki ha kazh ober tiegezh mat. Ya, peoc'h a vo gant ar c'hazh keit ha ma vo e c'houlzoug dindan pav ar c'hi..."

(1) "Kevredigezh". Ar skrivagner a zamveneg stoum etre renkadou hag emglev renkadou zo a-enep da renkadou arall.

Ent anat e klask ar skrivagner diskouez amañ ne c'hell bezañ emglev gwir ebet etre enebourion ha ne c'hell ar stourm a eneb an eil ouzh egile echuiñ nemet gant faezhidigezh unan eus ar stourmerion end-eeun. Ur mennoz yac'hus eo hemañ, hag a zo mat da gounañ bepred en ur vroad trec'h et a vez techet bepred da glask fals emglevioù gant ar mac'homer evit tec'hout diouzh ar stourm dres. Herder ar prederour a ya pelloc'h avat ; an hini kentañ ez eo bet Jos ar Bras o tiogelid n'he deus ket ur vroad sklavez d'en em chalañ gant ar reizveliegezh - sañset - ar galloud mac'hom : reizwiriek eo er c'hontrol pep arnod eus ar re wasket da glask skoazell e-touez enebourion ar waskerion (hervez ar furnez hag ar skiant-vat evelato).

Pelloc'h en hevelep pennad e ra Jos ar Bras dave d'ar gevalaouriezh a zo, emezañ, diazez ar "broadoù" meur (hevelep mennoz a vo eztaolet diwezhatoc'h gant Roparz Hemon er pennad "Ar Stad hag ar vroadelezh") :

"Harzoù ar broadoù a zo diazezet war ar ar c'honidegezh o deus tud ur vroad vras, dastumad gouennoù disheñvel, oc'h en em gaut evit difenn ezhommoù espernek (1) en un dachenn-douar (2) ..."

Evel-se n'he deus ar vroad veur nemet un diazez danvezel. War ar marc'had ez eo azet ar vroad-veur-se war wel an emzifenn hag ar c'hvezerezh ouzh broadoù-meur all ; ne c'hell hevelep reizhiad disoc'hañ nemet d'ur brezel a gav e wrizienn e belic'hoant mistri an armerzh. Ar Stad kevalaour a zo eta ur Stad na bad nemet dre ar brezel :

"Mes soñj ar brezel hag e bourchas n'hall ket bezañ a-walc'h da vuhez pemdeziek ur vroad... Boud ar c'horf n'eo ket holl vevañ an den. En em vevañ a ra ouzhpenn gant traoù ar spered hag amañ ar c'hemm a ouenn, a zeskadurezh, a gelennadurezh, a gustumoù a sav da lakaat an drailh hag evit kaout ar peoc'h, ar ouenn greñvañ a ra he lezem d'ar re all..."

- (1) "Armerzhel"
(2) "Tiriegezh"

Ne oa ket eus Jos ar Bras ur marksour eveljust. E devoud e nac'he degemer un armerzhelouriezh strizh dic'houest da reiñ ur ster d'ar gwirvoud kevredigezhel en e bezh. Derouñ un Emsav n'eo ket armerzhel nepred - ha c'hoazh en ur seurt degouezh ar ger "armerzhel" ne dalvez ket kalz tra. Ne grog an dud da deurel evezh ouzh o saviad armerzhel nemet diwar ar mare m'o devo emouezet ouzh o renkadelezh pe o broadelezh, ouzh o strollelezh dre vras, da lavarout eo diwar ar mare m'o devo en em savlec'hiet en ur gronnad e-keñver gronnadoù all. Ha kement-se eo a felle da Jos ar Bras lavarout moarvat en dilinennad-mañ.

Spiswel a-walc'h e oa ar brogarour-mañ evit merzout pezh a vire ouzh ar Vrezhoned a vont da vroadelourion : ar stad a zismegañs m'edont enni ha na zeuent ket a-benn da drec'hiñ ; ur boblañs a gouerion ne c'hell krouiñ sevenadur ebet. An diaesañ evit ar broadelour brezhon, evit ar Brezhon eo asantiñ d'e zibourvez ha d'e baourentez, degemer e ranko krouiñ e vro diwar netra, koulz lavaret ; assoc'h kalz eo eveljust gortoz pep tra digant an estren a zo ar mestr ivez hag a bourchaso dezhañ kement amañ o c'hedal.

"Gant ar genvroelerion (1) ne oa ket divesk a-walc'h ar garantez vroadel. Skolaerion (2) hemañ pe henhont, diskibion ar roue pe ar Republik, tud marteze re dost da blad an amañ, mevelion renerion Vro-C'hall hag all ne gavont ket mat nag uhel a-walc'h evit o ene re izel ur vro n'he deus da reiñ dezho (o soñj eo kement-se) pezh amañ o lorc'h o c'hortoz diganti..."

Ur sturienn all eus politikerezh ar vroadelourion gentañ a c'heller damvelout amañ : ar Vrezhoned n'int na ruz na gwenn, pe, kentoc'h - rak seurt troiem a zo diwirion e meur a geñver - ar Vrezhoned n'o deus d'en em gevredif gant kleiziz pe zehouiz c'hall a-benn diframmañ aotreadenn pe aotreadenn digant ar gouarnamant gall ; ar C'hallaoued, diouzh maz int Gallaoued e gwirionez, a chom bepred enebourion da vroadelezh Vreizh.

(1) Rannvroelourion pe gevreadelourion (enebet ouzh an "disrannourion"; notit a-hend-all ne implij ket Jos ar Bras ar ger "disrannour" ; "séparatiste" a veze arveret e galleg.)

(2) "Skolidi".

Merket hon eus meur a wech e oa bet unan eus pennañ prederioù an Emsav adal ad-hanedigezh 1898 en em ziveskañ hag en em zigevarzhañ diouzh ar gostezenn dehoù roueelour gall. Dres, unan eus diazezerion ar Strollad broadel kentañ, Ronan de Karmene (Duchauchix, aet da vanac'h goude ar brezel kentañ) en devoa savet ur skridig a oa e dañbenn "Le Nationalisme breton et l' Action Française". Degemer a rae ar skrivagner en doa bet al luskad gall "Action Française" ul levezon bennak war an Emsav en abeg da orin kevredigezhel eus darn a ziazezerion an Emsav a oa noblañsoù anezho - Régis de l'Estourbeillon, da skouer - ; ivez, dre 'n arbenn ma kinnige ar roueulerion c'hall ur reizhiad kevreadel - a-hervez - evit ar Stad c'hall (rak-se e oa prest darn eus kenlabourerion vBRITTA da harpañ anezho) hogen dellid paotred BREIZ DISHUAL ez eo bet dispartiañ an Emsav diouzh al luskad gall-se evit mat. Duchauchix a skriva da skouer ebarzh ar gelaouenn (troidigezh) :

"Dreist eo ar reizhiad rannvroel evit rannvroioù Bro-C'hall hogen ne vefe nemet goaperezh c'hwerv evit broad Vreizh. Evelkent ez asantfemp - o c'hortoz - da grignat an askorn-se (deuet a-berzh ar Roue pe ar Republik, ne vern ket). Ar pep pennañ ez eo ober ar gammed kentañ war-du an emrenerezh. Arabat eo avat goulenn e tilezfemp ar spi da vont war-raok..."

War an divoud-se a-hend-all en doa savet C. Le Mercier d'Erme ul levrig bihan a voe embannet da gentañ - tra souezhus - ebarzh kelaouenn ar Republikan gallgarour Lefèvre, eus Montroulez, "La pensée bretonne" (1). Pa lavaran ez eo un dra souezhus en dije al Lefèvre-se embannet ur skrid breizhat brogar n'em eus ket implijet ar ger klotus marteze : e gwirionez e oa laouen Lefèvre o tiskouez Brezhoned o tilezel kostezenn ar Roue, goude ma ve evit dont da vezañ

(1) Goude ar brezel e troas Lefèvre da vezañ enep-brezhon rik. Ret eo lavarout ne oa ket diboeñ an arguzennoù a implije a-enep d'an Emsav a chome neuze alies e par al ledemsv hiziv, da lavarout eo rannvroelour mui pe vui. An den-se avat a gawe dezhañ marteze ivez e chome an Emsav re dost d'an Iliz rak an enepkloeregiezh a oa e albac'henn bennañ. Savet en doa war-dro ar bloavezhioù 30 ur romant a zrouklive buhezegzh beleion Leon hag ar re-mañ a reas ur prosez dezhañ.

disrannourion. Talbenn al levrig-se eta a oa : "Les origines du nationalisme breton". An hevelep skrivagner a-hend-all a savas, war ar memes testenn ur skridig all "Traditionnalisme et séparatisme" a ver dodennoù an Emsav kentañ dre vras (1).

E devoud, an diskan a zeue endro dindan pluenn an disrannourion d'ar c'houlz-se e oa hemañ : en em ziveskit diouzh politikerezh ar C'hallaoued ; savlec'hiit e Breizh hepken ho stourm politikel ; deuit da vezañ eta disrannourion wirion. Ar mennoz-se eo a oa displeget pergen ebarzh un embannadenn savet gant L.N. Le Roux, unan eus renerion ar Strollad Broadel kentañ. Dindan an talbenn : "Pour le séparatisme. Essai. Précédé du manifeste du Parti Nationaliste breton..."

Dont a rae an Emsav d'e oad-gour d'ar c'houlz-se ha natur e oa dezhañ en em zistagañ diouzh ar gostezenn he devoa dalc'het en e geñver ur galloud diwall-minor rak an hengounelouriezh rik a oa bet, da gentañ, kelemmadurezh an Emsav hag ur savboent mui pe vui hengounelour a vez eztaolet bep an amzer ebarzh BREIZ DISHUAL zoken (2) : "Gwechall e oamp dishual : perak ne vefemp ket hiziv ?" Hogen kendero'hel da zegemer an hengoun a zegase ar stourmerion vrezhon da asantifi ivez da reizhveliegezh ar galloud gall e Breizh, pezh en doa graet an Emsav kozh gant e wirelouriezh berrboell. Kentañ diviz ur politikerezh brezhon gwirion a oa eta nac'hañ pep kenlabour gant nep kostezenn c'hall a vije. Setu pezh a zezrevelle ar skridenn-mañ da heul :

"Arabab en em chalañ muic'h gant politikerezh Bro-C'hall / eget / gant hini Bro-Saoz pe Vro-Spagn ; gwasket omp bet a holl viskoazh gant rouelisted Frañs kerkoulz ha gant he Republikaned..." (3)

Un amkan arall en devoa ar politikerezh nevez-mañ : aotren d'ar Vrezhoned en em unañiñ a-benn ar fin en un talbenn a-enep d'ar galloud mac'homer ; hemañ, e gwirionez, a zo ar politikerezh a c'hell heuliañ ur vroad en un enkadenn eus hec'h istor.

(1) Dre m'en doa dilezet ar gostezenn "hengounelour" an hini eo en devoa an Diberder kas ouzh C. Le Mercier d'Erme emichañs.
 (2) Anat eo n'eus broad ebet hep tremened. Hogen an hengoun hep buhez broadel kempred ne servij da netra. Hag .. abaoe pell ne oa mui buhez vroadel wirion ebet e Breizh. (3) Job Loyant, Naonedad, "ex président des Camelots du Roy de Nantes, converti au nationalisme breton," a asure n'he doa graet ar Republik nemet heuliañ skouer ar Rouaned o wallgas ar Vrezhoned.

"An unvaniezh a ra an nerzh ha gant an nerzh e c'hounezfomp an trec'h," a skrive Jos ar Bras.

Keal an disrannouriezh a voe degaset e gwirionez gant BREIZ DISHUAL ; hi eo a zistaolas ar gevreadelouriezh a oa diouzh ar c'hiz neuze. En niverenn 7, eus miz Genver 1913, e tisklerie ar gelaouenn ne c'helled ket lakaat Breizh war ur renk gant rannvroioù Bro-C'hall ha meneget e oa ganti "Le droit strict d'aspirer à une vie nationale indépendante..." Hi ivez a grouas pe a zegemeras luganoù evel "Breizh da Vreizhiz" pe c'hoazh "Ni hon unan" a oa amprestet digant Iwerzhoniz. Amañ e tiverzer ur wech ouzhpenn abaoe ar bloavezhioù dek delanvad Emsav Iwerzhon war hini Breizh (koulz hag el lugan all arveret meur a wech : "Bezomp unanet" .).

Klask a raed a-hend-all termeniñ diazezoù hollek ar vroadelouriezh ha diskouez e oa an Emsav perzhiek en ur froudad istorel europat. Merkoù-dianaout ar vroadelezh a glasked resizañ hep bezañ kendrec'hus da vat, ret eo an zav : e-touez ar merkoù-se e veneged an dishualded a wechall, ar yezh, ar boazioù hag ar c'hustumoù, ar banniel. Anat n'o doa ket an holl verkoù-se kement a dalvoudegezh an eil hag egile hag un tammig difetis e oa ar studi a raed eus perzhioù broadel ar Stadoù Unanet pe re ar Suis, da skouer(1). Diskouez a raed e c'helle ar yezh pe an istor bezañ diazez ar vroadelezh ha penaos ivez n'en em staged ouzh ur yezh nemet diouzh ma anavezad istor ar vro (houmañ oa ur soñjenn fur); a-hend-all, a glazed, nag ar yezh na studi an istor ned int finvezhioù evit ar vroadelourion ; n'int nemet tuioù ha binvioù da adsevel ar spered broadel e Breizh ; ha da skouer e roed Aljeria hec'h unan a c'helle bezañ ur vroad hep yezh hag hep istor.

(1) Nec'het e oa atebien ar Strollad nevez gant an tamall a voe graet dezho da vezañ diazezet o aozadur dre zegouezh, evit enebañ ouzh ar maodiern gall Doumergues a oa o paouez nac'hañ reiñ dor-zigor d'ar brezhoneg er skolioù evit chom hep broudañ an disrannouriezh e Breizh end-eeun. Hogen, evel ma verked er gelaouenn, an disentez a oa bet kemeret da sevel ur Strollad broadel ha da reiñ lañs da vBREIZ DISHUAL a oa bet kemeret e gwirionez abarzh ma vije anavezet nac'hadenn Doumergues. Ne ras skrivagner ar pennad-mañ nemet respontd'ur pennad a oa bet embannet diwar-benn ar Strollad nevez gant poadred an "Action Française".

E gwirionez e kave broadelouriezh vBREIZ DISHUAL he sichenn er yezh, da gentañ, evel ma oa natur d'ar c'houlz-se. Rak-se e ouestle ar gelaouenn pajennadoù a-bezh d'al lennegezh vrezhonek a vefe diazez ar sevenadur brezhon nevez. Ret eo an zav e oa skars ha tanav an danvez o devoa da vrudañ. Da skrivagner bras ne c'hellent envel nemet Mathaliz, - Jord ar Rumeur - broadelour ha kenskrivagner BREIZ DISHUAL hag a oa o paouez embann un dastumad sonednoù brogar a oa e dalbenn "Breizh divarvel". Poltred ar barzh - e bragoù bras eveljust - a oa bet moulet war an niverenn 12 eus ar gelaouenn (Mezheven-Gwengolo 1913) a-gevret gant ur studiaden hir aozet gant Camille Le Mercier d'Erme dindan an talbenn "Défense et illustration de la langue bretonne : Eléments d'une littérature nationale." Anv a raed eus Taldir hogen e vezañ ma ne oa ket hemañ evel eus ar Strollad ne oa ket diskouezet evel un "aotrouniezh speredel" a nep seurt(1) Dre vras e oa yac'hus ur seurt savboent : ur skrivagner a rank en em lec'hiañ bepred en ur stroll bennak ; ne c'hell ket sevel e oberenn er c'houmoul ; an dalc'h eo gouzout hepken ouzh peseurt stroll e fell dezhañ en em stagañ. Poadred BREIZ DISHUAL eta a nac'he ober eus al lennegezh hag an arz albac'hennoù hiniermel. En niverenn 11, a viz Mae 1913 e lenned kement-mañ (troidigezh) :

"Ne bleustromp ket an arz evit an arz (2); Barn a reomp ned eo ket an arz ur finvezh, un tu ne lavaromp ket. Hor pennsturienn ez eo eta plediñ gant al lennegezh, ar varzhoniezh dreist-holl, diouzh ma c'hellont harpañ ar mennoz broadel..."

Diouzh ar savboent-se e c'helle ar vroadelourion reiñ un tamm pouez d'al lennegezh breizhek-gallek a vleunie e Breizh e deroù ar c'hantved. Kemenn a raed, da skouer, embannadur dastumad barzhonegoù diwezhañ ar "Maître" Louis Tiercelin, dreist-holl evit ur wezhenn skrivet gant hemañ :

"Honneur au brezonek (sic)
Langage essentiel (2)

(1) Muioc'h a dalvoudegezh a roed da oberenn Kaledvoulc'h "Dre an delenn hag ar c'horm-bouñ" a oa muioc'h broadel hec'h awen. A-hend-all, emzalc'h Taldir a oa amsteriek a-walc'h. Goude bezañ bet enebet outañ en doa hetet gellout en em glevout gantañ.

(2) Tiercelin en doa desket brezhoneg ha savet ennañ ur pezh barzhoniezh bennak.

Daoust da se ha dre ma chome ar brezhoneg evit broadelourion an amzer-se ur yezh lennegel da gentañ penn ne oa ket gouest ar re-mañ da empennañ evitañ ur politikerezh poellek bennak. Ar muiañ a c'houlenned e oa ar "gelelnadurezh divyezhek" (kv. pennad Ronan de Kermene ebarzh niverenn 3 a rumm nevez e miz Ebrel 1914) Netra heverkoc'h er c'heñver-se eget ar pennad hir savet gant ar Yeodet hag a erbede ivez an divyezhegezh : a-walc'h e vefe kelemm an div yezh kichen ha kichen evit saveteiñ ar brezhoneg. Moarvat e oa un dro-blennh broadel'rik gant ar skrivagner : "Breizh a zo ur vro... Ar Vretoned a zo ur bobl... ar brezhoneg a zo ur ... ar galleg a zo ur yezh estren..." Hogen daoust da se ned ae ket ar Yeodet en tu-hont d'un divyezhegezh rannvroel rik : "Daou (sic) yezh a ouio ha pep yezh a chomo en e stern..." Hevelep arc'hadurezh a c'helle bezañ kaderezhel hepken hogen n'eo ket anat kennebeut. Kredapl eo er c'hontrol ne wele ket mat ar stourmerion-se penaos e vije bet tu en un taol da amsaviñ ar galleg gant ar brezhoneg er c'helennerezh

Jos ar Bras, marteze, en doa merzet dalc'h ar gudenn: ne oa ket diorreet a-walc'h ar yezh d'ar mare-se evit kevezañ gant ar galleg penn-da-benn ; ha neuze e klaske ar skrivagner diskouez ne oa ket ar brezhoneg, dre natur, disterc'h yezh eget ar galleg :

"Ma vije bet lakaet a holl amzer an daou(sic) yezh da zebriñ er memes rastell, piv ' oar pehini a vije bet bremañ er bazenn uhelañ?"

Da c'hortoz avat ne chome mui da Jos ar Bras nemet menegiñ adarre lavarenn Anatol ar Bras diwar-benn "vertuz burzhudus a youl hag a badelezh ar yezhoù keltiek". (1)

War a seblant n'eo doa ket renerion ar gelaouenn nag atebieion ar Strollad broadel merzet mat perzh kentañ ur yezh arnevez: an unvanded. Hep morc'hed ebet ez embanned barzhonegoù ha skridoù e skriturioù liesseurt, e rannyezh Wened h.a. - hini Ewan Gwesnou : "an teir bran", da skouer - hep termeniñ gwech ebet ar gudenn a zleje bezañ bet o c'hentañ preder.

Gwan a-walc'h e oa a-hend-all emzalc'h paotred ar Strollad e meur a geñver all. Dav e oa dezho kestal skoazell ha meuleudi Brezhoned aet da gargidi en ur Skol-Veur estren evel

(1) Evit burutellañ abafed ar stourmerion-mañ eo e savas Roparz Hemon e bennad "A-enep d'ar gelelnadurezh divyezhek" a voe moulet ebarzh "Breiz atao".

Anatol ar Bras a glasked lubaniñ e skeud m'en doa hemañ nac'het o c'hendaoniñ a-gremm e-kerzh ur banvez breizhat bennak ; ober a raed anezhañ ar "grand Breton dont l'oeuvre fait tant honneur à notre pays..." hag anv a raed pelloc'h eus "profonde gratitude au maître breton". Hag ar skrid klufan-mañ a oa sinet ouzhpenn gant "Bodad-ren Strollad Broadel Breizh" ha "Bodad-skridaozañ Breiz Dishual". Padal e oa anat e oa Anatol ar Bras dieour eus e vrud d'ar Framm gall penn-da-benn.

Taget a bep tu gant Brezhoned all a rae brogarourion anezho o unan, da skouer, gant Per Mokaer a arvere ar gerioù "folie" ha "sacrilège" e galleg evit doareañ o oberezezh (1), pe gant BRITTIA a arve anezho "iriemerion" hag a zec'halve warno evezh ar gerreizh c'hall, en em zifenne ar Strollad o kilañ hag o plegañ a-hed ar wech. Anzav a raed, da skouer, ouzh BRITTIA, e oa dic'hallus krenn - d'ar mare-se - disrannañ Breizh diouzh Bro-C'hall (gwir eo ivez e c'helled doujañ emell hag hekinerezh ar bolised c'hall ; kv. an niverenn 5 a viz Du 1912 ; ha ne roed d'ar gelaouenn ha d'ar Strollad eta nemet ur "signification morale" (penaos avat mont d'an emgann gant hevelep tro-spered faezhat?) Digareziou a glasked evit distreiñ d'ur politikerezh "pleustrekoc'h" eget an hini a oa embannet da gentañ penn. An dra-se a voe anat dreist-holl goude ma krogas da zont er-maez eil rumm ar gelaouenn. En niverenn 3 eus ar rumm-se, e miz Ebrel 1914, da skouer, e kemered da uhelskouer adarre ar gevreadelezh, an "Home Rule" a oa o paouez bezañ aotreet da Iwerzhon. Ne weled neuze netra en tu-hont d'ar gevreadelezh. Dindan an talbenn "An "Home Rule" en Iwerzhon hag an emsav kevreadelour arnevez" e skrived kement-mañ :

"Ma tenn froud ar mennoziou arnevez da da lemel pep disrannouriezh e harp war un dro an emsav kevreadelour..."

Daoust ha seurt savboent - a hañval bezañ ur giladenn e-keñver an hini kent - a oa hini ar Strollad hag ar bodad skridaozañ penn-da-benn ? Diaes eo gouzout. A c'hell bezañ n'anaveze paotred BREIZ DISHUAL en Iwerzhon nemet al led-emsav renet gant Redmont - ha techet e oant moarvat da grediñ ne c'hellje Breizh biken kaout muoc'h eget Iwerzhon hec'h unan. Esa a rae ar Strollad broadel ivez tec'hout (1) E galleg rak e brezhoneg e skrive Per Mokaer pennadoù enep-gall.

diouzh e zigenvez ha tostaat ouzh ar peurrest eus an "Emsav" gant ur politikerezh a hañvalfe bezañ "pleustrekoc'h". Kement-se n'eo eveljust nemet ur goulakadur. Gant he fennadoù diwar-benn lennegezh hag istor Breizh e chome BREIZ DISHUAL e par ar stourm sevenadurel kentoc'h eget e par ar stourm politikel rik, war bazenn an eneberezh speredel kentoc'h war hini an emgann bolitikel, un tamm evel AL LIAMM er bloavezhioù pemont.

Un ezel eus ar bodad-skridaozañ eus BREIZ DISHUAL en devoe evelkentul levezon vras war emroadur an Emsav a-c'houdevezh. L.N. Le Roux hon eus meneget endev. Hemañ a nac'has bezañ soudardet gant al lu gall e 1914 hag a gavas gwell divroañ hag en em varn d'an harlu evit ar peurrest eus e vuhez eget gwiskañ livrez an arme c'hall. En harlu eta, war-lerc'h ar brezel bed kentañ, e savas ur buhezskrid eus Padraic MacPiarais, e galleg. An oberenn-mañ a veulgame obererezh hag emaberzh soudarded Iwerzhonat 1916 a awenas kalz a stourmerion etre 1930 ha 1944. Moarvat e tiwanas diwar e levezon strolloù zo evel "Gwenn-ha-Du", Bagadoù-stourm", "Bezen Perrot", "F.L.B.-A.R.B.". Eñ an hini eo a vroudas spered an dis-hualded e-touez ar Vrezhoned. Dre hanterouriezh an den-se, da vihanañ, e kendalc'has spered BREIZ DISHUAL da awenañ taerded ar stourmerion betek an trede Emsav.

An Emsav da zerc'hent ar brezel
bed kentañ : "Kendirvi Breizh-Izel"

Petra bennak ma n'en doa ket an Emsav tizhet - nag a-bell - an disterañ unded frammadel da zerc'hent ar brezel bed kentañ e oa krog evelato da ziorren un obererezh liesseurt er bloavezhioù 1913-1914 ha moarvat un tamm unvaniezh kefredel da vihanañ.

E korf daouzek vloaz bennak e oa deuet a-benn da grouiñ kevarzheoù liesseurt o klotañ gant tuadurioù pouezusañ hag arvezioù pennañ an obererezh breizhek, ivez gant ezhommoù diforc'h ar c'hendereoù hag ar renkadoù a yae d'ober broad Vreizh.

Moarvat e chome K.B.B. bepred en e sav hogen diwar neuze e oa krog ar gevarzhe-mañ da zichalañ. Merket hon eus e oa deuet da heuliañ ur politikerezh koulzelour a zehoù evel ar bodad stourmerion dastumet endro da vBRITANIA ha kentañ a rae mui pe vui - betek ur poent zo da vihanañ rak memnoz an Estourbeillon ne hañval ket bezañ bet stabil war ar poent-se - war adsavidigezh ar rouselezh e Bro-c'hall evit diskoulmañ "kudenn Vreizh" ; ne gaved ennañ nemet gouvriaded, darn anezho divroet da Baris ha gallegerion war ar marc'had, prest d'en em zic'hizañ e "kouerion" vreizhat hogen dic'houest da gas da benn ul labour sirius.

UNVANIEZH ARVOR, moarvat, a zalc'he muioc'h a vrezhonegerion hag en o zouez ar re zesketañ eus ar mare-se, F. Vallee, da skouer. Klask a rae en em zieubiñ diouzh gwall zelanvad ar gostezenn dehoù gall. Hogen an diskoulm a roe da gudenn ar yezh e diabarzh ar gevarzhe hec'h unan a oa ur falsdiskoulm peogwir ne zisoc'he nemet da reiñ an trec'h d'ar galleg. Evel nouspet kevredigezh vreizhat all ne glaske tizhout ar bobl nemet dre genstrivadegoù hag aozadegoù

seurt se; buan e kouezhas e fankigell K.B.B., hini ar "sevenadurelouriezh" hag ar "gendalc'helouriezh", elese ar gwallvoaz a vevennañ hec'h obererezh e par ur c'hendalc'h bloaziek bennak.

Da zerc'hent ar brezel bed kentañ eta e oa rannet an obererezh breizhek etre luskadoù liesseurt, an darn-vuiañ anezho kaset war-raok gant ur stourmer hepken. Moarvat hemañ n'oa ket degouezh ar Strollad Broadel kentañ e-lec'h e teue meur a bers-onelezh a-benn d'en em glevout, war a seblant. Hogen o studiañ istor an Emsav er prantad-se e teuer da verzout buan e oa chomet an darn-vuiañ eus an embregadennoù afer un den hepken, afer an hini en devoa diazezet anezho ha netra ken : sed pezh a zo c'hoarvezet gant kevrennoù "Breuriezh ar Brezhoneg" e Treger, e rannvro Wereg (pe e gourenez ar Wihz zoken) ; K.B.B. a oa awenet ha renet gant an Estourbeillon hepken ; hep dale ne vo mui ebarzh UNVANIEZH ARVOR nemet Yann Choleau. Hogen embregadennoù arall a chomo hiniennel ha rannvroel hepken adarre : hini Daldir e Kernev Uhel gant "KENDIRVI Breizh izel" hag e gazetenn AR BOBL, hini bP. Mokaer, harpet gant L. Herriou ha Mellac, e rannvro Wereg he devoa da venveg ar PAYS BRETON. An div embregadenn-mañ a arsellimp bremañ.

Krogomp gant hini Daldir. Gwelet hon eus en doa ar stourmer-mañ oberiet ebarzh kevazheoù liesseurt : K.B.B. koulz hag ar GORSEDD n'en doa ket savet moarvat hogen e-lec'h e c'hoarias buan ar roll pouezusañ. Ul levezon vras en devoa embreget abarzh pell en Emsav dre ma oa deuet da vezañ skrivagner - stummet e oa bet gant F. Vallee - hag ivez dre ma rene e Kerasz un ti-moulerrezh a aotreas dezhañ tu da embann kelaouennoù evel AR BOBL hag AR VRO, hep kontañ levrioù e-leizh. Komzet hon eus e-lec'h-all eus ar gelaouenn AR VRO he devoe poan a-walc'h da vevañ hogen a genlabouras e stummidigezh ar yezh lennek arnevez. AR BOBL he devoa e gwirionez un arbenn kenwerzhel da gentañ ; un doare kazetenn lec'hel evit Keraeziz ha Kernevuheziz a oa anezhi ha moarvat e tenne Taldir un tamm korvo eus an embannadur anezhi. Ar pep brasañ eus AR BOBL a veze skridaozet e galleg nemet un nebeut pennadoù brezhonek savet gant Taldir e unan. N'ouzomp ket pet skouerenn a veze tennet, emichañs un tri-mil bennak. Moulet e veze war baper dister, damwer

e liv, a vent vras, evel ma oa ar c'hiz en amzer-se. Moarvat - an dra-se a c'hoarvez pa ne servij ket ur gazetenn da venveg stourm ur strollad, - e voe dister a-walc'h he levezon war boblañs Kernev Uhel.

Deurus eo evelkent studiañ bloavezhiañ diwezhañ ar gelaouenn dre ma tiskouez war beseurt e oa emdroet preder Taldir etre 1911 ha 1914, goude m'en devoe kuitaet K.B.B.

Emichañs ez emoueze Taldir a-benn neuze ouz danjerioù rannadur an Emsav rak hiraezhiañ a rae a-benn neuze d'an unvanadur anezhañ evel m'en diskouez ar pennad embannet e ser an dilennadegoù ebarzh niverenn 486 AR BOBL d'an 11 a viz Ebrel 1914.

"Nous regrettons que le marasme dans lequel se débattent les deux associations U.R.B. et F.R.B. ne leur ait pas permis de se concerter et d'en référer aux autres groupements autonomistes de la province pour élaborer ensemble une circulaire(1) de revendications bretonnes..."

Hogen diwar neuze ne gonte mui Taldir war an div gevarzhe-mañ m'en doa c'hoarizet ur roll bennak en o diabarzh(2). A ziw ar lerc'h K.B.B., a skrive en hevelep pennad, n'eus chomet nemet "dismantroù". Lakaat a rae e spi eta hepken en daou strollad nevez "Strollad Broadel Breizh" ha "Kendirvi Breizh-Izel", savet gantañ e unan.

"Le Parti nationaliste," emezañ, comprend d'enthousiastes quoique peu nombreux militants. Son action se fera heureusement sentir en Haute-Bretagne. Beaucoup de préventions du début se sont effondrées devant le zèle et le courage de nos nationalistes..."

Taldir eta - feal e kement-se d'e vezadur gladdalc'hel eus an Emsav - a felle dezhañ en em harpañ war ar "C'hendirvi" e Kronog ar vro a zlee chom glad ar vrezhonegerion hag e c'hlad-eñ, pergen. Ar "C'hendirvi"-se avat n'oant ket niverus ; gouez dezhañ, n'oa ket ouzhpenn kant anezho.

(1) Ar ger "autonomiste" n'en doa ket kemeret c'hoazh an dason trivilius a wiskas stre an daou vrezel ha goude an eil brezel. Ar ger "circulaire" a galleg n'eo ket gwall sklaer na gwall reizh. Notet hon eus meur a wech ne oa ket gwall vat galleg Taldir peurvuiañ.
(2) E gwirionez ne oa ket bet Taldir biskoazh gwall oberiant e U.A.

Da heul e kinnige Taldir ur program kevreadelour a c'houlenne dreist-holl harpañ ar yezh o reiñ, betek ur poent zo, un dezvad kefridiel dezhi (kalzig a unyezherion vrezhonek a chome e Kornog ar vro), kreskiñ galloud ar pennadurezhioù lec'hel, diazezañ ar poblvouezhiañ, lemel ar servij-soudard, kempenn ar gevrozadurezh, disteraat niver ar gannaded h.a.

Dacoust ma endalc'he ar steuñv-mañ un nebeut arc'hadurioù a oa c'hwezh ar sokialouriezh ganto - evel stadelañ an hentoù-houarn, ledañ an deskadurezh eil derez pe uhelaat ar goprou bihan - ez ae ar pep brasañ anezho a-du hetoù ar vourc'hizion vihan (kenwerzhourion ha dornwezhourion dieub) a seurt gant Taldir e unan, - hag awenet e oa dreist-holl gant ar werinelouriezh vreizhveurat (lemel ar servij-soudard, da skouer).

Evel ar peurrest eus an Emsav e oa emdroet Taldir neuze war an tu kleiz (gwelet hon eus e-lec'h-all peseurt darempredoù a oa etre Brug ha Breiz-Dismal, da skouer. Hogen er bloavezh 1914, ebarzh AR BOBL end-eeun, en em ziskoueze evel kadour an "demokratelezh". En ur espont d'ur "c'homunour" eus Gwarez ez asure o devoa "erneviz kas ouzh an noblañsoù (1), e oa anezho kevatalelourion a roe muioc'h a bouez d'ar gevatalded eget d'ar frankiz ; Taldir a anzave moarvat ne oa ket ar vrezhonek evit an demokratelezh peogwir e oant chomet gouez ha kentidik a-walc'h (2) hogen asuriñ a rae evelato e chome ar renad demokratel un uhelvennad ma tlee ar pobloù keltiek strivañ d'e dizhout :

"Démocratie implique évolution, réflexion, violence aux plus bas instincts, aux plus bas sentiments... Il me semble qu'à ce point de vue les races celtiques sont démocratiques et que l'autoritarisme et le caporalisme sont des cadeaux de la latinité et de la féodalité germanique..."

(1) Derc'hel a ranker kont eus ma oa ur c'hernevad eus Taldir, eus gwengel ar Balp hag ar Bonedoù Ruz bev e Kernev, - na gemeras ket perzh nemeur er chouanterezh - eus mojenn La Tour d'Auvergne h.a.

(2) "La race bretonne est voisine de l'état de nature ; l'autoritarisme est en effet le propre des peuples enfants..."

E gwirionez, abaoe m'en doa kuitaet K.E.B. e oa bet Taldir douget muioc'h-mui d'ar "republikanelezh". Evel-se, da skouer, e skrive, da skouer, ebarzh an niverenn 473 eus AR BOBL, d'an 20 a viz Genver 1914 :

"Ar spered republikan a zo e kalon an holl Gelted a zoug anezho da c'houlenn ingalder ha da stourm ouzh ar gwaskerezh. Se zo kaoz ez eo gwall vrallet ar spered saoz en Breizh-Veur, evel maz eo klañv mat ar spered roman en Frañz..."

A-hend-all e c'hoarveze gantañ ober goap ouzh an noblañsoù a glasse plediñ gant an Emsav. Da skouer e oa renket an Dug de Rohan e bannoù ar "Guignol breton" ha kuzulikat a raed er pennad da heul e oa kar d'an "Hohenzollern"... (1)

An emdroadur-se eus Taldir da zero'hent ar brezel bed kentañ a zo heverk rak anataat a ra un tech eus an Emsav diwar neuze da bellaat diouzh ar gostezenn dehoù evit nesaat ouzh ar gostezenn gleiz (2) hag a oa ivez hini ar Strollad broadel kentañ(3).

Hogen klaskomp gwelout petra oa ar gevarzhe a felle da Taldir lakaat en e blomm hag a oa anvet "Kendirvi Breizh-Izel". Ober a reer anv anezhi war niverenn gantañ AR BOBL, hini an 3 a viz Genver, eus ar bloaz 1914.

Hervez ar pennad a oa moulet en niverenn-mañ eta e oa mennet ar "vreuriezh"-mañ da vezañ, da gentañ, ur "gerentiezh" etre "mignoned" ar gazetenn AR BOBL. An talbenn dibabet gant Taldir - "breuriezh"ha "kerentiezh" - a ziskouez a-walc'h, d'hor soñj, en em lakae Taldir e par ar sevenadur henvoazel. Se a c'heller kompren moarvat rak Taldir ne brezege ket - evel emsaverion hon amzer-ni - evit un dibab a gefredourion o chom e kêr hogen evit ur werin dizek, kizidik ha disfizius war un dro. Evit dedennañ an danvez izili eta ez implije gerioù anav mat dezho hag a glote gant 'o meizadur "meuriadel" ha "tiegezhel" eus ar gevredigezh : er c'heñver-se

(1) Binimus a-walc'h e oa pluenn gelaouenner Taldir ha Kalloc'h a verzas an dra-se diwar e goust. Kv. e varzhoneg "Fiat".

(2) Er ster ledan rak dav e vo gortez an eil hag an trede Emsav kent na vo graet dave d'ar varksouriezh ent digor. Emil Masson a oa un degouezh dibar.

(3) Hervez Taldir - ha na vanke ket war un dro da flemmañ ar Markiz e oa troet hemañ a-benn ar fin gant ar Republik, ur wech deuet anat n'oa spi ebet ken da adsevel an danvez roue gall war e droun. Taldir a rae goap ouzh e republikanelezh nevez flamm.

e oa ar ger "kerentiezh" diouzh plijout dezho. Taldir, war ar marc'had, bepred evit chom hep feukñ an danvez izili a felle dezhañ gounit d'an Emsav, a rae van da c'houlenn o ali. En niverenn 482 eus ar 14 a viz Meurzh 1914, goude bezañ graet meneg eus al lizhiri hag an alioù en devoa degemeret e sigur "Kendirvi Breizh-Izel" ez ouzpenne : "Deraouomp eta da ziskleriañ fraezh mennoziou ar gerentiezh..." hep estaoliñ evit se mennoz resis ebet war-lerc'h. Ret e vo gortoz an niverenn 486 eus an 11 a viz Ebrel 1914 evit ma komzfe Taldir fraezh diwar-benn ar strollad nevez en ur pennad e oa eeunet an danvez anezhañ d'an danvez kannaded - da vare dilennadegoù hollek ar Stad c'hall edod neuze - dindan an talbenn "Exigences minimales des régionalistes fédéralistes..." Er pennad-se e lakae Taldir "Kendirvi Breizh-Izel" keñver-ha-keñver gant "Strollad Broadel Breizh" a oa meulet da vat en dro-mañ (1). Diouzh an arroudenn-se e weler adarre en dije karet Taldir enkañ obererezh ar Strollad broadel da reter ar vro, war zigarez ma kaved ennañ Breizhuheliz ha gallegerion dreist-holl (2) (e gwirionez, en o c'hichen en em gave un toullad mat a vrezhon-egerion hag e-touez ar re wellañ zoken).

Diwar-benn ar "c'hendirvi" o unan e roe Taldir un nebeut munudoù. Bez e oa anezho eta, egiz m'hon eus merket, ur c'hant bemak (3)

"dont l'enthousiasme natif n'a pas connu la trahison des faux bergers et dont la pureté n'a pas subi le contact des dis-coureurs de congrès..." (4)

Diouzh an arroudenn-mañ e c'heller dezastum e oa yaouank flamm an danvez stourmerion nevez ha n'oant e drempred gant an Emsav betek neuze ; hogen e 1914 edod ha se a ziskleir perak n'o devoe ket tro da labourat evit an Emsav : an holl anezho

- (1) Kv. Ar meneg uheloc'h.
- (2) Un digarez e oa kement-se evit An Diberder hag ar gostezenn vaorasat da dagañ "Breiz Dishual".
- (3) Ne ziskuilh Taldir avat anv ebet.
- (4) Notit adarre ar flemmadem a-snep da g.K.B.B. ha da'n Estourbeillon. Ne gav ket deomp e voe an Estourbeillon ha Taldir adunvanet biskoazh daoust ma tiskouez Taldir bezañ bet "c'hoari tek" en e geñver en e eñv-orennoù.

a voe islonket gant ar brezel a darzhas un nebeut mizvezhioù war-lerc'h ; a-hend-all n'oa ket bet amzer zoken d'o stummañ.

Hep mar ebet ne oa ket yezhel hepken paliou "Kendirvi Breizh-Izel" ; ur mennad politikel anat en devoa peogwir e oa keñveriet ouzh "Strollad broadel Breizh" ; ha war ar marc'had e oa enebet "poblelezh" ar gevazhe ouzh 'brientinveliezh" an Emsav kozh renet gant an Estourbeillon ; savet e oa ar "gerentiezh", eme AR BOBL

"pour le peuple dont la cause est liée à celle de la rénovation celtique..."

En niverennoù 494 ha 495 eus AR BOBL adarre e tiverzer spisoc'h peseurt patrom obererezh a gemere ar "c'hendirvi". Da gentañ, notomp e raed meneg meur a wech eus "An claidheamh soluis", kannad ar C'hevre gouezelek, renet gant Padraig acPiarais(1). Per Mokaer e unan en devoa embannet ur pennad er gelaouenn-se dindan an talbenn "A message from Brittany". Neuze eta, Mab Riwall, d'e dro, (2) en devoa embannet en niverenn 495 eus an 13 a viz Mezheven 1914 ur pennad evit diskleriañ penaos e oa ret sevel e Breizh strolladoù nevez ken efedus hag ar "C'hevre gouezelek" en Iwerzhon :

"N'eus nemet ar "Gaelic League" a c'hallfemp kemer da skouer..."

Hogen ar peurrest eus ar pennad a zo mat da venegiñ penn-da-benn rak reiñ a ra a-benn ar fin ur c'heal resis a unan eus mennadoù pennañ ar stourmerion nevez a oa o klask diazezañ un unded bemak en Emsav. An talbenn anezhañ a zo "Ur gostezenn vreizhat" :

"A viskoazh ez eus bet ganet salverion ha n'o deus salvet netra, nag a-wechoù int o unan. Ne reont ket d'an Emsav a-raok ur gammed ~~uz~~ rack... Ar c'harakter breizhat enebour d'ar sentidigezh (3) a zo techet da dreiñ d'e du... Daoust ha tamall a ranker ar re gozh ha n'o deus ket gouezet en em glevet etrezo pe ar re yaouank nen eus ket fellet ganto mont da heul ar re gozh dizunanet ? "

- (1) Unan eus renerion emsavadeg Lun Fask 1916.
- (2) Ne ouzer ket piv eo ar Mab Riwall-se. Manteze Taldir e unan daoust ma hañval pismigat ar Gorseñd a-wechoù.
- (3) Hemañ a zo unan eus diskanoù Taldir.

Goude bezañ gwiriet eta ur wech ouzhpenn dizunvaniezh - diempradur, evel ma lavar darn hiziv en o yezh arnevez - an Emsav e kinnig "Mab Riwall" ivez kemer skouer war Iwerzhon diwar neuze, kentoc'h eget war Gembre, sevel ur gevredigezh war batrom ar "Gaelic League" hag unaniñ a-benn ar fin emsav sevenadurel hag emsav politikel. Hogen selacoump adarre ar skrivagner :

"Unan (1) en deus bet an ide da sevel ur gevredigezh hag a ve ledet war Vreizh-Izel a-bezh, ha diwezhatoc'h war Vreizh-Uhel dre unvaniezh gant "Strollad Broadel Breizh" ha dindan beli ar Gorsedd..."

Ar pal a oa, a-benn ar fin, hervez Mab Riwall bepred, krouñ skourroù eus ar gevredigezh e pep parrez diwar skouer ar "Comun Gaedhealach". Hag evit echuiñ e vrouded ar stourmerion d'al labour evel henn :

"Ret eo deomp lakaat se e penn ar vroadelourion: diskenn eus ar gambr war an hent bras... ar frouezhenn he deus ezhomm bras da azviñ..."

O vezañ ma voe embannet ar pennad-mañ ur miz dres a-raok ma tarzhas ar brezel ne c'heller ket gouzout hag-efñ en devoa an arnod-mañ da unvaniñ an Emsav dindan aotrouniezh speredel ar Gorsedd - pezh a laka da grediñ e oa Taldir kiriek dreist-holl d'an dezo-se - ur chañs bennak d'ober berzh. Gallus eo e vije bet kavet un englev etre Taldir ha S.B.B., ha diwezhatoc'h gant kevrennoù arall eus an Emsav "sevenadurel". Kement-se n'eo ket sur avat pa soñjer peseurt personelezh hiniennelour en devoa Taldir, evel m'en anzav e unan. Moarvat ne vije ket bet gouest da gas da wir mennad ar gevarzhe en devoa dissezet. A-benn ar fin kempennelour a-walc'h e oa dezo. K.B.I., ma varner da vihanañ diouzh an aozadur anezhañ evel m'en em ziskouez er pennad embannet diwar e benn sbarzh niverenn AR BOBL eus an 2 a viz Ebrel 1914 (gwir eo e c'hellje K.B.I. bezañ emdroet diwar levezon stourmerion all hogen n'hon eus merk ebet o reiñ da grediñ e vije set an traoù war an tu-se). Setu eta penaos e oa termenet palioù ar gevarzhe :

"Mennoc'h ar gerentiezh a zo peurober labour ar ar skolioù war bezh a sell deskadurezh ha skignadurezh ar brezhoneg ha bodañ Breizhiz endro da vanniell o yezh, merk o broadelezh..."

(1) Taldir emichañs

Kefridi ar stourmer e oa eta implijout ar yezh e unan, deskiñ lenn ha skrivañ anezhi, kelenn anezhi d' e vugale :
"Skignañ en e amezegezh al levrioù hag ar c'helouennoù brezhonek... Bezañ dre-holl ur Breizhad rik..."

reiñ anvioù Sent Vreizh evel anvioù badez d'e vugale, " skoliañ ar vugale war ar brezhoneg", lakaat skritelloù brezhonek war an tiez-kenwerzh (1). Ar pal e oa a-hend-all diazezañ ur "brank" e pep parrez gant ur rener hag un teñzorier (a oa anvet "eotr" ha "moereb", na petra, pa veze anv eus ur plac'h); ar brank a zlee en em vodañ ur wech ar miz. Divizet e oa bet pourezhañ d'an izili ur spilhem-arouez eus ar "gerentiezh" ha lakaat ar skodenn vloaziek da 6 real (2). Erfin, bez e tlee ar c'hendirvi en em vodañ pep bloaz en ur c'hendalc'h, pep brank o tileuriañ ur c'hannad d'ar c'hendalc'h-se.

Gwelout a reer eta e oa neuziet "kendirvi Breizh-Izel" evel ur gevarzhe glasel, fur ha demokratel ha tamm ebet dispac'hel; tonket e oa dezhi bepred "mirout" ar yezh war ar maez hepken e-touez ar gouerion ; ne oa ket anv ganto a adober anezhi yezh vroadel Vreizh ; raksell ebet war ziorreadur ar yezh, war ur c'helennerzh reoliek anezhi. Hogen adarre - kement-se n'eo ket souezhus pa ouzer e chome ar brezhoneg fraost a-walc'h d'ar c'houlz-se c'hoazh ; a-bon ma kroge Vallee ha Meven Mordiern (hag un nebeut re all disoñjet hiziv) da grouiñ gerioù o klotañ gant ar sevenadur arnevez. War ar marc'had e chome "Kendirvi Breizh Izel" : "sez kevredel" (3) ar gevarzhe a oa annezet e staelioù AR BOBL ha pep brank a oa pedet da gas o danevellskridoù da sez AR VRO.

Kement-se a ranked merkañ. Hogen kent klozañ, notomp evelato ar pezh a oa savus e mennadoù Taldir : hañvalout a ra bezañ merzet a-benn ar fin e oa muioc'h da dennañ diouzh skouer Emsav Iwerzhon eget diouzh hini Gembre ; ivez, klasket en deus Taldir troc'hañ da vat al liammoù o doa staget an Emsav betek

- (1) Seurt labour a zo bet kaset da benn e rannvro Wereg gant Mellac ha Loëiz Herrieu, ivez gant Erwan Berthou e Treger, en amzer "Ti Kaniri Vreizh".
- (2) War-dro 35 lur. Bez e oa ivez izili a enor a bae 20 real (100 lur).
- (3) Taldir a skrive "Azezenn gevredel".

- 15) Rener ar Brank a vezo anvet an Eontr, ar Renerez, ar Voereb. Izili a enor a vezo kemeret, en trok eus 20 real.
 - 16) Gallet e vezo kemerout izili distag, pell diouzh ar vro.
 - 17) Ur wech ar bloaz, etre ar Foenn hag an Eost, e vo ur c'hendalc'h bras en parrouz pe barrouz.
 - 18) Ar reolennoù a c'hallio bezañ cheñchet war c'houlenñ div drederenn.
 - 19) Ar reolennoù a vo diskleriet d'ar C'houarnamant.
-

Pennad 26

An Emsav hag an etrekeltiegezh
da zerc'hent ar brezel kentañ

Etre 1900 ha 1914 e oa emdroet un tamm bennak ar spered etrekeltiek e Breizh. Goude bezañ graet eus Kembre un eil mammvro - kounomp e skrive Taldir e kembraeg kerkoulz hag e brezhoneg - e oa deuet ar vrogarourion da dresiñ o selloù kentoc'h war-du Iwerzhon. Dedennet e oa bet evezh ar stourmerion gant berzh ar C'hevre gouezelek en Iwerzhon ha c'hoant o doa bet neuze emsaverion zo da gas da benn ul labour damheñvel ouzh hini ar C'hevre-se e Breizh. Hogen ret eo anzav e oa chomet o obererezh war ur bazenn a-is da hini Iwerzhoniz. Ne oa ket deuet ar Vrezhoneg a-benn zoken da sevel un aozadur unvan evel m'o doa graet Iwerzhoniz da vihanañ. Digenstag ha digemurzh e oa chomet "breuriezhoù" ar yezh e Breizh. War ar marc'had e oa chomet an obererezh-se enket da gornog ar vro tra ma oa ledet hini Iwerzhoniz da Iwerzhon penn-da-benn ha pergen d'ar rannbarzhioù saoznekaet. Erfin, dremm-weliet strizh e chome an Emsav e Breizh. Moarvat e poanied da zeskiñ istor Breizh d'ar vugale, e brezhoneg (kounomp "Hanes ar Vretoned" embannet gant Loeiz Herrieu) hogen ne glasked ket da vat digeriñ o daoulagad war arvezioù all, ur politikerezh broadel a-du gant ar yezh. Hag ar sioù-se a oa anatoc'h c'hoazh er skourr en doa Taldir klasket aozañ e kreiz Kernev.

Bezef pe vezef, sur eo e voe skoulmet darempredoù personel etre darn eus an Emsav e Breizh ha renerion ar C'hevre gouezelek en Iwerzhon (1). Per Mokaer, da skouer, a embannas pennadoù diwar-benn Breizh ebarzh kelaouenn ar C'hevre, "An claidhean soluis" renet gant Padraic Mac Piarais.

Ret eo lavarout e taoled kalz pled dre vras ouzh degouezh

(1) Diwar-benn ar C'hevre e unan lenn ar pennad am eus embannet war AL LIAMM, niverenn ; hervez levr Douglas Hyde.

Iwerzhon da zerc'hent ar brezel bed kentañ. D'ar c'houlz-se e oa bet mouezhiet al lezenn diwar-benn an "Home Rule" ; en Hanternoz avat e oa en em savet an "Orangourion" a-enep d'al lezenn-se ha krog e oa an trubuilh diwar neuze en Iwerzhon. Bep sizhun avat, er rummvan "Chroniques inter celtiques", war ar "Pays Breton", e veze moulet keleier a-zivout Iwerzhon : harzoù-labour 1913, ha 1914, diarbennoù an Orangourion a-enep d'an "Home Rule" h.a. Ar pennadoù-se a veze aozet peurvuiañ gant Radiguet, gant ur spered herrañ a-walc'h, ret eo lavarout : techet e oa ar skrivagner-mañ da ober eus ar "Prus" ur spontailh a glaske korvoiñ Emsav Iwerzhon koulz hag an "Orangourion" da stourm a-enep da Vro-Saoz ; lakaat a-rae ivez brozennoù amoret da redek diwar-benn gwall vennadoù an Alamanned e-keñver ar broioù keltiek ; rak ena e wela - hervez hengoun ar varzhelezh eus deroù ar c'hantved - en darempredoù etrekeltiek un tu da unvaniñ da vat Bro-C'hall gant Bro-Saoz. Notomp a-hend-all e veze stark bepred ar rummvan-se hag e kaved enni kelachoù a bep seurt, a-wechoù didalvez a-walc'h, evel hini marv ur c'helenner galleg a orin breizhat e Dulem h.a. Embannet e veze ivez doareoù eus al luskad etrekeltiek kozh eus deroù ar c'hantved renet gant Castletown hag a zreibstpade atav d'ar c'houlz-se hogen a oa dic'hizet ha diamzeriet a-benn neuze.

Seurt stlennadur, evel m'hon eus merket meur a wech, ne oa ket fall, dre ma tistroe speredoù Breizhiz diouzh ar bed gall evit o eeunañ war-du ur bed a zleje bezañ bet tostoc'h d'o istorelezh. Anzavomp koulskoude ez ae skrivagnerion zo eus ar "Pays Breton" pell a-walc'h war an hent-se hag e kouezhent a-wechoù en drocherezh rik o vrudañ stultemoù nay evel hini Spagn, broad keltiek egiz Bro-C'hall end-eeun ! An "impalaerelouriezh" lu-se a oa dres un azon eus an drocherezh-se. En niverenn 385 eus ar "Pays Breton", d'an 22 a viz Meurzh 1914 e oa anv eus ar "Grande Espagne" ha diogeliñ a raed hep c'hoarzhin : "L'Espagne est un pays celtique..." (en abeg da ... Geltiberia moarvat), ha war-lerc'h ez ouzhpenned kement-mañ :

"Et bien qu'elle ait sauvé l'honneur des Celtes dans les temps modernes en fondant ses colonies d'Amérique du Sud..."

Prest e oa eta poadred an etrekeltiegezh a-wechoù da embann n'eus forzh petra hep derc'hel kont ebet eus ar skiantvat (1). Arabat eo avat bezañ re griz : an Emsaverion gentañ a zizoloe ur Vreizh toc'hor ha prest da vervel ; moarvat o doa spi da saveteiñ ha da adsevel ar vroad toc'hor-se. Hogen - hag int boaz ouzh keal diogelus an impalaeriezh c'hall - o devoa poan da gustumiñ endro ouzh mennoz ur vroad vihan, dizifenn dre ma oa bihan end-eeun. Klask a raent eta herzel ouzh estrenvan o saviad politikel nevez dre empennañ evit Breizh un dreistframm bennak a vije bet galloudusoc'h c'hoazh - en o faltazi - eget Bro-C'hall hec'h unan.

Diwar an hevelep estrenvan a-hend-all e tevere ar youl da chom stag en ur stumm bennak ouzh al luskad rannvroelour gall e Bro-C'hall. Digeriñ a raed eta bannoù ar "Pays Breton" da skouer, d'ar rannvroelour Charles Brun a c'helle neuze displegañ e sorc'hennoù en niverenn 388 eus an 12 a viz Ebrel 1914 e-lec'h e oa bet embannet ar pennad "Le régionalisme et la beauté française"; er pennad-se e c'helled lenn an dilinennad-mañ : "Enfin, par delà l'orgueil de la terre et de la profession le régionalisme dicte l'orgueil de la Cité..." (1).

(1) Betek dibenn an eil Emsav e voe klevet kel eus ar Charles Brun-se.

A r s t o u r m s e v e n a d u r e l
h a g a n a r n o d d a z i o r r e n
a r y e z h e d i b e n n a r J a n E m s a v

Gwelet hon eus er pennadoù a-raok e oa bet kreizennet ar stourm evit ar yezh endro da "vBreuriezhoù ar brezhoneg" e rannvroioù Wereg (war-dro an Oriant ha Gwened), Treger ha Kernev-uhel. Moarvat ivez e voe kreizennet strivoù an oberourion endro d'an embregadennoù-mañ a vanas a-hend-all dizunvan, digenstag, dizurzhiat, daoust ma hete meur a vrogarour o c'henaozañ en un doare bennak. Setu, da vihanañ, pezh a felle da Y.B. Kalloc'h ha da Leon Palaux (1) ober pa c'ant e soñj sevel ur gevredigezh nevez a vije bet ratozhiet da bourchas ur skoazell aro'hant, levrioù ha dornlevrioù a bep seurt, da skourroù ar breuriezhoù-se. Anvet e oa houmañ ar brezhoneg-hev ha da vennañ he doa ivez "keleñn ha diorren ar yezh vrezhonek". Ar gevarzhe nevez-mañ a vije bet talvoudus tre da unvaniñ ar stourm evit ar yezh met siwazh ne c'hellas an diazezerion anezhi biskoazh lakaat anezhi en he flomm, harzet ha ma voent adarre gant ar brezel.

Ar re-mañ koulskoude - evel an darn-vuiañ eus ar re a zeuas da gemer perzh er stourm adal 1910 - a oa kalz taeroc'h eget o diaraogerion. Goulenñ groñs a raent pergen e va brezhonekaet an Emsav penn-da-benn. Tamall a rae Y.B. Kalloc'h da izili an Emsav en amzer-se plegañ da implijout ar galleg hep ezhomm ebet :

"Barzhed ha beleion a garan. Pet gwezh e c'hellhemp diviz etrezomp e brezhoneg ha ne reomp ket... Na paotred "Englev ar skrivagnerion" ? Naket! Galleg a gomzont... penaos e rit c'hwi eus ar vroadelourion-se

(1) Léon Palaux a oa mezeg. Bet e oa kenskoliad Kalloc'h e Keranna hogen hag eñ Kernevad e troas da vezañ gwerinelour tra ma chome Kalloc'h dehouad. Goude bezañ kemeret perzh da vat en Emsav betek 1914 e voe dalc'het gant an Alamaned en hanternoz Bro-C'hall. Goude ar brezel ne gemeras mui perzh er stourm. Savet en deus ur "Buhezskrid" eus Kalloc'h.

"a c'houlenn hag a gav dezho ez eo mat ar brezhoneg evit ar bobl hepken ? ... Lazherion ar brezhoneg..." (1)

K.B.B. a veze taget dreist-holl en amzer-se. Hogen UNVANIEZH ARVOR ne oa ket espermet evit keloù se ; ne gawe ket brasoc'h trugarez dirak stourmerion ar prantad-se. Dindan pluenn unan anezho e c'heller lenn e bloavezhad 1914 ar "Pays Breton" :

"Met UNVANIEZH ARVOR, a gav deomp, he deus heuliet an hevelep gwenodenn a fazi gant hini K.B.B. E-lec'h em lakaat da labourat evit ar yezh hepken, klasket he deus ad-sevel re a draoù kevret : arz, labour-douar, lennegezh c'hallek, brezhonek h.a. o defe gallet gortoz..."

Eveljust e oa bet anaozet stourmerion ar remziad kent gant an tamalloù-se. Loeiz Herriou, pergen, en doa rebechet ouzh "ar Gourener" (2), unan eus ar bismigerion yaouank, chom hep prizout en un doare reizh labour ar rummad kent. Setu dres e eilger en niverenn 385 eus an 22 a viz Meurzh 1914 :

"E lod da bep unan. K.B.B. hag U.A. n'o deus servijet da netra evit pezh a sell ouzh ar brezhoneg ? Ar Gourener, hervez a welan, a zo ag ar re yaouank-se ha na vennont a du erbet bout dleour d'ar re all ag ar pezh o deus...(3)"

An tãbut a savas neuze a ziskouez dreist-holl ne oa ket sklaer e spered ar stourmerion ar c'heal a "yezh vroadel" daoust ma oa implijet stank an droienn-se e ser ar brezhoneg. Atav e klasked diskouez ne oa ket tu da ober ingal gant ar brezhoneg, hep meizañ e ranked arverañ ar galleg bepred adal ma nac'hed ober bepred gant ar brezhoneg. Degas a raed arguzennoù toull a seurt-mañ :

"A-dra-sur, pa gomzhe razh Breizhiz ar brezhoneg... An hanter a Vreizh ne gomz ket brezhoneg ; hag ez eus a-hend-arall kalz a dud e Breizh-Izel ha ne anavont ket o yezh vroadel..."

(1) Ebarzh ar "Pays Breton". 1911. (2) Leon Palaux. (3) Da heul e kaved an displegadenn-mañ : "Memb horsoñjoù, hor soñjennoù - traoù hag a gredomp koulskoude bout kellidet en hor penn - a zo soñjoù, soñjennoù ar re arall ha ret e vehe monet betek deroù ar Bed evit kavout an Hini en deus soñjoù ha n'en deus bet biskoazh hini en e raok..."

Da gement-se e responte ar Gourener e oa dav, da gentañ, diskouez d'ar re all peseurt hent a oa da heuliañ :

"Lavarout a rit : an dud a zo a-du ganimp pe studiomp an arboellañ politik pe al labour-douar pe an ardoù(1) a zilezo hor c'hevredigezh mar sellomp ouzh ar yezh hepken. Ha sur eo kement-se ?"

Bezet pe vezet, anat e oa ivez ne c'heller mirout reolemm ar brezhoneg yezh labour boaz an Emsav hep bezañ diorreet ar yezh, da gentañ. Rak-se ivez e kaved ebarzh ar "Pays Breton", da skouer, pennadoù brezhonek - troet peurvuiañ diwar skrid prezegennoù Goblet gant ar Gourener - a vere testennoù liesseurt chomet dibleustr betek neuze en hor yezh, an armerzh dreist-holl(2) avat, da skouer pe ar gevredadouriezh. Krouet e voe adarre un toullad mat a c'herioù ha na chomjont ket er yezh en abeg d'an troc'h a c'hoarvezas etre ar c'hentañ hag an eil Emsav goude ar brezel kentañ. Setu a-hend-all un nebeut skouerioù :

"Kemmadur" evit "emroadur", "emluskerez" evit "karr-tan", "Kenamzeriel" evit "kempred, kevadeg h.a.", "giziel" evit "buhez", "divezel" "kevredel" er bomm-mañ : "Heulioù kevredel an arakaat arboellek", "ijinerrezh gwidiel" (an droienn-mañ a zo bet adkrouet goude bezañ bet ankouet e-pad 40 vloaz) ; "peurlonkañ" evit treiñ ar galleg "absorber" ; "dibarelezh" (adkrouet ivez war-lerc'h nouspet bloaz) ; "diskouerelezh" ; "usmennoz", "pennmennoz" evit treiñ "uhelvennad" ; "dirollerezh" evit treiñ "anvelouriezh", "anarkouriezh" ; "rannell" evit "savboent" (hemañ aprestet digant ar c'hembraeg.) Hep kontañ an adanvioù en "-adoc" a gaver ivez ebarzh barzhonegoù Kalloc'h evel "dibardonadoc", "dic'halladoc".

Menegiñ a reomp an honn c'herioù-mañ evit diskouez penaos pegen bresk e oa ar gevredigezh vrezhonek d'ar c'houlz-se daoust d'ar milion a vrezhonegerion a vihanik a veve neuze war vazioù Breizh-Izel peogwir n'eo ket bet gouest da legadifi frouezh he labour - pegen dister bennak e oa hemañ - d'ar remziad war-lerc'h. En em c'houlenn a c'heller zoken ha bez ez eus bet biskoazh neuze ur wir gevredigezh vrezhonek peogwir n'eus en em gavet stourmer ebet e 1918 evit kenderc'hel gant al labour boulo'het e kent ar brezel.

(1) "Arzoù". Ar ger-se a voe dilezet a-c'houdevezh pa glotas gant ar ger "ardoù" ("chistroù") gwenedek a zeuas tre er yezh unvan. (2) War a seblant ne oa ket emglev na kenurzh etre ar re a venne diorren ar yezh.

Peseurt abegoù resis reiñ d'an diskar-se ? Meneget hon eus unan : dilezidigezh an Emsav gant ar stourmerion a oa deuet dezhañ a-rack ar brezel. War a seblant, Vallee ha Meven Mordiern a zo bet ar re nemeto a gendalc'has da labourat da ziorren ar yezh goude 1918 ha da gemer perzh e labour GWALARN. E devoud e savas Vallee a-rack ha goude ar brezel kentañ nouspet ger skiantel ha kalvezel a gemeras lec'h ebarzh rolloù arbennik pe ebarzh ar "Geriadur bras gallek-brezhonek". Hogen peurvuiañ ne zeuas ket ar gerioù-se er-maez eus pajennoù ar geriadur pe ar rolloù arbennik-se ; ne voent implijet eta nemet dre zegouezh; n'eo ket sur zoken e voent arveret en un doare reizhiadek ebarzh levr ebet. Moarvat e c'heller ober anv eus ISTAR AR BED gant Meven Mordiern. Hogen ar ragistor a oa ur gennad strizh tre eus ar skiantoù. Diouzh un tu all, dreist-holl er penn-kentañ, e oa Roparz Hemon ul lennegour rik a gave dezhañ en deroù e oa tu da saveteiñ Breizh dre ar "gened" hepken. Dre vras eta ne voe aozadur-keleñ ebet a gemerje warnañ skignañ ar yezh arnevez skiantel-se. Dre se end-eeun e oa tonket da c'hwitañ an holl armodoù diorren ar yezh a voe kaset da benn - hep kemurzh ebet - e-pad ar c'hentañ hag an eil Emsav.

Pennad 28

Ar raktres da sevel
un talbenn broadel e dibenn
ar c'hentañ Emsav

D'ar mare ma tarzhas ar brezel bed kentañ e hañvale an Emsav kentañ bezañ kavet hent ar vroadelouriezh politikel. An holl luskadoù a oa diwanet abaoe ur pemzek vloaz bennak a oa disoc'het d'ar vroadelouriezh politikel-se. Houmañ zoken a glaske termeniñ he diazezoù - gant mui pe vui a verzh, a boell pe a furnez ; n'eo ket hepken er c'helaouennoù a studi evel BRITANIA pe vBREIZ DISHUAL hogen ebarzh kazetennoù evel ar PAYS BRETON (1). Ebarzh houmañ pergen e klasked ivez embann kelennadurezh an Emsav e brezhoneg. "Ha gallapl ha c'hoantapl eo un Emsav e Breizh keltiek?... Ha bevañ a zle, ha bevañ a c'hell ar yezh vrezhonek?... " a c'houl-emed en niverenn 380 eus ar 15 a viz C'hwevrer 1914 goude bezañ meneget komzoù Napoleon III diwar-benn an "nation bretonne".

Ar re a venne prederiañ e brezhoneg diwar-benn kudennoù politikel hor bro a oa mennet ivez da ziorren ar yezh hag a anzave a-hend-all n'he dije ket ar yezh diorreet-se kalz tra da welout gant an trefodajoù diwar ar maez ; ar brezhoneg lennegel hepken a c'helle pourchas ur benveg kefredel azas ouzh ezhommoù ur vroad vrezhon. "E gwirionez, n'eo ket gant yezh ar c'houer paour e c'hallfemp ober an dra-se..." Dija ivez e klasked ober istor an Emsav :

"Meur a abeg en deus labourer da sevel hon gouern," a skrived ebarzh an hevelep niverenn.
"Abegoù istoriel, abegoù douaroniel, padelezh ur Vreizh henvoaziel..."

Ar "pennmenoz"-se ("uhelvennad"), ar "spered gouennel"-se, ne oa ket kresket hepken e-touez un nebeut "usmenozielourion" (2)

(1) War a seblant e oa muioc'h a zanvez ebarzh ar PAYS BRETON eget ebarzh AR BOBL, da skouer.
(2) Tud uhelvennoziet, dezho un uhelvennad ; troet e oa ar ger gant "idealisted".

hogen en em ledañ a rae tamm ha tamm e-touez ar bobl a zeue da anavezout hec'h "hanez" (1) ; Istor Breizh hag Istor an Emsav ha n'eo nemet kendalc'h Istor Breizh (2). Neuze e tiskleried ne oa ket mat ar "rannvroelerezh" evit Breizh rak "ur vroad eo, nann ur rannvro..." Pezh a oa a-bouez diwar neuze e oa kregiñ da vat gant an ober ha brudañ uhelvenoz ar vroadelouriezh vrezhon.

"Al lederezh a zo retoc'h eget biskoazh. Da eo da bep unan labourat en e gornad, tizhout ene ar bobl ha dreist-holl gounit d'an Emsav bourc'hizion ar maeziou..." (3)

Bez e c'heller lavarout eta o devoa emsaverion zo, da vihanañ, ur c'heal bennak eus ar politikerezh o devoa da heuliañ evit treiñ pobl Vreizh a nebeudoù a-du gant ar memoz broadel. "Bourc'hizion ar maeziou", a-hend-all, a oa o unan o kaout a-walc'h a zeskadurezh evit gellout teurel evezh ouzh kudennoù Breizh. Ar werin ne c'helle bezañ prederiet d'ar mare-se nemet gant ar bara a oa da c'hounit.

Daoust ma harpent marteze ar Strollad broadel ha kevredigezhioù all ne roe ket kalz a stourmerion o fiziañs leun dezho. Ne gredent ket e cant efedus na gouest da dizhout ar yoc'h. Rak-se moarvat ez arnodas stourmerion zo, da zerc'hent ar brezel bed kentañ, ober o mad eus an dilennadegoù hollek a zlee kemer lec'h e deroù hañvezh 1914 evit krouiñ talbennoù breizhat ledan, da zedennañ an engroezioù breizhat a chome e kazel gant ar Strolladoù gall. Taldir en doa klasket labour e unan diouzh e du e Keraez, o kinnig ur program breizhat d'an danvez kannaded a c'houlenne mouezhioù an dilennerion e Kernev. E Rannvro Wereg avat, war ar Pays Breton, e c'heller heuliañ strivadennoù un nebeut brogarourion a felle dezho ivez tennañ o mad diouzh degouezh an dilennadegoù evit krouiñ un aozadur 'yoc'hel'. An dalc'h a oa avat lakaat ar Vrezhoned da gompren n'o doa netra da c'hortoz digant ar strolladoù gall. Lenn a raed ebarzh an niverenn 393 eus ar 25 a viz Mae 1914 :

(1) Kv. al levr istor Breizh embannet gant Dihunamb : "Hanes ar Vretoned". (2) Kv. An niverenn 383 eus an 8 a viz Meurzh 1914. (3) "Lederezh" a dalv bruderezh. Chomet eo ar ger en dro-lavar (levrioù) ledañ deskamant implijet gant M.M. Kv. ivez Roparz Hemon ebarzh "Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh".

"Sus à la politique des partis. Ceux qui militent pour la Bretagne; sa langue, sa personnalité, sont écoeurés par la veulerie des parlementaires à quelque parti qu'ils appartiennent..."

Ha klozañ a raed evel henn :

"A quand la formation du Parti breton qui encadrera la masse populaire et imposera ensuite ses doctrines... Formation d'un Parti National Breton pour combattre les partis politiques parisiens..."

Per Mocaer e unan a dage taer a-walc'h ar bolitikacherion c'hall en niverenn 394 d'an 31 a viz Mae 1914, dindan an talbenn "Lendemain d'élections"...

"Il y a quelque chose de pourri en France.. "

Hogen ne ginnige Per Mocaer evel kaderezh - ur c'haderezh a voe arveret nouspet gwech a-c'houdevezh - nemet kinnig d'an danvez kannaded ur program breizhat bennak. Moarvat e tlee an danvez kannad grataat difenn ar program-se e Paris dirak ar "G'ambr" hogen seurt promesa en enouestle ket kalz moarvat ar re he grae.

Neuze 'ta eo e oa diwanet keal ar "Parti National Breton". Fr. Jacob an hini eo en doa displeget evit ar wech kentañ war an niverenn 395 eus ar 7 a viz Mezheven petra oa amkanioù ar Strollad broadel-se. Evit lavarout ar wirionez, touellus a-walc'h e oa an talbenn "Parti National". Er raktres kinniget gant Fr. Jacob a-berzh ar Strollad-se ne gaver diabell-weled ebet ; kentoc'h armerzhel eget politikel e oa ar goulennoù a oa enskrivet ennañ ; seurt raktres a c'helli bezañ bet aozet gant ur CELMB bennak. Goude bezañ graet meneg eus ar yezh vrezhonek evelato e roed da amkan d'ar Strollad broadel nevez difenn an "ijinerzhioù bihan diwar ar maez, ar pesketaerezh, ar sisterezh, ar verdeadurezh-kenwerzh h.a." Netra souezhus e kement-se : kempennet e oa bet ar program-se gant Per Mokaer e unan hag an elfenn bolitikel splann nemeti anezhañ a oa un dagadenn a-enep d'ar strolladoù "parizian" :

"Le grand ennemi de la Bretagne, c'est Paris, doctrinaire politique..."

Ret eo notañ diouzhtu amañ amsteriegezh an arnod-mañ a oa penn-da-benn diouzh tro-spered Per Mokaer. Implijout a raed ar skritell "broadel" evit kuzhat ur varc'hadourezh ha n'he devoa netra boutin gant ar vroadelouriezh.

Rak-se ivez e savas stourmerion vrezhon all a-enep dezhañ, Y.B. Kalloc'h, da skouer, a asure ne oa ket tu da sevel ur Strollad breizhat ha na vije lec'hiet nag a gleiz nag a zehoù e "Kambr ar Gannaded" e Paris, ha na c'hellfe eta kacout levezon ebet enni. Goude bezañ diskleriet n'he doa Breizh netra da c'hedal diouzh un obererezh parlamantel e roe Y.B. Kalloc'h ar skouer-mañ :

"Mon Irlande n'a jamais rien obtenu par les moyens légaux. Toutes les concessions que le Saxon lui a faites vinrent à la suite de quelque mouvement comme le férianisme, le whitebyisme, le boycottage qui n'avaient rien de parlementaire..."

Mouezhiet eo bet an "Home Rule" er C'humunioù hogen daoust ha lakaet e vo da dalvezout ? a c'houlenne pelloc'h ha dreist-holl :

"Dans les circonstances actuelles, le "Home Rule est-il un bienfait pour l'Irlande?"

E-lec'h ar stourm parlamantel ha na oa nemet touell d'e soñj e kinnige Y.B. Kalloc'h ar stourm sevenadurel renet gant "Breuziezhoù" ar Brezhoneg (sekretour e oa-eñ eus hini Wened) :

"Il faut nous emparer des enfants," a skrive-eñ, ha goude bezañ merket e oa spi da sevel kevrennoù nevez eus ar Breuziezhoù-se e Leon

ha Kernev ez ouzhpenn e oa an Emsav prest da derriñ al lezenn diouzh ret :

"Dès que nous les aurons, dès que chaque Breuziezh sera devenu l'axe autour duquel, dans les quatre cantons, graviteront toutes les Ecoles vraiment bretonnes - peu nombreuses - nous aurons recours aux moyens extra légaux... grève des écoliers... grève des impôts... tout cela en poursuivant l'embrigadement des enfants... et des parents..."(1)

(1) Ar mennoz-se a oa bet eztaolet gant Y.B. Kalloc'h e brezhoneg ebarzh ar "Pays Breton" end-eeun.

Ha resizañ a rae Y.B. Kalloc'h penaos e oa dav, war e veno, evit ren ehvelep politikerezh, en em vataat eus ur framm start kenañ. Hag echuiñ a rae dre ober ur galv d'an holl vrogarourion da harpañ ar breuziezhoù eus o gwellañ.

An tabut diwar-benn ar stourm parlamantel hag ar stourm sevenadurel en doa kendalc'het e-pad ar miz war-lerc'h war niverennoù ar "Pays Breton" ; war hini 399, da skouer, en doa Per Mokaer respontet en un doare seven da Galloc'h. Anzav a rae ne oa ket an dilennadegoù ur pal diouto o unan hogen un tu evelato da zerc'hel ur c'hannad bennak (100 mouezh dilec'hiet a oa a-walc'h da lakaat ur c'hannad da goll e sez) ; ha marteze e vefe gallus lakaat ar c'hannad-se da damall "prusianouriezh" ar Stad c'hall e Breizh dirak Kambr ar Gannaded e Paris end-eeun. War ar poent-se, da vihanañ, e oa faziet P. Mokaer : ur wech dilennet e vez ur c'hannad muoc'h e chal da blijout d'ar muianiver en deus e zilennet eget d'ar bihanniver ha n'en deus graet nemet klokaat e vuianiver).

Taeroc'h e oa bet F. Jacob oc'h eilgeriañ da Y.B. Kalloc'h. E arguerzh avat ne oa ket gwall sklaer ha dreist-holl e chome e emzalc'h politikel ken amsteriek bepred. Bez e felle dezhañ ober eus ar "Parti National breton" war un dro

"ur parti protestataire et vengeur" hag ivez ur "parti de propagande régionaliste..."

hogen ret e oa gouzout e oa seurt dislavaroù stank en Emsav kentañ. An iskisañ, dres, e oa lenn dindan pluenn F. Jacob arroudoù all dispac'hus a-walc'h ; enno e hafvare ar skrivagner hetif e vefe heskinet ar Strollad broadel nevez-se :

"La persécution a été précieuse, pour l'Irlande et pour la Pologne ; elle le sera également pour nous..."

War ar marc'had e oa prest F. Jacob ivez da heuliañ ar politikerezh torr-lezenn erbedet gant Y.B. Kalloc'h ; mont a rae zoken betek dremmañ ouzh ar "paouez skoliañ", ar "paouez paeañ telloù" evel un tu da lakaat ar gouarnamant gall da blegañ.

Ne voe mui klevet kel eus Fr. Jacob nag eus e bParti National breton war-lerc'h ar brezel ; betek ar brezel a darzhas un nebeut sizhunioù war-lerc'h, da lavarout eo betek an niverenn 400 eus ar gazetenn, hini an 12 a viz Gouere 1914, e kendalc'has da zifenn ar c'heal anezhañ. Ar brezel, egiz ma verkemp, a skubas kuit aozadurioù fetisoc'h eget ar raktres koumoulek-se.

A-hend-all, daoust ha tu a oa da dizhout ar "yoc'h" d'ar c'houlz-se ? Evel ma skrive renerezh ar gelaouenn : ne oa nemet un dousennad a stourmerion oc'h en em gannañ dizehan war dachenn ar yezh. Evel ma oa an traoù eta e vije bet pouezusoc'h gounit pe stummañ un nebeut stourmerion eget krouiñ un gevredigezh tasmantel ouzhpenn.

T A O L E N N A N T R E D L E V R E N N

19. Emil Masson hag al luskad kleizour.....	p.213
20. Al luskad kleizour hag an Emsav a-rack ar brezel bed kentañ.....	p.249
21. Ar faezhadelouriezh vaorasat e dibenn an Emsav kentañ kentañ.....	p.257
22. Emdroadur ar mennozioù e Gwened goude 1910. Degouezh Yann-Ber Kalloc'h.....	p.263
23. BRITTIA hag ar goulzelouriezh a-zehoù en Emsav kentañ.....	p.271
24. BRIZH DISHUAL hag ar Strollad Broadel kentañ.....	p.285
25. An Emsav da zerc'hent ar brezel bed kentañ.KENDIRVI BRIZH-IZBL.....	p.297
26. An Emsav hag an etrekeltiegezh da zerc'hent ar brezel bed kentañ.....	p.309
27. Ar stourm sevenadurel hag an arnod da ziorren ar yezh e dibenn ar c'hentañ Emsav.....	p.313
28. Ar raktres da sevel un talbenn broadel e dibenn ar c'hentañ Emsav.....	p.317



